

# *BARR-HEOL*

*WAR FEIZ HA BREIZH*



NIV. 88

MIZ MEURZH 1976

PRIZ : 8 LUR

## TAOLENN

1 - <i>Klerg. Rakvarnioù</i> .....	1
2 - <i>Anjela Duval. Sahara</i> .....	4
3 - <i>Jef Philippe. Pedenn evit bezañ laouen</i> .....	5
<i>Pedenn evit deskiñ karout</i> .....	6
<i>Pedenn evit gouenn ur spered izel</i> .....	
<i>Pedenn evit deskiñ mervel</i> .....	
4 - <i>J. Seite. Lizher</i> .....	7
5 - <i>Klerg. Prosez war vuhez ha burzhudoù Sant Erwan</i> .....	7
6 - <i>E. Barzhig. Errata</i> .....	13
7 - <i>L. Andouard. Niav-he-Fenn-Aour</i> .....	13
8 - <i>L. Andouard. Ur Breizhad kalon-uhel, La Tour d'Auvergne</i> .....	14
9 - <i>L. Andouard. De Valera hag ar Gouezeleg</i> .....	17
10 - <i>Levrioù - J. Rossinyol. Le problème national Catalan</i> .....	17
<i>Camille Le Mercier d'Erme. Une armée de Chouans</i> <i>Imbourc'h</i> .....	
11 - <i>Soaz an Tieg. Keginerezh</i> .....	22
12 - <i>Benead. Eil goude-skrid diwar-benn an Ao. beleg Berto</i> .....	22
13 - <i>Breur Yann Fleury. Petra eo ur manac'h ?</i> .....	23
14 - <i>Klerg. J.Y. Eveillard. La voie romaine de Rennes à Carhaix</i> .....	25
15 - <i>Klerg. Den dall Rokamadour</i> .....	29
16 - <i>Klerg. An hini a son e gloc'h</i> .....	33
17 - <i>J. Konan. An Tremeniad</i> .....	35
18 - <i>G. Bruneau. Da vro kenkizioù an Amerikaned</i> .....	37
19 - <i>Klerg. Mesk-ha-mesk</i> .....	38
20 - <i>Ar Barzhig. An eostig hag ar Bugel</i> .....	40
21 - <i>Per ar Maenour. Eus an eil diskar-amzer d'aglie</i> .....	40
22 - <i>Emglev an Tiegezhioù : Ar yezhoù-pobl hag ar gwaskerezh-stad</i> .....	48
23 - <i>Klerg. Mont da Vro-Saoz gant un trañch</i> .....	50
24 - <i>Embannadurioù BARR-HEOL</i> .....	51
25 - <i>A. Duval ha Soazig Noblet. Itron Varia Vreizh</i> .....	52

Klerg

## Rakvarnioù

Ne deo ket ar ger «rakvarn» ur ger kozh e brezhoneg : tapet e oa bet gant Fañch Vallée diwar ar c'hembraeg, hag ar c'hembraeg e-unan a oa bet stummet moarvat diouzh al latin pe diwar ar saozneg (hag hemañ diwar al latin I). Ur ger berr hag aezet ez eo I Graet e vez alies «menoz, menozioù-treuz», «sofjoù-treuz» hag all, da ziskleriañ menozioù diazezet-mat er penn hag a ra deomp barn tud ha traoù hep kerner ar boan da sellout a-dost ha gwir eo ar pezh a soñjomp. Holl ez omp leun a rakvarnioù ; hogen, un dra vat ez eo klask o dispenn a-wechoù. Setu perak hon eus kemeret un toullad skouerioù.

E 1975 ez eus bet efvoret emsavadeg ar **Bonedoù Ruz**, hag embannet levrioù diwar-benn an afer-se : Loeiz XIV<sup>et</sup> aet bihan an arc'hant gantañ, hag o sammañ e sujidi -hag ar Vretoned da heul- a dalhoù ponner. Hag ar bobl o'n em sevel 300 vloaz 'zo, peogwir e c'hoarvezas an taol-se e 1675. Flastret e oa bet an dispac'h avat, ha krouget meur a hini. An liz, e-lec'h difenn kaoz ar werin, a chomas mut, war a sebiant, pe gentoc'h a yeas a-du gant Gouarnamant ar Rous, evel da skouer ar Jezuisted, hag en o fenn an hini brudetañ d'ar mare-se, e Breizh : an **Tad Maner** a genlabouras gant ar Frañsizien evit sioulaat ar speredoù, hag a glevas ouzh ar re kondaonet d'ar marv, d'o frientif da vont dirak Doue. Diaes ez eo dimp goude 300 vloaz gouzout ervat penaos e tremenas an traoù hag an abegoù don a luskas ar bobl da gemer an armoù ; diaes eo dimp dreist-holl gouzout penaos e selle tud an amzer-se ouzh an dispac'h, ha bubuik ez eo dimp kondaoniñ hemañ pe henhont gant un taol loa-bod.

Ma ! Anat eo, en deiz a hiziv, ez eus kasoni ha kasoni ruz e kalonoù Bretoned 'zo, Bretoned yaouank peurvuiañ, o vezañ m'he devoa an liz, an dud-a-liz, difennet an urzh diazezet : manket he devoa an liz d'he dever hag a oa mont a-du gant ar re wasket, hag harpañ kaoz an dud vihan. Gant hor speredoù kizidik-tre ouzh kudennoù ar Gevredigezh e kav dimp he devoa an

liz c'hwitet d'ober he dlead... M'he dije klasket stourm, penaos e vije bet Mont ? Ne oar den. Moarvat, e vije bet flastret pep eneber gant Loeiz XIV<sup>et</sup>. Kalonekoc'h e oa Hugunoded Bro-Gebenna eget tud-a-liz Breizh, d'an hevelep mare : met taget e oant en o feiz, hag ar Vretoned a oa taget en o madoù. Ur yenn a oa etre Reljion ha Kevredigezh. Ma vije bet taget pobl ar Vretoned, da vare an Tad Maner, en o feiz, evel ar Brotestanted, o devije stourmet ivez betek ar gwad.

Mar feil dimp bezañ reizh hag onest, gwelout an traoù en un doare objektivel da lavarout eo «dirakvarn», ez eo evel-se e tleomp gwelout an traoù, ha n'eo ket darc'hel da lavarout «An liz a vez dalc'hmat a-du gant ar re greñv, hag ar re binvidik ! An liz a vez diouzh hec'h amzer ha ker e koust an dra-se dezhi, gwir eo, a-wechoù.

A-wechoù (kuit da lavarout alies I) ez eo an dud-a-liz o-unan eo a ro da grediñ ez eo graet ar Feiz kristen evit gwaskañ ar bobl, kabestrañ frankiz an dud dre sevel klouedoù a bep tu. Setu ar pezh a zo en em gavet nevez 'zo end-eeun. E miz Genver 1976, d'ar 16, he deus Breuriazh-Veur ar Feiz Kristen embannet un diskleriadur war ar Seksologiezh. Evel ma ouzer ez eo deat kudennoù ar seksologiezh da vezañ kudennoù hag a c'heller komz diwar o fenn, kalz aesoc'h eget n'eus ket pell c'hoazh : filmoù, romantoù, kofnerañsoù, skinwel, sinema o deus digoret an hent war an tu-se. Studiet e vez ivez taget medisined, psikologourien, psikiatred kement a sell ouzh natur (1) an den. Gant buhazegezh an dud hag o doareoù-bevañ o vont war loskaat, ne vezer ket mui spontat o klevout komz eus traoù seurt-se. Setu eta m'he deus soñjet Breuriazh-Veur ar Feiz Kristen o oa poent degas da soñj d'ar gristenien eus al lazenn naturel o tifenn an darempredoù-gener (2-3) a-ziaevs d'ar briadelezh, o tifenn ivez ar masturbadur (4) hag o tiskleriañ ne deo ket an homofilezh (5) un dra dinnoz anezhi hec'h-unan. Ma ! Setu ur c'hardinal-arc'heskob, hini Pariz, o tiskle-

riañ ne oa ket dleet embann seurt diskleriadurioù hep goullenn ali an eskibien all, na dreist-holl skeiñ «diffennoù hag arabadoù» e ve-se d'an dud, e-lec'h diskouez tu pozitivel al Lezenn Naturel hag ar Gelennadurezh kristen. Hefivel a reas Prezidant Kofiferans eskibien Frañs, ar-c'heskob Marsilha I Ha daou pe dri devezh goude, e rankent en em zislavarout o-daou, ha diskleriañ edont a-du gant Kelennadurezh an Iliz. Ar pezh a c'heller da lavarout eo n'en devoe ket lennet hini ebet anezho an Diskleriadur, rak n'eo tamm ebet ur roll-difennoù hag arabadoù an hini ez eo, met ur studiadmenn leun a gizidigezh gant tud a anavez petra a lavar teologourien, medisined, psikologourien ha psikiatred. Un diell aozet gant gouiziegezh ha kalz a zoujañs evit an dud hag o c'houstiañs.

Evit bezañ diouzh ar c'hiz, evit tremen diouzh an dud, evit en em lipat outo ez eo techet an dud-a-liz da vont a-wechoù er-maez eus tachenn ar furnez hag ar poell. Tud komplekset, ha renet gant rakvarnioù : amañ rakvarnioù a-enep Roma I Seurt troioù a zo en em gavet, siwazh, meur a wech, a-hed istor an Iliz, ha petra 'soñj an dudigoù-gaezh eus a gement-se ? An Iliz a zo o waskañ an dud vihan hag o lakaat warno ur vantell-blom, pa ne deo ket barrek ar pennoù-bras anezhi da lavarout memes trâ I

Fazioù graet gant an Iliz ? Daoust ha ne domp ket testoù amañ Breizh a gement-se ? Santout a reer mui-ouzh-mui a zisfiz o sevel e-touez ar bobl a-enep an Iliz ; an holl gostezennoù politikel o tont a-du gant Breizh ; zoken ar gomunisted hag a zo bet keit all a-enep. Evit ar reoù yaouank ne deo an Iliz e Breizh nemet mitez ar Gouarnamant, hag an eskibien adprefed war dachenn ar Relijion, pa ne vezont anvet nemet gant asant ar Gouarnamant. Pa lavaromp ar re yaouank, e kav dimp e skoomp berr un tamm, gwiroc'h e vefe lavarout ez eo kredann Emsav dre vras.

Hogen, diouzh an tu all, daoust ha n'emañ ket pennoù an Iliz, e Breizh, gant o samm a rakvarnioù ? Hag oc'h adober ar fazi a damaller d'an Iliz bezañ graet, 300 vloaz'zo, da vare ar «Bonedoù Ruz» ? Evit an Urzhaz katolik, e Breizh, ez eo Breizh un anv brav, hec'h, leun a varzhoniezh o reit tu d'ober nijadennoù kaer er prezegennoù -ar pezh ne deo ket difennet, forzh penaos !- Ar pezh a vank ez eo un diskleriadur ofisiel a-berzh an Urzhaz

katolik war gudenn Vreizh ; ha mar ne ra ket a-barzh pell, e vo sur-mat tamallet kement-se d'an Iliz, ha kollet he devo an Iliz ur wech ouzhpenn, ur blegenn vat, pe, mar kavit iskis an dro-lavar-se, he devo c'hwitet war he zaol, pa oa ar c'houz hag an degouezh mat.

KLERG

#### NOTENNOU

- 1 - **Natur GG** : onien, hanvoud ; bed, bed krouet ; oberioù ar c'hoar' ; had, sper (semen). Klotañ a ra ar brezhoneg NATUR penn-da-benn gant al latin NATURA. Souezhusoc'h o zo c'hoazh : klotañ a ra ivez penn da-benn gant ar c'hembraeg ANIAN (gwel. GELRIADUR Y BRIFYSGOL pa. 130). Evel ma ouezer ne deo bev ar ger ANIEN brezhoneg nemet e rannyezh Gwened, skrivet agnén : agnén mab-den. Pa ne weler ar ger-se neblec'h ebet e skridoù beleien 'zo evit Per Gov ha Gwilhevig, ez eus tu da grediñ ez eus ivez ur ster «uzn» gwin ar ger agnén e-touez ar bobl e Bro-Wened.
- 2 - **Darempredoù-gener** : Unonlezh e-sell da grouiñ buhez ;
- 3 - **Gener, g** : Reizh-natur (saxus, latin). Ar gener eo a zisrann mab-den e daou rumm : pootred ha merc'hed. Ar ger «Rav» a gaver da skouer, en dro-lavar gwenedek : ur vaouez pa vez meñ (mezv). A goll an alc'houez og he rev, a seblant bezañ ur ger ijinet kaulz hag an dro-lavar hec'h-unon. Tennaet eo ar ger eus ar c'hembraeg Rhyw gg. N'eo ket meneg ar ger e GELRIADURIOU R. Hemon. Gregor a Rostron ne seblante anavezout nemet ar ger Seks skrivet gantañ Sex.
- 4 - **Masturbadur** (hervez al latin masturbatio : manus stuprum) : en em atzañ da skuilh e «natur» ; c'hoar' war an nozh (poblek). Gregor a Rostron n'en devoe ket kredet lakaat ar ger-se en e c'helriadur. Troioù-lavar all a zo, ha darn anezho a gawe en Oberoù Proesper Frau hag el levr-kazh «Amaourusted un Den kozh».
- 5 - «**Hemefllesh**» : amaourusted, darempredoù-gener a-rao daou zen eus an hevelad rumm, pootred peurliesañ. Tennaet eus daou c'her a-orin gresianek «Homas» (hefivel) ha «fllesha» (korontez).

#### EVID AR BREZHONEG

Keloouenn divyezhek (gollag ha brezhoneg)  
10 niv. ar bloaz  
Koumanant : 15,00 lur  
K.R.P. Evid ar Brezhoneg 10/86 X Roazhon

A. DUVAL

## SAHARA ?

P'eo razhet ar C'heuzioù  
Pa ne gan mui labous...

Evel un daofenn Fin ar Bed :

Ar blaenenn arblañ en dremmwel

Forzh kelanoù ramzel

O izili a-strew, o sev o tiverañ

Ar gwez-meur dibennet

O Drouklazh an Inosant !

Sebeliet mesk ha mesk

'n e lihsel drez ha spenn

Beziat e Bered-voutin an Hent don

Etre daou gleuz foeltret

Etre daou Sahara

Etre div Siberia

Tachenn ur brezel aner, Tachenn a vezh

Plaenenn diblaen ledet aze

Da furchal ruz an avel-foll

A c'hwezh eus ar C'hornog

A yud eus ar Gwalarn

A sut hag a droc'h evel an dir

Pa 'n em sil eus ar Biz

A suilh evel an tan

E deizioù gor an Hahv

Pa dro war-zu ar Su

Plaenenn simudet

Intañvez he laboused

Intañvez he louzaou-pare

Ha Bangor hec'h Ograou-meur

He bleuhv hag he trouezh gouez

Aberzh d'an doue Progrez ?

\*

Klozet a-dreñv un orjalenn-dredan

- En arvar o buhez -

Un tropell annoarezed

Skoell o lagad, o seloù spouronet

A glask en aner

Harzoù glas o domani kent

Bremañ noazh ha divent

Frieskter ha disheol ar gwez fav

Goudor ha gwasked ar c'heuzioù

Hag ar poull ma torrent a sec'hed ?

Leuniet eo a gefioù gwezh

Hag a fasseloù-mein fraihet.

An annoarezed a bennfoll

A suc'hell hag a veog

A skrap an douar gant fulor

A dro hag a zistro

En dro d'ar Varjan gozh

Mamm-you-gozh an tropell

Hag o mestrez en dachenn.

Furoc'h eo ar Vuoc'h'i kozh ?

Plegus d'an Tonkadur ?

Pe mantret he c'halon ?

Gourvezñ 'ra 'kreiz ar Park

He bugale vihan

A sell outi estonet holl

A ra'n dro dezhi ur c'helic'h

Hag a c'houvez d'o zro.

\*

Hag e talc'hont o Sened-Meur

\*

An Nehv 'intent o yezh

Hag a vez o droukra'hs

Droukrañs 'keñver an Den

Ken sot, ken nay ha ken emgar

Gant e holl skiantoù

Hep koustiañs 'bet mui

Hag e orgouilh divuzul.

Ha mallozh an tropell

'Voe galvet war an Den kriz

Hag e ardivinkoù diaoulek

Awenet gant Satan

Gouellet gant Vulkan

E tri mil den forniet Lusifer

Ma n'eo bet c'hoazh gouest d'e lazhañ

Gwad glan nep Inosant

Gwad al lazhaedegoù

Ar gwad a red e lazhdioù

Gwad pep tachenn-emgann

Ar gasoni hag ar Vezh

Gwad ruz an holl Vrezelioù

Gwad an Den ha gwad al loen

Ha sev glan ar Plant

Hag ar gwez drouklazhet...

\*

Rorate Caeli desuper

Et nubes pluant Justum ?

Traon an douar

3 a viz Kerzu 75



Jef PHILIPPE

# Barzhonegoù

## PEDENN EVIT BEZAN LAOUEN

Ma Doue,  
War gement tu e par ma sell  
E kan drant evnigoù an aer.

Hag ar rennezh, avat,  
N'o deus ket daspugnet yalc'hadoù eour,  
N'o deus ket karget solieroù 'c'hreun,  
N'o deus galloud ebet war renerzh ar  
Stadoù.

O, Doue al levez,ez,  
Ma deskit, paour ha laouen evel ho laboused,  
Ma vevin, distag ha mao, em faouentez.

Neuze,  
E-giz d'an aic'houeder lizhin e nijin,  
Splann ha skañv.  
(Ne ganin ket d'ho meulñ  
Gant mouezh raoulet an dudoù doaniet)

Hogen gant fringalennoù a garantez  
E savo d'ho prenestr ma son.

Evel hini ur barzh truilhennek  
Gouestlet d'e brñsez muiañ-karet.

## PEDENN EVIT DESKIN KAROUT

Ma Doue,  
Ha gwelet hoc'h eus anezho pa gerzhont gant o  
hent, pleged o fenn ganto, damglozet o  
daoulagad, o deouarn frabet war o godilli,  
gant aon da goll o gwennien ?

Ha pa dremen ur goantenn a blac'h  
Ne welont ket anezhi...

N'houlan ket bezah evelto.  
N'houlan ket klenkzh madoù e korn ar  
pres.

O deskit din toull ar wenodenn a gerzh etrazek  
ho karanetez.

Gant ar bed o c'houzañv,  
Gant an dud naonek, ar chas dornet,  
Gant dic'hoanag ar re zilezet, ar re  
o-unan,

Ma dorn ouzh dorn ar vamm dizimez,  
Ma skoaz ouzh skoaz an intañv,  
Kounnar da heul an den dilabour,  
Nerzh da heul an aozerien beoc'h,  
Ma eürusted o seniñ gant mousc'hoarzh  
ma bugel  
Ha dour sklaer drant ar stivell guzh.  
Bannoù an heol d'am zompañ,  
Kaouadoù glav d'am distanañ.

Hag e kavin plaenoc'h krapenn ar Golgota,  
Hag e kavin c'hwek ar gwinñgr,  
Hag e kavin e donder ma c'halon

douster un novezh Fask.

## PEDENN EVIT GOULENN UR SPERED IZEL

Ma Doue, roit din ur spered izel,  
Ma plegiñ war an daoulin dirak kroaz ho Mab  
karet,

Gant ma sammad pec'hedoù, c'hwil'oar,  
Ar re a vez graet bemdez  
Hep drougyoul na kounnar  
Evel traoù boutin,  
traoùigoù aozet hep fallentez,  
dre arvar,  
Evel pep taol morzhol war dachou ar  
Groaz,

Fentigelloù a vann ebet, met  
Hehvel ouzh an duen a sav er maged  
- Hag a garg ur siminal a huzil bloaz ha bloaz  
(Huzil, huzil ma ene-me)  
Poent bras eo din ma Doue  
Skarzhañ, dirasklañ ma siminal -  
Pa ne welan ket ken hoc'h heol o lugerniñ drant  
- Ken eo du, tost, ha mouget an dremmwel -

Ha ma daoulagad magedet  
A garfe gouelañ war c'houlzioù ho Mab,  
D'o distanañ. Ma Doue

Roit ur spered izel din.

## PEDENN EVIT DESKIN MERVEL

Koulz eo din anzav diouzhtu 'm eus aon,  
Ma Doue !

Setu ma wellt n'eo ket gwall greñv ar feiz  
ganin. C'hwil'oar a-walc'h, hañ ! Me 'zo  
bet savet war ar maez, ha ken alies  
em eus gwelet en douar en em rannañ,  
da lonkañ loened ha tud yac'h.

Gwelet 'm eus ar re dreut, ar re gof don,  
O vont d'ar preñved, paour, diarc'henn.  
Me ivez 'ranko mont  
'Vel ur soudard d'an tan  
- Aonik, ha laosk, ha flek -

Koulskoude o deus laret ho tiskibiñ din  
digemer dizoan hor c'hoar ar Marv,  
evel pa vefe ur glañvdiouerez o kas  
ac'hanon en-dro da di ma Zad.

'M'es-tra e vo ret deoc'h ma sikour  
Da zigemer ar goantenn-se...

Rak n'eo ket skubet ma zi,  
Na kannaet ma liñselioù.

## LIZHER 12/1/76

Gwiseni

Kenvroad ker

Mantret ha souezhet on bet un tammig  
o lenn war niverenn 87 eus **Barr-Heol**  
kement-mañ sinet F.K. «*Ur frealz eo bet eta  
evit ar selaouerien an oterenn Gouel an  
Hollsent-se goude disouezhenn c'hwerv  
hini Hanter-Eost.*

Karget betek-hen eus an oferennou-  
radio brezhonek, e karfen gouzout perak  
oferenn Hanter-Eost, e Kleder, bet lidet an  
enor da hanter-kant vloaz belegiaj an Ao.  
Fave, a zo bet un disouezhenn c'hwerv. Un  
tammig galleg a zo bet e-barzh abalamour  
d'an Aotrou'nEskob Barbu. War ar pezh  
am eus klevet avat eo bet plijet an  
oferenn-se d'ar re holl a oa war blas ha d'ar  
selaouerien. Gouzout a ran abaoe n'h'o  
avat, eo diaes ivez kontañ an holl.

bioavezh mat na ganeoc'h a wir galon.

Job Seite

Notenn ar renerzh : Trugarez d'an Ao.  
Seite da vezañ degaset e evezhiaden-

noù. Diaes eo deomp dezvarn ar gu-  
denn peogwir n'hor boa klevet nag an  
eil hag eben eus an div oferenn-se.  
Diaes eo «segaliñ» an holl, setu da viha  
nañ ar gentel da dennañ ac'hano !

Hervez reolen B.H. eo bet skrivet lizher  
an Ao. Seite er skritur implijet gant ar  
gelaouenn.

## Ar prosez war vuhez ha burzhadoù Sant Erwan

Kleryg

2

Pa gomzomp eus testoù Buhez Sant  
Erwan, e komzomp evel just, eus ar re o  
deus anavezet Dom Erwan da oa heu. An n  
deus bet darempredoù gantañ. Diwezha-  
toc'h, mar bez youl Doue, e vo komzet eus  
an eil rummad testoù : ar re o deus bet  
reaset ur c'hras bennak dre veritoù Dom  
Erwan goude e varv hag ar re o deus dre o  
diskleriadurioù kardarnaet testenñ ar re-mañ.

## 1 - YANN A GERC'HOZH

Kentañ test a voe galvet dirak lez ar  
Prosez war santelzh Dom Erwan, a voe  
Mestr YANN A GERC'HOZH. Un den a  
lezenn e oa hag a oa bet karget da zesk'n e  
lizherennoù da Erwan, pa oa er gêr, hag a  
yeas d'e heul da Bariz. E 1330 e oa 90 vloaz,  
ha peogwir en devoa heuliet Erwan n'eo ket  
hepken da Bariz, met ivez da Orleans hag  
hen gwelet a-dost e Landrevar. e oa hep  
mar abet an test gwellañ-paset, evel ma  
vez lavaret ; hag abalamour d'an darempre-  
doù dibar en devoa bet gant Dom Erwan,  
hag abalamour d'e oad ivez ez eo eñ a voe  
galvet dirak ar varnerien, a-raok hini all  
ebet. Techet e vefe an nen da skrivañ anv  
an den kozh enorus-se ; YANN AR  
GERGOZH, peogwir ez omp boaz da  
gievout Ar GERGOZH, met ur fazi e vefe,  
fazi ha n'eo ket bet graet gant ar  
sektourien latin, rak skrivet sklaer ez eo  
ganto : **Yohann<sup>us</sup> Villa Senis**. Mar bije  
bet anv mestr kentañ, Erwan : Yann (pe  
Yehann, mar kavet gwell) ar Gergozh, o dije  
bet skrivet **Yohannes Vetus Villae** (cf  
tes XCIX, paj. 168 : **Vetus Villa** in  
parrochia de Vimahec : Gwimeg). Ha  
**Vetus Villa** a dro ar Gozh-Kêr, evel ma tro  
7 **Villa Vetus** : ar Gêr-gozh. Ober a rae eta

ar sekretourien un diforc'h etre **Vetus Villa** pe **Villa Vetus** ha **Villa Senis**, da lavarout eo **Kêr** (ar) **C'hozh**, an **Den kozh** ; **Senis**, anat deoc'h, o vevañ amañ evit **Kozh**, **Kozhiad**, **Den Kozh**.

Da vare Sant Erwan ha da vare e brosez, e oa **Kerc'hozh**, e parrez Pleuvihan. Met bremañ amañ e parrez Kerborzh, parrez hag a oa gwechall un drev eus parrez Pleuvihan ; d'ar 17 a viz Mae 1856 e oa bet graet ur gomun ganti. E levr «Nomenclature des C.d.N.» ez eo skrivet anv ar gêriadenn **KERHOS**. N'hon eus ket ezhomm da lavarout ez eo testienn Yann a Gerc'hozh eus an dudiusañ, met e kement levr a zo skrivet diwar-benn Sant Erwan, e kaver ar pep gwellañ eus e gomzoù ha dre-se e lezomp kement-se a gostez.

## 2 - PLUEG SANT ERWAN

An daou dest war-lerc'h: Mestr Herve, sakrist Koatreven, hag Ivon Suet eus ar Roc'h-Derrian, a gomz eus «pulvinar» Sant Erwan, da lavarout eo eus «plueg» Sant Erwan, e bennwele, e c'houbenner. Herve (Arveus en destenn latin) a oa 55 bloaz da nebeutañ, ha Suet war-dro 70 vloaz hag heñañ en devoa graet anoudegezh gant Dom Erwan, e Pariz, 50 vloaz a oa, pa oant studierien ha bet e oa zoken o lojhañ ur bloavezh en hevelep kamb gantañ (paj. 15). Pa oa kouezhet person Louanneg klahv da varvel, e oa deuet da rentañ bizit dezhañ da Gervarzhin. Sant Erwan, gwisket ha tout, a oa astennet war e wele, plouz dindanañ, ha warnañ ur pallen -ur gourtepoentenn- dister ha du hag a dape hepken betek e baultrin. Gwelout a reas Ivon Suet plouz dindan benn Dom Erwan, ha sur e oa, emezañ, penaos, dindan ar plouz-se e oa evel plueg, ur maen, evel ma lavare kement hini a oa eno. An holl skrivagnerien a lavar e lakae Sant Erwan da blueg dindan e benn, ur maen pe ul levr bennak kalet evel ar Bibl. Lenn a rae St Erwan ar Bibl alies ha bep yaou e teue Jafrez a Sant Leon, person ar Roc'h; da Gervarzhin, da studiañ ar Bibl gantañ; ha n'eo ket souezhus e vefe bet kemeret Levr ar Skritur-Sakr da blueg gant Sant Erwan a-wechoù. Met ne ranke ket ober se alies, rak e berr-amzer e vefe bet distummet ha mastaret al levr, ha pa ouzer pegen priziüs e oa an dornskridoù d'ar mare-se n'eo ket alies, sur-mat, eo e lakae Dom Erwan ar Bibl dindan e benn.

Pa oa marvet, e oa bet hep mar ebet, serret gant evezh, ar maen a oa dindan e

benn santel. Evel kalz a draoù all ez eo bet dianket ar maen-se ha ne gomz den ebet, e-kêr ar prosez, diwar e benn, evel diwar-benn un dra bet dalc'het ha miret gant preder hag a oa tu bepred da welout... Traoù all koulskoude bet da Sant Erwan a gomz diwar o fenn, evel da skouer, e gougoul bet miret gant e c'hoar Katarina eus Hengoad... (gwel. Test CXXVI, paj. 192 sq).

Met bez'ez eus da vianañ ur maen hag a vez graet anezhañ : **Plueg Sant Erwan**, hag a c'heller gwelout e parrez-Tredraezh, e-lec'h ma oa bet person e-pad 7 vloaz bennak. War unan eus ar pilieroù a zo en antre bered Tredraezh emañ ar maen-se, ur maen distummet a-walc'h, bet plaenaet un tu anezhañ da gizellañ warnañ an arouezioù-mañ J + S, da lavarout eo Jezuz Salver gant ar groaz etre an daou c'her (pe e latin : Jesus + Salvator). Bremañ ec'h adkavimp istor gwele Sant Erwan, e Tredraezh, ha ne ouzomp ket ha stag eo istor ar maen-se anvet gant ar bobl : **PLUEG SANT ERWAN** ouzh istor ar «gwele», met un istor iskis ez eo istor ar blueg-se. Evel ur maen sorsset e oa evit ar bobl, pe mar kavet re griz an dro-lavar-se, ur maen burzhudus, rak kaer e veze cheñch plas dezhañ, e tistroe d'e lec'h kentañ, ken e oa en em gavet nec'het da daoubennet an dud gantañ, An Aotrou Durand hag a oa person Tredraezh d'ar c'houlz-se, pa glevas an istor-se, a reas degas ar maen d'ar vourc'h, hag e lavaras pedennoù (eme an dud !) da zisorsañ ar maen a oa sellet evel plueg Sant Erwan, dre ma harpe e benn warnañ pa veze o tiskuizhañ pe o kousket. Abaoe 75 vloaz n'en deus ket ar maen cheñchet plas.

E gwirionez, petra eo ar maen-se ? Pelec'h eo bet implijet gant Sant Erwan ? Diaes eo respont, evel m'eo diaes nac'h ivez e vije bet dindan e benn, ur wech bennak, pa glever testiennoù Herve, sakrist Koatreven, hag Ivon Suet diwar-benn ar maen a dalvez da bennwele da Zom Erwan p'edo o vervel : daou vaen dishañvel ez int, evel just. Met evel plueg avat, ne oant ket traoù blot nag aezet.

Met peogwir e komzomp eus «Plueg Sant Erwan», e Tredraezh, ne vo ket fall moarvat menegiñ ar vein a vez graet anezho : *skabell pe gador Sant Erwan*. Ar re-se a oa mein a dalvez da Sant Erwan da ober un diskuizh pa veze oc'h ober tro e

barrez pe o vont eus Louanneg da Gervarzhin pe da Landreger. Bez'eo unan e Mabiliez hag a seblant bezañ bet kollet, pa oa adgraet an hent en-dro d'ar gêriadenn-se ; met chom a ra evelkent e-kichen chapel Keralan ur maen hag a vez graet anezhañ «*Skabell Sant Erwan*», hag ar perc'henn a zo leun a zoujahañ hag a resped evitah. Kement ha lavarout e vefe mat ober ar renabl eus an holl vein a zo bet Sant Erwan aezet warne, hervez hengoun ar bobl...

## 3 - SANT ERWAN O KOUSKET E GWELE SANT TELO

Dister-tre e oa gwele Sant Erwan ha kalet-meurbet, gant un tapis lous ha du warnañ, ha pa'z ee da gousket, n'en em ziviske ket zoken, nemet e tilame e vantell hag e chefiche penn dezhi da dremen e zivc'har er mahchoù ; gant aon da dapout riv, moarvat, ha da chom hep kousket. Ha pa'z ee da welout familh ar Bestivianed, e-lec'h mont da gousket er gwele mat aozet evitah, e tremene an noz en e c'hourvez war blad ar gambr. Un drovezh ma oa aet da bardonah da Lokorn-Kernev, e tistroas dre Landelo, da bediñ Sant Telo (Sanctus Eleau, eme an destenn latin, paj. 22). E Landelo e oa ar laouer-vaen, pe gentoc'h un arched-vaen a lavared e oa gwele Sant Telo, a gouske ar Sant enni evit ober pinijenn. Dom Erwan hag an Aotrou Morvan ar Menez (1) a yeas da gousket er memes kambr, met e-kreiz an noz e klevas Morvan ur vouezh hag a lavaras dre deir gwech : «*Sav ! rak emañ ar sant o tiskuizhañ war ar maen !*». Pa gomahasas Morvan ar Menez tastomat en-dro dezhañ, ne voe ket evit santout Dom Erwan ; sevel a reas buan-ha-buan hag ez eas d'ar vered hag o tostaat ouzh ar maen kleuz e kavas Dom Erwan o kousket ennañ. Anat eo e oa aet Dom Erwan da gousket er maen-se dre zevosion evit Sant Telo, evit heuliañ e skouerioù, ha goulenn ar c'hras da zispenn e roudoù. Anat ivez, e plije da Zom Erwan pediñ Sant ar Vro : Sant Ronan e Lokorn, ha Sant Telo, e Landelo. Ur Breizhad mat e oa Sant Erwan...

Met bremañ, setu kredennoù iskis diwar-benn gizioù Sant Erwan hag a dosta ouzh istor e gousk e gwele Sant Telo. Krogomp, mar kirit, gant «gwele Sant lened», e parrez Pluned. Un hanter-lev bennak eus bourc'h Pluned, hanter-hent d'ar Barrderoù, ez eus ur chapel disterik a-walc'h, an enor da Sant lened, a leverer

ez eo bet eno o vevañ e kompagnunezh e c'hoar Santez Dunvel ; ur feunteun gaer a zo ; hag ur pennadig ac'hano, ouzh ur c'hleuz ez eus ur maen ledan a-walc'h, kleuz un tamm hag a lavar an dud e veze Sant lened ennañ o kousket. Ar maen-se a zo tost d'ur wazh-dour, ha nepell ac'hano ez eus bet kavet war-dro ar bloavezhioù 1936, podoù-pri gant esken-tud enno, hep kontañ ar binvioù-maen bet dizoloet er sitread-se. Kement ha lavarout deoc'h ez eo al lec'h-se ul lec'h eus ar c'hoshañ. Ar vugale diwezhat o vale, a veze degaset di, ha ruilhet war ar maen; gant ur bod-balan e veze foetet o fennadrevh noazh, da greñvaat o c'hroazell hag o divc'har ; vertuz ar maen ha vertuz ar balan war un dro, hervez kredenn ar bobl, ha neuze sikour meritoù Sant lened. Desketoc'h egedon a c'hello marteze gwelout peseurt liamm a c'hell bezañ etre an holl fedoù-se, hep ankouazh e vez pedet Sant lened evit ar c'houked... Ma l lavarout a ra an dud eo bet Sant Erwan e-unan o kousket e gwele Sant lened ! Daoust ma c'hell kement-se bezañ ur marvailh ijnet gant ar bobl, e kav deomp, e-skued istor Gwele Sant Telo, e veze diaes lavarout krak-ha-berr, ez eo ur marvailh rik ha netra ken. Dedennet gant e garantez evit Sant ar vro e c'hellje bezañ bet evit gwir, o'n em astenn e gwele-maen Sant lened. Unan a zaou : pe ez eo gwir ar pezh a gont an dud, pe ne deo ket ; mar ne deo ket, e tiskouez kement-se pebezh brud en devoa Sant Erwan e Bro-Dreger, ha ne oa ket diaes stagañ istor e vuhez pinijennus ouzh hini Sant lened.

Met bez'ez eus c'hoazh ur «gwele» all da Sant Erwan. E Tredraez an hini emañ ! War ribl ar mor, war ar beg-dour a zo a-us d'al Lev-Draezh, nepell eta diouzh Lomikael a-dal da Sant Efflam ! M'hoc'h eus c'hoant d'ober ur valeadenn vrav, evel ma oa dic'haset din ober, d'ar sadorn 27 a viz Kerzu, e kompagnunezh an Aotrou Jul Gros ha mignoned eus a Lannuon, n'hoc'h eus nemet hedañ an aod adalek dispart an div barrez Lomikael ha Tredraezh ha sevel neuze gant hent ar valtoerien ken n'en em gavot tra a-us d'ar mor ! Dirazoc'h : Plistin, Lokireg hag ar mor bras war an tu dehoù. Un nebeut kammedoù, ha e kavot evel ur stern-main : eno emañ *Gwele Sant Erwan*, hervez lavarioù ar bobl. Ul lec'h gwaskeket-mat ouzh avel an hanternoz, ha daoust ma tle bezañ kalet gant nebeut a leton warnañ, e c'hellot en em astenn da sellout ouzh an oabl, da

selaou ouzh kriadeg raouet al laboused-mor ha da hufvreal pe da brederiañ. Al lec'h-se a vez graet anezhañ «*Gwele Sant Erwan*». War zouar Tredraezh emañ e-lec'h ma oa bet ar Sant person. Ul lec'h dispar evit Dom Erwan da ziskuzhañ, da bediñ, da brederiañ ha da soñjal er prosezou en devije da varn e lez eskob Landreger. Barzhoniezh ar bobl hag he devosion d'ar sant he deus roet d'al lec'h-se an anv a Wele Sant Erwan, dre ma'z eo bet darempredet gantañ ha dre ma'z eo bet alies moarvat o tiskuzhañ eno.

#### 4 - TIEGEZH AR BESTIVIANED (Pistien) HA SANT ERWAN

Un tiegezh pinvidik e oa hini ar Bestivianed, hep mar ebet, p'o devoa manerioù e Pestivien, e Groñvel, hag e Gouezeg, en eskopti Kernev. An Itron Konstanza he devoa dibabet Dom Erwan evel tad-kofezour ha rener hec'h ene. Evel-se e tegouezhe gant Dom Erwan bezañ degemeret alies a-walc'h gant ar familh-se. Teir blac'h yaouank hag ur paotr yaouank e oa d'an nebeutañ en tiegezh-se : Yehann (pe Yann), ha neuze Teofania, Plezou ha Bienvenue. An Dimezell Teofania (Theophania) a zlee dimeziñ diwezhatoc'h da Alan Keraz eus Lomikael-an-Traezh, en eskopti Treger, hag hi eo an test XVI, er prosez (paj. 47). Hec'h anv a zo sklaer da gompren : anv Gouel an Epifaniezh an hini eo. Anv he c'hoar : Bienvenue a zo un anv gallek, skrivet evel-se e levr de la Borderie ; na dalvez ket ar boan klask hiroc'h. An eil eus ar merc'hed avat, a zo bet skrivet hec'h anv e n'ouzon ket pet stumm : Plaisance, da skouer. Skrivet eo Playso paj. 20. Er bajenn 90 e lenner *Domina Pleyso de Pestivian, relicta domini Henrici Caruel miles, etatis L (50) annorum vel circa* : an Itron PLEYSOU (eus) Pestivian, intañvez an Aotrou Herri Karuel, den nobl, 50 vloaz dezhi pe war-dro.

Ur vaouez all eus ar Prad, a gavomp paj. 181 o tougen an hevelep anv PLEYSOU, gwreg Gwilher eus Penn-an-Alez (de Venello).

Hervez E. Ernod (glos. Moyen-Breton, paj. 487) ez eo anv-se ar stumm gwregel eus an anv BLEAZ. Ne weler perak e vez skrivet PLAISANCE gant darn eus an istorourien, dreist-holl, pe lenner, paj. 361, e danevell ar Gardinalled : *Domina PLESOU (cf. XXXIV testis)*. Skrivañ neuze PLEZO, ha mat pell 'zo.

Darempredoù kalonek a oa eta etre Dom Erwan ha familh ar Bestivianed. An Itron Plezou a gomz gant teneridigezh ha doujañs vras eus skouerioù kaer Sant Erwan hag a lavar pebezh levenez o devez holl pa zeue d'o gwelout ha pebezh kerse a veze ganto pa'z ae kuit.

An Itron Konstanza -Konstanza Roskañvel (skrivet Roscravel paj. 47) a zalc'he a-wechoù war hec'h ostizid santel evit ma kemerje da vihanañ ur bannac'hig gwinn ; neuze e rae hemañ sin da lakaat un diveradenn a netra en e zour... Mat eo marteze menegiñ amañ e veze laou ouzh Dom Erwan dindan e roched-leun ken e vezent gwelet o redek war e zilhad, ken e save ar galon a-wechoù o welout an armead astuz-se o tiflukañ dre golier e roched. Ma l gwech ebet n'eo meneged an dra-se gant tud Pestivien, noblañsoù anezho ; ger ebet ganto diwar-benn ar berrioù sunerien ha skraberien-se. Dre zoujañs ouzh Sant Erwan, sur-mat, evel tud seven, met ivez, piv'oar ? dre na oa den ebet d'ar mare-se, barrek d'en em zifenn ouzh ar seurt poezonioù, zoken an dud a noblañs... Aotronez, itronezed, dimezelled..

Met lezomp ar gaoz divalav-se a-gostez... Daoust hag e talvez ar boan komz eus istor Koadpont ? Ne gredan ket, rak e pep levr ez eo kontet. Koadpont o nac'h selaou Sant Erwan o prezag en ur c'hroaz-hent bennak, amzer d'an Itron Konstanza d'ober un tamm diskiuzh ; ha Sant Erwan o stekiñ gantañ, sec'h ha dic'hras : «*Hennezh hag a zo o vont e-biou leun e gorf gant ardoù an diaoul, mar bije bet amañ veder ganfardez gant taboulin an diaoul, a vije chomet a-sav a galon vat, met n'en deus mennet chom da selaou komzoù Doue ; goulenn a ran digant Doue ma tamanto e gorf abalamour da se a-raok ma varvo* ». E-pad ur bloavezh e gwirionez e voe seizet hor C'hoadpont hag e rankas en em ouestiañ da Sant Erwan ha mont da bardonañ betek e vez (marv e oa Sant Erwan a-benn neuze) evit adkaout ar yec'hed. Met peseurt ger e gwirionez a implijas Dom Erwan evit ar merc'hed ? Laket hon eus «*kanfardez*» met gwashoc'h ger a c'helle bezañ, na petra 'ta. Anaout a rae er vat e Vibl ha dre-se ne gile ket moarvat dirak ar gerioù... nerzhus. Hag ar ger «*gast*» a dalveze c'hoazh kement ha *kiez* ! E latin e lenner «*quatuor galae*»...

#### 5 - KAN HA KOROLL, KAN-DISKAN E KERVARZHIN

Er bloaz 1292, unnek vloaz a-raok e varv, e roas Sant Erwan repu en e di d'un tiegezhad-tud o tonet eus kostez Kernev, met e gwirionez eus eskopti Gwened : eus Prizag. C'hwec'h a dud e oant : an tad, Riwallon, ar vamm Panthonada, ha neuze, pevar bugel, ur paotr anvet Jafrez, ar mab henañ moarvat, ha div verc'h a zo bet miret o anvioù deomp : AMISIA hag a oa 2 vloaz bennak, peogwir e oa 40 vloaz e 1330 ; grit ho kont ! He c'hoar avat a oa un tamm bihan koshoc'h, peogwir he devoa tremen 40 vloaz e 1330 ; ANQUOANTHA a veze graet anezhi. Ar paotr a veze graet GAUFRIDUS anezhañ, anv hag a weler alies e-touez testoù ar prosez, hag a ziskouez e veze roet stank d'ar baotred, en amzer-se ; ur stumm ez eo d'an anv GODEFRIDUS a zo a orin germanek hag a dalvez «*gwarezet gant Doue*» pe «*Peoc'h Doue*». Deuet eo an anv-se da vezañ, evel ma ouzer : Jafrez, Javrez, Javre, e brezhoneg. Ar paotrig-se yae alies da heul Sant Erwan pa'z ae da brezeg d'ar parrezioù diwar-dro Landreger. Evit ar bevare bugel, n'eus merzet anv ebet en dielloù... (3). Anv an hini yaouankañ AMICIA a zo anavezet bepred dindan ar stumm Amis, hag a seblant donet eus al latin *Amicus* = mignon. Ur plac'h vihan fri-kurius e oa anezhi. Ret 'eo klevout anezhi o kontañ ez ae da welout penaos e oa kont e kamb Sant Erwan, pa ne veze ket hemañ er gêr ! Kement a draoù iskis a glev e diwar e benn, ma ranke mont da welout gant he daoulagad hec'h-unan.

Eben, ANQUOANTHA he devoa un anv ha n'en deus ket roet nemeur a boan-benn d'ar skrivagnerien. Holl o deus komprenet AN GOANT, da lavarout eo ar Goantenn ; hep klask hiroc'h e c'heller degemer kement-se.

An tad, evel m'emaomp o paouez lavarout deoc'h a oa soner, muziker, hap aes eo deomp krediñ e oa un tammig disouris, un tammig barzh mar kirit, un troubadour. Degemer mat a gavas e Kervarzhin, e'n hag e familh evit meur a abeg moarvat, hag e-touez an abegoù, hemañ ' : dre ma oa muziker ha ma kave da Sant Erwan e lakfe ja ha levenez en e di.

Soñjit 'ta peseurt prososion truzuz a veze bermez e Kervarzhin : tud vac'hagnet tud klañv, tud paour, gant bugale d'o heul. Ha Dom Erwan ouzh o degemer a galon

vat, o pourchas boued dezho, ha zoken lojeiz da dremen an noz, tommder en ti-traoù pa rae tan ennañ ha me'oar ! Pa vez leun kof an dud e vezont sederoc'h hag e vezont techet da ankouazh o foan, ha mesk a vez gant ar vugale. Ha Sant Erwan eürus diouzh e du, o welout levenez o parañ war dal e ostizid oc'h ober sin da Riwallon hag hemañ o tapout krog en e rebed, en e grouz, en e viell, pe en e sac'h-binioù. Ha neuze... kan, muzik ha koroll. Pa veze brav an amzer, e veze ebatet er porzh pe war al leur. Pa veze yen an amzer, e oa tu evel-se da espern keuneud ha lann ; ha tomm d'an dud kaerzh da vont o...ousket gant bennozh ar Sant, goude ar gras...!

Ha bugale Riwallon o-unan ne vezent ket moarvat ar re ziwec'hañ o tripal hag o kana'n war al leur pe zoken en ti !

Ma l Ankouaet em eus o mamm. O mamm ? Sed aze un anv evit ur vaouez : PANTHONADA ! Kaout a reer ivez stummoù all d'hec'h anv evel PATHONADA ha PANTHOADA (paj. 99) : *Amicia filia Panthoade relicte Ryvellonis jocularis, de parrochia Plebis Prisiac* (Amicia, merc'h PANTHOADA intañvez Riwallon ar soner, eus parrez Plou-Prizag). Met hep mar ebet ez eo PANTHONADA ar stumm surañ.

An anv-se moarvat a dalvez un dra bennak da lavarout ! Ya ! met peseurt yezh eo ? Stumm ar gresianeg a zo gantañ, ne gav ket deoc'h ? Hag evit gwir dre ar gresianeg ez eo aes a-walc'h diskleriañ anezhañ ! PAN(TON) - AIODE - ADE - ADA da lavarout : a gan pep tra, tout-a-gan ! Ul lesanv dispar evit gwreg ur muziker, ne gav ket deoc'h ? Hogen al lesanv-se ne c'helle bezañ nemet un droidigezh ul lesanv e brezhoneg : tout-a-gan evel m'emaomp o paouez skrivañ pe holl-a-gan, pa'z eo diass gout moarvat abaoe peur emañ ar ger «*tout*» e brezhoneg !

Ur goudenn a zo avat ha ne c'hell bezañ diskoulmet nemet gant tud akuit war istor ar gresianeg e Skoilloù-Meur ar C'huzh-heol etre an XI<sup>vet</sup> ha XIV<sup>vet</sup> kantved : ar re-se a c'hell lavarout deomp ha barrek a-walc'h e oa ar jubennourien e 1330, war ar ar gresianeg, evit treiñ er yezh-se al lesanv a ginnigomp-holl-a-gan.

Un diaester all a zo c'hoazh, rak un eil PANTHONADA a zo en hol levr, pe da vihanañ un anv heñvelik ouzh hini gwreg Riwallon : PATHANODA (paj. 242). PANTHONADA (paj. 406), intañvez Olier

PENTIKLAOU (Oliveri Pinteclou). Taolennoù levr La Borderie ne seblantont ket bezañ gwall-sur eus an anv pa skrivont PATHONADA (paj. 509) ha PATHANODA (paj. 514) -evit PATHAOUADA, emezo.

An eil PANTHONADA (evel-se e tle bezañ lennet, a gav deomp) a oa 60 vloaz da vare ar prosez, da lavarout eo, e oa 20 vloaz yaouankoc'h eget eben (80 vloaz). N'eus tu ebet da c'houzout pe oant kerent pe ne oant ket -ar pezh a aeseafe an traoù evidomp, na petra 'ta l Lakomp moereb ha nizez, homañ o tapout lesanv he moereb l (4). Dimezet e oa da Olier PENTIKLAOU, anv da rannañ e daou : PENTI, evit Pentil(l) : stal, senailh; klæou : hernaj, blierimerezh. Diaes gout en un doare resis peseurt stal a zalc'he an Olier-se : kinkailherezh, alc'hwezerezh, blierimerezh ? Diaes ez eo degemer evit ar ger PENTIL troidigezh L. Fleuriot : stabulum, da lavarout eo : stal, kraou, en degouezh-mañ (5). Levr de la Borderie a ginnig lenn an daou anv PANTHOUADA ha PANTHOUADA. Ne c'hellomp ober netra gant ar stummoù-se. Hogen, ma ne venner ket gwelout gresianeg e PANTONADA e c'heller neuze klask e brezhoneg PANTO : NADA : Panto evit traoñienn ha neuze NADA evit NAD : kan, kanaouenn ha kompren neuze KAN-AN-DRAONIENN pe un dra bennak evel-se. Lesanv pe anv leun a varzhoniezh evit ur plac'h, na gav ket deoc'h ?

Met gant kement-se holl hon eus disoñjet KERVARZHIN... Ma l Gwreg Riwallon, hervez an testennoù fonnus roet ganti d'an oad a 80 vloaz diwar-benn buhez he madoberour, a oa ur vaouez teudek, leun a vuhez ivez, evel hec'h holl vugale, leun a anaoudegezh vat hag a zoujañs evit an den santel en devoas roet repu dezhi ha d'he ziegezh. Met gant an temz-spered evel-se ez eo sklaer e tenne *Holl-a-gan* d'he fried : mar ne oa ket muzikerezh, e oa mat-tre da ganañ ha pa stage he gwaz da c'hoari rebed, telenn, krouz, kerkenet e stage hi da ganañ «vit hadañ joa, pellaat glac'har». Kan ha koroll, Kan-ha-Diskan. Sant Erwan a c'helle chom eizh deiz klozet en e gambr, beuzet hec'h ene er bedenn, kollet e Doue, met sellit ouzh ar minc'hoarzh evurus o parañ war e vuzelloù o welout al laouelen, an druilheien o hejañ o fillhoù, evel ma vez lavaret, kavet ganto e-kreiz o mizer, e-pad ur pennadig, ar joa-bevañ, Sant Erwan a oa graet ganti finañ danvez a c'hell Regevezh Doue

implijañ d'ober un den hag ur sant. Setu perak en devoas graet ar seurt degemer kalonek da diegezh Riwallon, ar soner.

(da genderc'hel)

#### NOTENNOU

- 1 - *Mauritius de Monte, en destenn.*
- 2 - *Ne gomzomp ket eus gwele Sant Erwan, e Kervarzhin, pe e Louaneg ; ar re-se a zo kallet pell hag amzer'zo an naoutur anezha ; phevdennet ha kouezet e poult, hep mar ebet. Ar gwele hag a lavared e oa gwele kozh ar Sant, e Kervarzhin a oa bet devet a-unan gant an ti-menoj e-kerz un tan-gwall, ne oa ket gwele Sant Erwan.*
- 3 - *Evit ar pevare bugel, e kaver an anv a JABRETUS bet abegat gant de La Borderie. Hogen da neb a sell pizh ez eo an anv-se ur vrizh-troidigezh latine koet eus JAVREZ (Gaultridus) anv ar mab hemañ.*
- 4 - *Ur verc'h dezhi a c'helle bezañ zoken, nemet e vefe bet un tamm brav a oad etrezi hag he c'hoor yaouankañ. Amis : 19 vloaz. Ur respont all : mar-teze, e oa boazetoc'h an anv-se Pantonada, en amzer-se, eget na softjomp.*
- 5 - *cf L. Fleuriot, Dict Glas Vx Breton paj. 109 : clev ha Pentil moch paj. 284 : kraou-moc'h. E-lec'h Pinteclou e lennomp Pentil(l)clou. Lesanv ur marc'hadour-hernaj ne vefe ken, tapet gantañ dilouzh e vicher, tra eus ar boutinañ e pep lec'h, ha dreist-holl e Breizh.*

#### AL LIAMM AL LIAMM

DA RAKPRENAN BETEK 15 A VIZ EBREL 1976

F. Kervella

YEZHADUR BRAS

AR BREZHONEG

503 pajenn adwelet gant an oberour

Rakpren : 38 lur hep mizioù e-lec'h 50,00 lur

UL LEVR A-BOUEZ BRAS

Hastit buan e rakprenan

#### AL LIAMM AL LIAMM

DA RAKPRENAN BETEK AR LAN A VIZ EBREL

Tangi Malmanche

AR BAGANIZ

Pezh-c'hoari

War baper boutin : 20 lur franko (e-lec'h 27 lur)

War ingres : 25 lur franko (e-lec'h 32 lur)

Mlle QUEILLE, 47, rue N. Dame - GUINGAMP  
C.C.P. 1136 82 Rennes

#### ERRATA

Evel ma wel a-walc'h lennarien BARR-HEOL, kaer a zo diwall, e chom ur bern vioù-koukou e pep niverenn. Setu amañ ar re washañ chomet e pennad E. Barzig : «GWECHALL ER VILA» (B.M. 87).

Lenn e pep lec'h : Gwemmell ha neuze ar Wommell

paj. 4, tost d'an traoù : ar raton-flar, e lemas, en doe (e-lec'h en doa).

paj. 4 (Ma c'hanetennoù) : kas 'n Olier (e-lec'h sa-chañ).

paj. 6, lin. 6 : astenn e zorn.

id (ar c'hovall) : un deiz (e.l. en deiz).

paj. 7 : paour-kaezh

id : na dit ket en an'Doue.

paj. 8 : Me ne zebrit ket

id : Selaou 'ta (e-lec'h selaouit 'ta)

paj. 9 (Ar'ched Loutig Kocha) : fellout a roe d'en evarien.

paj. 10 : klenkit ho ribot

id : ar ruped-se (e-lec'h resped-se)

? (Ar spoelserien) : lin. 48 : koac'h r goukoug.

paj. 11, lin 11 : Sant Renaod.

id, lin. 32 : amzer da dommañ

id, lin. 94 : Jañg Varod

paj. 12, lin. 8 : Sapre

id (Pilhaouer), lin. 68 : na gomprene ket

id, lin. 93 : penn-poazh

paj. 13, lin. 4 : plijus e oa da glevat

ROLL-GERIOU :

ambreilhon (e-lec'h abreilhon)

paludenn : toenn

perier : penn-a-dreñv, revr !

## Niav-he-fenn-aour

Un deiz m'edo *Finn* Mab Kouvel hag ar Fianned o chasael war ribl kaer lenn Léin e verzjont o tont daveto ar gaerañ plac'h ganet eus ur vaouez o defe daoulagad ur gwaz gwelet biskoazh. Edo war ur marc'h moan gwenn-holl hag he fennad-blev kaer, a-liv gant an aour, a oa o vont gant an avel war he lerc'h. Hag hi o tont eus ar c'hornog, da darzh an deiz, heñvel e oa ar vaouez kenedus-se ouzh an heol p'emañ o paouez sevel. Souezhet ha dudiet e voe ar Fianned ouzh he gwelout.

Lakaat a reas he marc'h da chom a-sav dirak-ar chaseourien.

— «O *Finn* !» emez, «me eo *Niav-He-Fenn-Aour*. Va zad eo a zo roue war *Vro ar Yaouankiz*, ur vro pell diouzh *Iwerzhon* eo ma vez an *hañv enni bepred*».

— «*M'emaout o klask ur bagad brezelourien da zifenn da vro*», emez *Finn*, «*ne c'hellfes ket dont en ul lec'h gwelloc'h rak m'eus gwaz ebet, e-touez ar Fianned, na vije prest d'az skoazellañ, o plac'h he blev-aour*».

— «*Da glask un den nemetken eo em eus kuitaet va bro*», emez, «*Neket, avat, evit stourm emañ ouzh hen klask, evit reiñ dezhañ karantez ar galon a zo em c'hreiz, ne lavaran ket, ha ne din ket kuit heptañ*».

Sellout a reas tro-dro ouzh ar Fianned. Edo pep hini anezho war-c'hed e vije-ññ a c'hoantafe.

— «O *FINN*» emez ar plac'h, «*Oisin, da vab dit-te eo an hini am eus c'hoant da gaout da bried*».

Kalon *Finn* a vo leun a c'hlaec'har o klevout he c'homzoù. Gouzout a ouie, ma'z afe kuit e vab ganti da *Vro ar Yaouankiz*, n'hen gwelle mui biken.

*Oisin*, avat, a voe laouen-bras. Dudi en doa o sellout ouzh plac'h Bro *Vurzhudus ar Yaouankiz*. Kemer a reas he dom en ur lavarout dezhi e vefe laouen o vont ganti.

Kimiadiñ a reas diouzh *Finn* hag ar Fianned. Sevel a reas-ññ war 'allier ar marc'h moan gwenn-holl a yeas kuit ken buan hag an avel, gant *Niav-He-Fenn-Aour* Ar mor bras, zoken, ne voe ket un harz outo rak ez eas ar marc'h moan a-zioc'h an tonnoù kreff, evel ur gouelen.

Tizhout a rejont Bro ar *Yaouankiz* a-benn ar fin. Un degemer eus ar gaer a voe graet dezhi, ha gouel an eured a badas tri devezh ha tri nozvezh.

Bevañ a reas *Oisin* Mab *Finn* tri c'hiant vloaz gant *Niav-He-Fenn-Aour* hep ma vije doare dezhañ mont war-goshaat e-kelt-se.

Tennet eus «*Eachtral Móra ó n-ál stair*» (Darvoudoù brasañ hon Istor) gant Padraic Ó Conaire. Lakaet e brezhoneg a-zivour an *Iwerzhoneg* gant L. Andouard

#### NOTENNIG DIWAR-BENN AR FIANNED

*FINN* a oa anezhañ ur seurt roue en *Iwerzhon* nemet n'edo ket o ren war ul lod eus ar vro met war ur bagad poadred kadern a zo anezha war un dia brazelourien dispart he chaseourien ompart. Hag abalamour d'o fuzhioù-mat he d'o oberoù-kaer e teujont da vezañ brudet er vro tro-dro hag e leuas do vezañ ker bras o levezon ma klaskas roue-mañ-veur *Iwerzhon* hag en o zouez *Kornak* o c'has da get hag, a-harvez, e teujont a-benn d'en ober rak ne voe



eus ar Fianned nemet e-pad un tammig ouzhpenn ur c'hantved, eus 174 (emgann Crauche) betek 283.

Evel ma skriv J. Dottin (L'épopée Celtique, p. 9) : «Bez'e oa anezho ur seurt marc'hegielz diazezet war an healded, ar vrakusted hag ar galonegezh. Ne vezed degemeret enni nemet goude bezañ tremenet arnodennou diaes».

Ar Fianned a zo ken brudet-all e Bro-Alba hag en Iwerzhon. Er mojennoù diwar o fenn, bet miret er vro-se eo e kavas Mac Pherson danvez ar barzhonegoù a embannas, hag o devoe ken bras levezon war oberoù ar romantelourien. E horoz pennañ, Ossian, n'eo anezhañ nemet Oisín, mab da Fingol, hemañ o vezañ Finn e-unan.

Derc'hel a ra ar Fianned da awenañ Iwerzhoniz. N'eus nemet kaout sañt eus Kevredigezh kuzh ar Fianned a stourm ken kalonek ouzh Breizh-Veur e-pad an XIX<sup>vet</sup> kantved, ha, tostoc'h ouzomp hag hiziv c'hoazh, eus ar postezenn bolitikel bet savet gant De Valero dindan an anv «Fiinne Fall» a zo da lakaat kenver-ha-kenver gant «Inis Fáil» (Inisfall) e saozneg), unan eus anvioù niverus Iwerzhon.

Penaos na vije ket awenet ar skrivagnerien hag ar varzhad gant kurioù ar Fianned ? Bet int bet-hog un tammig barzhoneg a vo kavet amañ dindan a vo a-walc'h evit hen diskouez. Kille (Coalite) a zo meneg anezhañ ennañ a vez kavet alies, en henvoiennoù, e kompagnonezh Finn hag e vob Oisín. Amañ e vo kavet o-gevret gant Sant Padrig. Hervez donevelloù zo, e kement lec'h ma'z eus ar Sant, a oa Kille o-gevret gantañ hag eñ o trespwell marvailhoù dezhañ a zo kavet en «Agallamh na Seandraohu» (Diviz ar Gachn).

### TRI FERZH-MAT AR FIANNED

Padrig karet ar Ouezeled  
Oc'h aters, un deiz, ar gour louet,  
Kille Ab Ronan, ar marvailher,  
En Iwerzhon, gwechall, an Enez c'hlas.

«Desrevell dimp, paotr flour e vouezh,  
Petra ho kasas betek 'n tiemelezh ?  
Petra ho miras dibec'hed  
Keit ha ma vevas ar Fianned».

«Tri ferzh-mat hor c'hreifvaas»,  
'Respontas Kille 'r gour sperdek,  
«Hor c'haron c'hlan, hor c'horf nerzhak  
Hag ober bepred hervez hor ger».

Troet a-ziv ar skrid Iwerzhonek  
a gaver el levrig «*Tir an Oir*», p. 41.

Tiemelezh, war skouer «rouzelazh», a glotte gont  
«Hanes», «Higheanas», a-ziv ar «Higheanas», e  
saozneg landford, lord.

## Ur Breizhad kalon-uhel : La Tour d'Auvergne

Strafuihet on bet, p'edon yaouank,  
gant anv *La Tour d'Auvergne*. Lennet em  
boa, war ul levr bennak e oa ginidik a  
Geraez, e-kreizig-kreiz Breizh-Izel, e oa  
brezhoneger ha zoken brezhonegour hag  
en doa kemeret perzh e brezelioù an  
Dispac'h Bras, bepred gantañ ur yezhadur  
brezhonek en e c'hodell. Ne gomprenen  
ket, neuze, penaos e c'helle ur Breizhad  
penn-kil-ha-troad eveltañ dougen un anv  
ken gall, ha, war un dro, ken skeudennus  
hag e hini (1). Abaoe va oad krenn em eus  
lennet un bern bras a levrioù nemet hini  
ebet gouestlet d'hor c'henvroad brudet  
ken ez eo chomet diskoulm ar gudenn em  
spered pell amzer. N'eo nemet er bloave-  
zhioù-mañ diwezhañ hag a-drugarez d'ul  
levr graet a bennadoù distag, skrivet gant  
an istorour gall G. Lenotre em eus desket  
a-benn ar fin penaos eo deuet *Teofil Malo  
Corret* da vezañ *La Tour d'Auvergne*.

A-raok an Dispac'h Bras, e veve, en e  
brinselezh Sedan, er broioù krec'h, un den  
uhel eus an noblañs. Godefroi de la Tour  
d'Auvergne, priñs Turenne ha duk Bouillon  
a oa gwall-nec'het rak n'en devoa her ebet  
dellezek eus ul lignez ken uhel hag e hini.  
Dimezet e oa gant priñsez Loren a oa dek  
vloaz warnañ hag he doa roet dezhañ pevar  
a vugale. Tri anezho, avat a oa marv hag ar  
pevara, siwazh dezho, a oa moñs e zivesker  
hag, ouzhpenn, gros e spered. P'edo an  
duk o klask diluziañ ar gudenn diaes-se,  
setu m'en em gavas gant *T.M. Corret*.  
Hemañ a oa 36 vloaz neuze hag e oa  
letanant e rejimant Angoumois.

Er bloaz 1779 e oa.

Penaos e oa deuet ar bilen a oa *Corret*  
da vezañ ofiser e servij ar roue peogwir ne  
veze kavet dellezek eus ar garg-se nemet an  
dud jantil ? Hervez G. Lenotre, pevar

brizh-denjentil breizhat a oa en em gavet  
evit testenlekaat e oa *Teofil Malo Corret*,  
mab d'ur senechal eus Keraez, un den eus  
an noblañs. A-hend-all, daoust ha ne oa ket  
holl Gorreded Vreizh diskennidi d'ur mab a  
oa bet ganet da Herri de la Tour  
d'Auvergne ha d'ur plac'h-a-gambur en e  
servij 200 vloaz a-raok. Sed da nebeutañ,  
pezh a blijje da vamm *Teofil Malo* brudah,  
hag hi, hec'h-uan, ganet a-ziv ar Salaün  
bennak.

Gwellañ tra hon eus d'ober, eme  
Lenotre, eo kredañ e seblantas d'an duk e  
oa dellezek *T.M. Corret* hag eñ ur paotr  
dizimez, kaer ha kalonek, da gemer lec'h ar  
mab moñs e zivesker en doa diskouezet,  
ouzhpenn, ne c'helle ket suraat amzer-da-  
zont e lignez.

Setu ma vo aotreet *Corret* da zougen  
hiviziken anv *La Tour d'Auvergne* hag  
a-ziv ar neuze e vo graet brav d'hor  
c'henvroad gant an holl ha zoken gant e  
genofiserien a wele ennañ koronal da zont  
ar rejimant Bouillon-Troadegezh.

Ken uhel a spered evat, e oa hor  
c'henvroad ne fellas ket dezhañ sevel er  
c'hargoù evel-se hep bezañ diskouezet  
a-raok, e oa dellezek anezho hag e  
c'houlennas, evit-se, mont d'ar brezel  
e-lec'h ma tiskouezas e dalvoudegezh.

Un dra iskis a c'hoarvezas neuze. Ur  
wech m'edo e Keraez, e permission, kredabl,  
ez en em gavas gant un ofiser saoz a oa  
prizoniet eno. Hemañ, a orin gall, hervez, a  
oa Fulup D'auvergne e anv. Kemennet e voe  
kement-se da zuk Bouillon. Hemañ, hag a  
oa un den froudennus anezhañ, a voe ken  
plijet gant ar Saoz, p'hen gwelas, «*ma  
kasas dezhañ e dit a briñs, e vedoù hag e  
holl wirioù*». Ar Saoz, dirak ur c'hinnig ken  
sebezus ne chomas etre daou venoz nemet  
nemeur. Degemer a reas ar fortun a  
ginniget dezhañ hag «*e miz Gwengolo  
1786, e teue da vezañ ezel eus tiegezh duk  
Bouillon a gemere anezhañ da vab*». *Teofil  
Malo* diberc'hannet, a viras, memes tra, anv  
*La Tour d'Auvergne* a ranke reiñ ul luf  
nevez dezhañ, evel ma oar an holl.

Komzet em eus, meur a wech,  
uheloc'h, eus kadamded hor c'henvroad a  
oa ken anavezet ma voe anvet ez ofisiel  
«*kentañ greunadour ar Republik*» peogwir  
e nac'he ar c'hargoù uhelañ a ginniget  
dezhañ. Desket am eus gant Lenotre en  
doa hor c'henvroad all, ar skrivagner  
Charlez ar Govig, skrivet ul levr diwar e  
benn hag en doa graet e vad evit-se eus an  
holl baperioù en doa *Corret* lezet war e  
lerc'h. Siwazh Doue, n'am eus ket lennet  
anezhañ nemet em eus kavet, e-touez an  
nebeut levrioù lezet gant va moarab, a voe  
skolaerezh en he buhez, ul levr lennadennou  
savet evit klasoù krenn ar skolioù izel, hag  
en deus bepred plijet din kalz. Ennañ ez eus  
un istor hag a ziskouez mat peseurt den  
dibar hag uhel-speredet e oa hor c'henv-  
vroad ha pegen ledan eo e vrud peogwir ez  
eo tennet eus ur skrid saoz n'eo ket  
resisaet. N'am eus ket ezhomm da spisaat  
em eus-me labouret war ar skrid gallek. Ar  
gelennerien war ar saozneg, ken paot  
e-touez paotred ar brezhoneg, a c'helle  
marteze kavout ar skrid orin ha displegañ  
deomp kement-all e zavoudoù sebezus.

Setu eta va istor hag a zo talbennet,  
salokras : «*Kadamded c'hall*» (2).

En e raog e kaver un nebeut linennoù  
lakaet da deurel sklerijenn war an istor.  
(*P'edo o kas da benn ur gefridi bet fiziet  
ennañ e teskas hor c'henvroad edo an  
Aostrianed o kerzhout, ken buan ha ma  
c'hellent, war-du un ode a oa difennet gant  
ur c'hreifvlec'hig a oa al lec'h evit an arme  
c'hall*).

«P'en em gavas *La Tour d'Auvergne* et  
c'hreifvlec'hig, e verzas e oa tac'het e  
zifennourien hag int o kredañ ne vijent ket  
bet evit herzel ouzh an Aostrianed, hag  
lezet o doa o armoù war o lerc'h. O welet  
kment-se, e savas drouc er soudard  
kalon-uhel. Hag eñ neuze oc'h ober tra an  
trepaioù ha kavout pourveziou-brazel e  
meur a lec'h. Kerkent e reas e venoz 'ur  
menoz harnezh dellezek eus un haroz :  
difenn a rafe eñ e-unan ar c'hreifvlec'h  
dilezet».



Kentañ a reas e voe stankañ toull an nor-borzh gant kement tra pounner a gavas. Goude, gant parfedet, en em lakaat a eure da gargañ an holl fuzuilhoù. O lakaat a reas e-kichen an tarzhelioù a oa dres dirak an ode, ha tost dezho ur bern tennoù.

O vezañ aozet pep tra, debrñ a eure gant ur galon digor ar boued en doa kavet hag e c'hortozas.

Klevout a reas, war-dro hantnoz, an trouz pell a ra ur vandennad soudarded war-vale. Tamm-ha-tamm e tostaas an trouz hag, emberr, en em gavas an Aostrianed en antre an ode. Gant strizh, avat, ma oa an hent ne c'helle an enebourien mont war-raok nemet daou-ha-daou hag evel-se edont dindan tan ar c'hreñvlec'h. Diskargañ a reas *La Tour d'Auvergne* div fuzuilh da ziskouez e oa difennet. Klevout a reas kerkent an ofiserien aostrian o reiñ urzhioù hag ez en em dennas an Aostrianed.

Ar c'homandant aostrian o vezañ c'hwitet da gouezhañ war ar gwarnizon, a soñjas e oa gwell gantañ gortoz ar beure d'e argadiñ. Da c'houloù-deiz e lakeas goulenn outañ en em zaskoriñ. Ur greunadour a zeus er-maez neuze da gaout ar c'hannad.

— «*Lavarit d'ho komandant*», emezañ «*e vo difennet an ode kement ha ma vo gallet*».

Aet kuit ar c'hannad, degaset e voe ur pezh-kanol. Ne c'helle tennañ, avat, nemet diazezet en ul lec'h a oa dindan tan ar mouskedoù. Kerkent ha ma voe ar c'hanol prest da dennañ, e voe digoret un tan herrek eus ar c'hreñvlec'h hag eñ o skeiñ ken resis ma kouezhe ar ganolerien an eil re war ar re all. Goude daou pe dri tenn e voe sachet ar c'hanol war-gil. Pemp kanolier a oa bet lazhet.

Ne oa ken da ober evit ar c'homandant aostrian nemet arsalhañ ar c'hreñvlec'h. Pa voe an Aostrianed, avat, o tont en ode e tigoras a-nevez *La Tour d'Auvergne* an tan warno ha ken buan all ma kouezhas pemzek den a-raok dezho bezañ erruet hanter-hent. Daleet e voe an argad.

P'edo o vont da noziñ e c'houlennas ar c'homandant adarre ouzh ar gwarnizon en em zaskoriñ. Gouzout a rae *La Tour d'Auvergne* e oa echu a-benn neuze he zro gant an arme c'hall, rak-se n'en doa mui ar c'hreñvlec'h ar memes talvoudgezh evit an Aostrianed. Ouzhpenn edo e bourveziou tennañ o vont da get. Asantiñ a reas neuze reiñ ar c'hreñvlec'h. Divizet e voe, enta, ez afe ar gwarnizon er-maez gant e armoù an deiz war-lerc'h diouzh ar beure, hag en dije an aotre da vont rag-eeun betek al linennoù gall.

Antronoz eta, da darzh an deiz ez en em renkas an Aostrianed a bep tu d'an ode hag int o c'hortoz e teufe ar gwarnizon er-maez da reiñ dezhañ enorioù ar brezel.

Klevet e voe a-daol-trumm an nor bounner o ruilhañ war he mudrennoù, digeriñ a reas goustadik ha kerkent e teuas *La Tour d'Auvergne* hag eñ karget a fuzuilhoù. Tremena a reas dic'hoarzh dirak an div renkennad enebour o saludiñ gant o armoù.

Sebezet-mik e voe an Aostrianed pa weljont n'oa nemetañ o tont. Ar c'homandant aostrian a gasas e varc'h betek *La Tour d'Auvergne* hag a c'houlennas :

— «*Perak ne zeu ket ar gwarnizon war ho lerc'h ?*»

— «*Me an hini a zo ar gwarnizon, va c'horonal*», a respontas ar greunadour, lorc'h ennañ.

— «*Petra ?*» a c'harmas ar c'horonal hag eñ sabadac'het ; «*Daoust hag e fell deoc'h lavaret hoc'h eus difennet ar c'hreñvlec'h-mañ hoc'h-unan a-enep va holl rejimant !*»

— «*Her graet am eus, va c'horonal*», a respontas *La Tour d'Auvergne*...

Ar c'horonal a sellas ur pennad ouzh *La Tour d'Auvergne* gant un estlamm eus ar re vrasañ. Neuze, en ur sevel e gleze betek e zaoulagad e lavaras fromet an tamm anezhañ :

— «*Greunadour, ho saludiñ a ran. Emoc'h o paouez diskouez ez eus ac'hanoc'h un den kalonek e-touez ar re galonekañ*».

Gourc'hemenn a reas neuze ma vije douget gant e soudarded betek ar c'hamp gall ar fuzuilhoù na felle ket *La Tour d'Auvergne* lezel war e lerc'h hag e kasas un tamm lizher da zaneveliñ pezh edo o paouez c'hoarvezout.

Un istor kaer, an hini eo, neketa ! Daoust hag ez eo gwir ? Se 'zo un afer all hag evidon, pell evel m'emaon diouzh pep levraoueg vras, n'hellan ket klask e wiriekaat.

A-raok echuiñ, avat, menegomp c'hoazh ar bomm-mañ tennet eus an danevell gouestlet dezhañ e «*Geriadur Breizh*» savet gant Ogée (s.o. «*Keraez*», p. 146) :

«*Neuze, e voe gwelet, tra estlammus ! an enebourien o-unan o sentiñ outañ ha soudarded an div arme, ar re anezho ar muiañ war-raok, oc'h ehanañ gant o zennadegoù didalvoud netra nemet o klevout e vouezh*».

N'eus arvar ebet e oa *La Tour d'Auvergne* un den dibar ha dispar !

L. ANDOUARD

1 - N'on ket bet an hini nemetañ, moarvat, da vezañ souezhet gant se, peogwir e skriv Lenotre e-unan :

«*Buhez soudard kentañ greunadour ar Frañs a zo bet danevellet dija nemet e chome un dra ne oad ket evit diskleriañ splann : penaos e oa deuet ar soudard kalonek-mañ ganet e-ziwar bourc'hizien vihan eus Breizh, da zougen anv un diegezh priñs, brudet abaoe mil bloaz hag a gante e-touez e hendadoù pell kentañ rous kristen Jeruzalem ?*» Ha setu dres petra a laka splann dirazomp (war-lerc'h Ch. ar Govig moarvat) an istorour gall en e lev : «*Nos Français*» (Hor Gallaoued, poltreoù diegezh). Grasset 1941, er pennad gouestlet d'hor c'henvroad (pp. 38/46).

2 - «*Dibab-ienadennoù*». Klas krenn (Derez lañ) gant A. Mironneau, stal-levrioù A. Colin, pp 177/181.

L. Andouard

## De Valera hag ar Gouezleg

Kemer a rae DE VALERA un dudi bras ar yezh c'houezelek hag e kement tra a denne dezhi hag e veize ervat pebezh talvoudgezh a oa enni. Deskat en doa anezhi mat-tre hag e rae ganti en e diegezh

dezhañ a-unan ha dirak ar bobl. E-pad e vuhez e klaskas lakaat ar bobl d'he deskiñ ha d'he c'homz. Ober a reas kalz eviti nemet e oa kalz tud evit soñjal n'en doa ket graet a-walc'h.

Diazezañ a reas, a-dra sur, «*Ensavadur ar Studioù Uhel*» (Instituad an Ardléin) hag e reas e izili kalz evit pezh a sell ouzh ar C'hrenn-Ouezeleg hag an Hen-Ouezeleg, ul labour hennez dellezek a veuleudiou. E saozneg eo, avat, e kemerjont o notennoù evit o levrioù, hag e saozneg eo ivez e voe o diskleriadurioù. Nebeut a rejont, avat, evit ar gouezeleg bev hag e fougse lod anezho ne ouliet ket gouezeleg an amzer-mañ...

Diazezañ a reas DE VALERA «*Bodad ar Werinoniezh*» (Coimisiun an Bhéaloideasa) hag e c'heller e veuliñ abalamour da-se. Kaer-kentañ eo al labour a zo bet graet gantañ e daou-ugent vloaz. Derc'hel a reas (De Valera) gant al labour a oa bet graet evit ar yezh gant ar Gouarnamant kozh. Bez' e reas, avat, traoù 'zo ne oant ket bet graet gant den ebet en doa bet ur garg ennañ. Da skouer, eñ an hini a zo kiriek ma voe esunaet an doare-skrivañ hag ar yezhadur, hag astennet katz implij al lizherennoù latin.

Bez' e reas traoù all c'hoazh. Hogen, en e amzer, deoust petra bennak a reas, ez eas ar Gouezleg war-gil ha, pezh a zo gwashoc'h c'hoazh, e kozhas niver ar ouezelegerien a-vihanik.

Tennet eus ar pennad a skrivas  
*Cristoír Mac Aonghusa* evit «*Inniu*»  
(5 Wengolo 1975) da golver marv  
Eamonn De Valera

## Levrioù

Jaume ROSSINYOL-*Le Problème national catalan* (Mouton 1974), 710 paj. 8800 F

E miz Genver 1974 ez eus bet embannet ur studiadenn fetis gant Jaume ROSSINYOL war gudennoù Katalonia. Pried Gwenola Ar Beg ez eo an oberour, merc'h Yann ar Bed anavezet en Ensav. Un dezenn ez eo evit an doktoerezh war ar Gwir ; echuet e oa an dornskrid e 1968... Niverenn 139 «*Al Liamm*» (Ebril 1970) ha deus embannet ur pennad hir ha dedennus-tre gant R. Delaporte, arbennigour war ar skiant-se, un advokad anezhañ, bet rener ar P.N.B., e-pad ar brezel. Ha mat e vezo da gouarnanterien «*Al Liamm*» adlenn ar

pennad-se. Setu perak ez omp bet chomet etre c'hoant-dic'hoant kent sevel ur bajenn bennak evit Barr-Heol, diwar-benn al labour-se, ken talvoudus evel ma oa linennou R. Delaporte. Ne gomzimp ket eus ar perzhioù mat ha pouezus notet gant R.D. hag hor re-ni ivez ez eo ar meueudioù roet gant hemañ d'ar skrivagner. Ne chom ganimp-ni neuze nemet komz diwar-benn an tuiou un tammig gwan eus an oberenn (d'hor meno !). An oberour d'hon digarezo.

Rezon en deus R.D. o lavarout e vefe mat d'an emsaverien studiañ pizh al labour-se ; n'eo ket abalamour da anavezout dre ar munud stourm Kataloniz, met evit kaout dre heñvedigezh ur gentel bennak evit o stourm dezho o-unan.

Eus ar gwellañ ez eo ar raktres kinniget e taolenn danvez al lev : dedennet ez eo al lenner, ken sklaer ha ken reizh ez eo an urzh : ur gudenn gataloniat a zo ? Perak -ha neuze an abegoù objektivel (Douaroniezh, Istor, Armerzh, h.a.). An abegoù subjektivel : ar youl da chom kataloniat. Goude-se an diskoulm : da gentañ :

1 - An' unanidigezh, met kement-se e vefe nac'hañ ar gudenn e gwirionez ha terriñ Katalonia a zeufe da vezañ peurheñvelaet ouzh Bro-Spagn ha lonket gant ar Gastilhaned.

2 - An diskoulm federal, an hini nemetañ o klotañ gant ar vuhez, rak, esper ebet gant an disrannañ, dre ma teufe d'e heul a-nevez brezel-diabarzh, brezel ha na blij da zen ebet.

Splann-tre ez eo ar raktres, ha skouerius e vefe, ma ne zeufe ket d'e heul ur si bennak, diaes marteze diwall dioutañ. Re hir e chomer da zispiegañ ar gudenn, hag e korf al lev, pa studier an abegoù pe an diskoulmoù, e tibuner a-nevez traoù 'zo ; ha setu perak gant an distroioù en amzar dremenet ez eo lakaet al lenner da ziankañ.

Tra all : un dezenn-doktorelezh ez eo ; ret e vefe d'ar skrivagner harpañ e labour war un niver bras a labourioù graet gant tud desket, ha setu perak ez eo ken stank an arroudoù ; tamm-ha-tamm e teu an destenn da vezañ bodennek, mar gallan komz evel-se, ponner ha skuizhus un tammig. N'eo ket dav anavezout dre ar munud kement lavarenn bet distaget war an dra-mañ-dra. A-walc'h e vefe merkañ spis en notennoù, anv ar skrivagnerien ha 'lec'h an arroudoù an o oberoù, ha neuze fizioù an onestiz an oberour e-unan ! Met

marteze, en un dezenn ez eo evel-se eo e tleer labourat...

Hir, re hir, ivez hon eus kavet ar pajennoù diwar-benn an douaroniezh (fizikel ha denel) ; d'hor meno, en desped da strivoù J.R. n'omp ket kendrec'het, forzh pegen dedennus an destenn. Sklaer eo he deus an douaroniezh levezon war ar gudenn vroadel, en un enezenn evel lwerzhon, lakomp ; n'eo ket ken sklaer avat, evit an douar m'emañ Kataloniz o vevañ (ar memes tra a vefe da lavarout evit Euskadi).

Un tammig hir ivez ar pajennoù diwar-benn ar vuhez armerzhel ; ha gwech pe wech, n'eo mul gwir ar sifroù, hiziv an deiz, kemeret ma'z int bet eus ar bloavezhioù 1964, 1960 ha zoken, 1957. Buan-ha-buan ez eo bet kemmet an traoù er bloavezhioù diwezhañ-mañ, war dachenn an ekonomiezh e Bro-Spagn. Gwanaet eo dre-se an anatadur.

Pa gomz diwar-benn ar brezel-diabarzh, e tegas da soñj e vefe skoazellet ar «vroadelourien» gant an Italianed hag an Alamaned. Gwir eo ! Met un dra onest e vefe bet lavarout ivez e vefe skoazellet ar «Republikaned» gant ar Sovieted, gant Talbenn Poblek Bro-C'hall hag ar «Brigadennoù etrevroadel». An hini ne lavar ket ar wirionez war he hed, ne lavar ket ar wirionez... En un notenn bennak e kaver meneg eus Belgia : «*Dec'h ar Walloned oc'h ober o mistri eno en abeg d'an ijinerezh ha da levezon ar galleg*». Kredin a reomp n'eo ket hennezh an abeg gwirion, anez, perak ne vefe ket, memes tra hiziv ? D'hor meno, an abeg gwirion ez eo niver ar boblañs : keit ha ma vefe ar Walloned an niverusañ e voent mestr, met diouzhtu ma teuas ar Flamanked da vezañ an niverusañ e vefe cheñchet penn d'ar vazh...

Rezon en deus J. Rossinyol o pouezañ war levezon ur Gêrbenn-Barselona-brasoc'h eget Madrid, hag o virout he yezh. Diarvar eo ez eo mennet ar bobl kataloniat da saveteiñ he yezh, ha sebezus sifr al levrioù embannet bep bloaz. Ma tizhfe un deiz Kataloniz kaout o emrenerezh (kuit da gomz eus frankiz leun) e vefe dre ma c'hellfent degas, evel arguzenn wellañ a-du gant o broadelezh wirion, o yezh dezho o-unan.

Dindan al linennoù e tiviner aes unan eus gwanderioù bras ar bobl latin-se : an dizunvaniezh-diabarzh, an tech pe an ezhomm kleñvedek d'an diveli, d'ar spered «anarchist». Diaes eo kredif pegen bras ez

eo niver ar rummadoùgoù politikel. Ni ivez, Kelted, a oar petra eo an ezhomm-se a zisrann hag a zisparti hag a vefe pennabeg d'hon drouzivezhioù a-hed hon istor. Met gwashoc'h eo c'hoazh an traoù gant ar pobloù latin. Ur skouer boanius : Portugal an deiz a hiziv. Unan all : istor politikel an Amerik latin e-pad an XIX<sup>et</sup> kantved, hag hiziv : un istor ha na vefe nemet un heulad a zibenniezh hag a ziktatoriezh, savet dre ret a-wechoù gant pronunsiamento-où pennoù eus an arme. Gouzout a reomp ez eo Kastilhez ivez, evel ar bobl kataloniat, ur bobl latin ; met evit bremañ ez eo troc'het o ezhomm d'an emzistrann gant o youl hag o gred evit an unanded vroadel (ha c'hoazh goude marv an diktator Franco ez eo diaes gout petra 'vo an amzer da zont !).

E-pad ar brezel-diabarzh, sellit na pet lazhadeg e-touez (ha gant) Kataloniz o-unan. Drouklazhet e vefe a-villadoù tud eus an tu dehoù, ne vefe espernet na beleien, na leanez gant an anarchisted (a-vec'h ma lavarer an dra-se el lev) ; ha goude, e vefe drouklazhet an anarchisted o-unan gant ar gommunisted. En deizioù-se n'eo ket ar gudenn vroadel eo a oa preder kentañ Kataloniz...

Setu perak e chom al lenner difizius un tamm dirak an diskoulmoù kinniget ha menoz kaer ar «Federaliezh». Disi e vefe kement-se, ma ne vefe ket tempz-spered Kataloniz un tamz-spered ha na gammo ket. N'eo ket dre zegouezh ez eo ma'z eus e nep bro all ebet kement an anarchisted (anarkourien) evel e Katalonia. Bez'ez eus zoken un «Unvaniezh an anarchisted» -daoust ma'z eo un dra ar-maez eus tachenn ar poell, rak kement kostezenn a zo he deus ezhomm evit padout da gaout ur penn bennak, un urzh bennak, ur «veli bennak» dres ar pezh a ya a-enep menoz diazez an «diveliourien». Neuze penaos e c'hellfe ur Katalonia, mestrez en he zi (tra hag a hetomp !) bezañ gouest d'ennem sturiant ? Hag-añ e vefe ket busn ar stal memes tra evel ar Portugal ? Santout a ra an oberour ar wanded-se eus e genvroiz, met ra nebeut evit doare.

Bremañ, evidomp-ni, Bretoned ? Un dra gaer ha da hetif eo e vefe savet ul labour heñvel, ul labour ken talvoudus-all hag hini J.R. diwar-benn kudenn vroadel Breizh (dixit R. Delaporte !). Souszhus eo gwelout en eil bro hag eben niver an hevelep plegioù, mat pe fall.

Da skouer :

- Ret eo kaout un diskoulm politikel evit diskoulmañ evit mat kudenn an div vro.

- Ken heskinet all ez eo ar yezh, e Breizh : evel just evit mougañ ar vroadelezh vreizhat.

- N'eo ket a zivyezhegezh wirion : dre ret ez eo trec'h ar yezh a stumm ar spered, ha meur a wech ez eo ar yezh-stad, ar yezh ofisiel eo a ra an afer !

- E Breizh ivez ez eo bet gallekaet an anvioù-lec'h, an anvioù-badez, ha zoken amañ pe shont an anvioù-familh, evel ma vefe spagnolekaet an anvioù kataloniat.

- N'eo ket kalennet istor Breizh : memes tra evit istor Katalonia.

- Staget ez eus bet rannvroioù 'zo eus Katalonia ouzh rannvroioù all, a-ratozhkaer. Dispartiet ez eo bet an Naoned diouzh Breizh, ha krouet a-ratozh ur rannvro dinatur (Broioù al Liger) evit na zeufe ket Breizh Istorel da advevañ.

- Anvet e vefe e Katalonia eskibien Kastilhan ; e Breizh, hon eus gwelet ur Norman, e Kemper, ha gwech ebet ur Breizhad e Roazhon (abaoe ar c'hardinal Dubourg) pe en Naoned : n'eo ket dre zegouezh.

- Ul labour bouezus a zo bet graet e Katalonia gant kanerien evit dihuniñ ar Bobl. Abaoe 10 vloaz 'zo, memes doare stourm e Breizh.

Memes gwanderioù ivez. Ne gredan ket e vefe ur strollad politikel pe sevenadurel, e Breizh, ha n'he defe ket gouzañvet un taol-emzistrannañ kent dezhañ kaout pemp bloaz a vuhez. Da gredif e vefe ne c'hell ket ar Breizhad plegañ d'un urzh bennak, d'un emglev bennak ha dilezel evit-se, zoken evit ur pennad, lod eus e gredennoù pe zibaboù, a-benn tizhout ur pal a-gevret gant kevelerien all.

Met bez'ez eus avat, maur a ziforc'h etr an div vro. Katalonia a zo ur rannvro e-loc'h ma'z eus ar muiañ a uzinoù hag a labouradegoù, el Ledenez Spagnol ; Breizh avat, unan eus ar re he deus an nebeutañ, e Bro-Chall. Klemm a ra Kataloniz dre ma ne vefe ket lodennet an arc'hant, hervez an tailhoù paset, d'o implijañ war-dro labourioù hag oberoù a zo ezhomm anezho evit reiñ larzh d'ar vro ; peil ac'hano end-eeun, dreist-holl pe weler an arc'hant roet da Gastilha. Klemm a ra ivez Breizhiz dre ma n'eo ket lodennet reizh an arc'hant an tailhoù, dispoignet dreist-holl evit Pariz hag ar C'hreisteiz.

Un diforc'h bras all : niver ar boblañs.

Tost da 10 milion a Gataloniz, hag eno, n'eus ket a dud o tiroañ. Zoken gant ar Vretoned divroet n'eus ket 5 milion a Vretoned. Setu perak ne c'hellomp ket kalaat keñver-ouzh-keñver niver ar Gatalonegerien hag hini ar Vrezhonegerien, na stad al levrioù, ar c'helaouennoù, en ur ger an embannerezh.

Un diforc'h c'hoazh : ur Gêrbenn katalonek ez eo Barselona. Brest avat, brasañ kêr ar vro vrezhonek ne deo nemet ur gêr c'hallek : morse koulz lavarout, ne glevet brezhoneg, daoust ma'z eus da nebeutañ ur c'hard eus an dud oc'h anavezout ar yezh, deuet ma'z-eus tud di, nevez 'zo, eus Bro-Leon. A-hend-all, pa'z eo ar spagnoleg hag ar c'hataloneg yezhoù daoust o-div eus al latin, e vefe marteze ur riski d'ar re a gomz kataloneg da dreiñ ouzh ur yezh tost a-walc'h d'o hini, met ar c'hontrol eo, ur gonid eo evit ar c'hataloneg pa'z eo ken aes d'ar Spagnolegerien deuet niverus da labourat da Gatalonia, deskiñ yezh ar vro.

Er vro vrezhonek ez eo trawalc'h tolpañ an dud er c'hêrioù evit gwelout an holl o treiñ war ar galleg ; hag evel-se n'eo ket risklet an estrañjourien deuet di da labourat pe d'en em ziazezañ, da zeskiñ ar yezh. Rak, siwazh ! Kalz a diegezhioù breizhat o deus nac'het komz brezhoneg ouzh o bugale, evit abegoù a bep seurt : aon na dapfe o bugale dilañs er skol, aon na rankent divroañ ur wech bennak ha me 'oar. An abeg kentañ-holl avat, ez eo ar mank a spered broadel, hag ar mank a'youl. Evit Breizh, en deus pouezet an armerzh, pe an ekonomiezh, mar kavit gwel, war ar sevenadur hag ar spered broadel, met war an tu kontrol d'ar pezh a zo en em gavet e Katalonia.

An amzer-da-zont ? Ne c'hell den ebet hien rakwelout, nag evit Katalonia nag evit Breizh, ken stank ez eo an darvoudoù dic'hortoiz a c'hell en em gavout er bloavezhioù da zont. Arabat lavarout, gwech ebet, ez eo kollet ar stourm broadel evit ar vro-mañ-bro.

J.C.

#### NOTENN

Unvanet hon eus ar gerioù : Katalonia, Kataloneg, Katalonegerien hag all, e-lec'h ober gant ar gerioù Katalonya, Katalan, Katalonek.

Ar gerioù federal ha federallesh hon eus lakat ivez e plas ar gerioù kevredel ha kevredelash, dre e o c'hoavamp ket sklaer a-walc'h.

**CAMILLE LE MERCIER D'ERM. Une armée de Chouans : 1870-1871. 428 paj. 1975. Librairie académique Perrin. Armor Diffusion. 60,00 lur.**

Emañ ar barzh hag ar stourmer kozh anavezet mat en Emsav o paouez embann un oberenn gortozet pell 'zo : kel a oa anezhi abaoe meur a vloaz. E 1935 e oa bet savet gantañ ul levr a-bouez «*L'étrange aventure de l'Armée de Bretagne*» (Avantur iskis arme Breizh), adembannet e 1970, gant ar Presses Universitaires de Bretagne. El levr nevez ez eus bet adkemeret amañ hag ahont tra pe dra bet kontet al levr all : mar bije bet a-hed-all e vije bet kement-se ur burzhud ; met m'emañ ket ar burzhud-se evit bremañ, e galloud LE MERCIER D'ERM. Addispleget ez eo an istor diouzh un tu all, diouzh ur sell ledanoc'h : dilezel a ra an darvoudoù munut bevet e Konli (Conlie), ar vuhez kriz hag all. En dro-mañ e tanevellet an traoù evel gwelet ha barnet eus a uheloc'h, diouzh tu ar pennoù-bras hag ar gouarnamant. E-vel-se e tispleger perak ez eo bet chomet ar Vretoned e Kerfank, fank Konli. Egwirionez ez eo an eil oberenn-mañ ur studi war an irienn (ar mennad-irienn kentoc'h) prientet gant ar jeneral Keratri, met aet da fall a-raok zoken bezañ diazezet-mat gantañ hag a oa kaout etre e zaouarn Bretoned frammet en un arme greñv, evit ma c'hellfe Breizh en em zifenn ha marteze -mar befe ret- komz en hec'h anv hec'h-unan gant Bismarck (en em lakaat neuze e renk ur vro emren).

Intenet-mat e voe an taol gant Gambetta a gemeras buan diarbennoù diouzh-se : dre lemel digant Keratri pep beli e Konli, met ivez dre nac'hañ reiñ armoù da soudarded ar c'hamp. Kemenn a reas zoken lezel ar Vretoned da vreiñañ e pri Konli. Kaset e voe an divizion-emgann d'ar stourmad da gichen Auvours, gant fuzuilhoù fall ; hag ar jeneral Chanzy a nac'has reiñ skoazell dezhi. Da grediñ e vefe en devoa Gambetta brasoc'h aon rak an arme vreizhat eget rak an trec'h gant an arme brusiat.

Honnezh eo tezenn al levr. (Etrezomp bez'ez eo dreist-holl ur poltred dispar eus ar jeneral Keratri !). Frammet fetis ha start ez eo an displeg-se. Dedennus ez eo gwelout ar skrivagner o kaout mat labour Gambetta, met evel just, ur Gambetta sellet evel broadelour gall...

Tra pe dra a vefe marteze da rebech

d'al levr. Anaout a ra re vat an oberour e zanvez. E anavezout dre ar munud ; hag emichañs e kred dezhañ ez eo anavezet kerkoulz all gant al lennerien. Neuze eur kollet a-wechoù e-touez darvoudoùigoù re stank, e-touez fedoù pellik diouzh an afer, ha gant kildroioù hag adlavaredoù. Fellout a ra dezhañ kontañ pep tra ; nerzhusoc'h ha sklaeroc'h e vije bet marteze un danavell verroc'h. Buan e teu al lenner da grediñ ez eo gwir an dezenn ; ezhomm ebet d'hen lavarout seizh pe eizh gwech. Un dra all : dav ez eo d'al lenner degemerout kement-mañ : ur wech m'en devo lennet an hanter eus al levr, n'en devo mui netra nevez da zeskiñ war ar sujed (ar sujed hervaz titl al levr, na petra 'ta). Dedennus-tre ez eo sur-mañ ar peurrest, nemet e teu euz -salokras !- evel ul lost-buoc'h war ar soubenn. Bez'ez eus pajennoù hir diwar-benn al liammoù pe an darempredoù a-hed an istor hag an deiz a hiziv, etre Bretoned hag Alamaned : ur gwall furcher ez eo an oberour, ha setu perak e c'heller degemerout a-galon vat an eil rann eus al levr gant an notennoù o reiñ un alberz eus buhez tud'zo bet meneget e-skeud afer Konli. Mat-tre, kement-se evit studieren ha gouizieien. Evit ar re all avat !...

Iskis a-walc'h ez eo ar pezh a lenner diwar-benn niver ar soudarded e Konli, sifrou o vont eus 20 000 da 80 000 ; ar skrivagner e-unan a gomz eus 60 000 amañ hag eus 80 000 ahont. Diaes eo gouzout ar gont just. Lakomp e vefe bet 80 000 soudard o tremen dre Gonli, met ne oant ket bet ouzhpenn 40 000 a-gevret.

Souezhus ez eo an diskeriadenn diwar-benn orin ar gerioù Batz ha Guerande a vefe anvioù a orin germanek ! N'eus ket ezhomm da glask Germaned eno, ken eun evel ma'z eo an anv «*Gwenn-Rann*», er vro anvet ar «*Vro-Wenn*». N'eus ket ezhomm zoken da soñjal er bernioù holen o reiñ o liv d'ar maezioù ; gwelloc'h kompren «*tachenn wenn*», «*lodenn wenn*» en ur reiñ d'ar ger «*gwenn*» e ster kozh : eürus, chañsus. Un anv brezhonek-rik en ur vro hag a zo bet brezhonek betek nevez 'zo (cf. *Barr-Heol 87, Prosez Sant Erwan*, paj. 17).

Ur ger hepken diwar-benn tro-blenn C.E. Skrivañ a ra an oberour evel pa vefe o prezegeniñ, gant un ton entanet meur a wech. Setu aze tro-blenn un emganner, ur paotr hag a wel dirazañ unan bennak prast d'e zislavarout, ha buan e tibun ar respont en a-raok. N'eo ket lenn skrid an oberour an hini a reer, met e glevout e-unan o komz.

N'eo ket displejus an dro-blenn-se, tamm ebet : dav eo he degemerout, setu holl.

Evit echuiñ, souezhus eo gwelout pegen serzh e chom ar skrivagner a fell dezhañ d'erc'hel betek ar fin gant ar stourm en deus gouestlet e vuhez dezhañ. Embann ur seurt oberenn da 87 vloaz, ha mirout ken yaouank e spered, pebezh skouer !

J.C.

**IMBOURC'H, kelaouenn bolitikel, trimiziek, koumanant : 35,00 lur. K.R.P. Y. Ollivier, Roazhon. 1 534 25 Roazhon.**

Daoust d'e eil titl : kelaouenn bolitikel, ne deo ket *IMBOURC'H* ur kelaouenn bolitikel rik rak alies e kaver enni pennadoù o sellout ouzh kudennoù ar relijion, ar feiz kristen, an Iliz, stad ar veleien, mesk-ha-mesk gant pennadoù war ar politikerezh.

Gallout a reer lavarout ez eo awenet *IMBOURC'H* gant ar spered kristen, met pep tra a vez barnet, evel ma lavar, diouzh ur «savboent» breizhat ha kristen.

Brasañ si ar kelaouenn avat, e eo he yezh, ur yezh klot, diaes-meurbet da intent, ha komprenet hepken gant un dornadig tud «sklerijennet» ; an dud all -ha siner ar pennad-mañ, en o zouez- a rank ober chiboud alies, goude bezañ klasket donet a-benn da intent komzoù ar skrivagner. Pennadoù leun a c'herioù kozh pe a c'herioù tennet eus ar c'hembraeg hag adstummet, sañset, diouzh tijn hor yezh : ezhomm a vefe kaout ur jubennour hag un displeger evit gwelout, hep tapout poan-benn, petra 'zo dindan. Ret eo anavez ne deo ket paour, mar ne deo ket brav, ar yezh ganto, ne sac'hont neblec'h ebet ; setu da skouer, en niverenn 71-72 (*Kerzu 1975*), evit «*Mass Media*», ar ger «*yooc'hstenn*», pa ne oa kinniget betek-hen nemet «*Binvioù-Meur ar C'helaouañ*». Kalz-kalz re a c'herioù nevez, hep kontañ ar frazennadurezh hag a bak ha jeu en ur dremen.

Ur freatz hag un drugar ez eo kaout ur wech an amzer ur pennad bennak evel hini P. Kalvez troet diwar galleg Dom Gougaud «*Ar C'hristeniezhoù Keltiek*». Tu a zo da vihanañ da heuliañ ar skrivagner, daoust d'un nebeut geriennoù evel *Kimingadenn* (mission), *Kimingaderezh* (mission), *missionerezh* ha na oar den ebet eus a belec'h ar foeltr ez int difluket. Fazioù a weler ivez amañ hag ahont : «... e kess herañ far



Pab) *Garmon e Breizh-veur* e-lec'h «*da Vreizh-Veur ; distreiñ e Galia e-lec'h da C'halla*, h.a. Anat eo ne oar ket P.K. ar c'hemm a zo etre *davit* ha *davit* (paj. 365). Ur fazi kemmadur ivez : «*Doujañs Doue am vlenias*» e-lec'h «*am vlenias*».

Kalz plijusoc'h a dra sur, ha frouezhusoc'h e vefe *IMBOURC'H* ma karfe treiñ kein da sorc'hennou goulo degaset abaoe un nebeut bloavezhioù 'zo war dachenn ar yezh. Tud ouiziek evel-se, a zo gouest, hep mar ebet, da aozañ pennadoù he na vefe ket ur sifern (ur vezh) gwelout anezho (1).

KLERG

1 - «*na vefe ket ur sifern ha mezhus amañ a zo, evel just, da vezañ kemeret hervez o ster poblek : a vefe un enor, ur blijadur, un dud.*»

## Keginerezh

### JIBELOTENN MORU (Treger)

Patatez, moru, persilh, ognon, hervez an niver a dud a vez ouzh taol.

1 - Poazhat en dour an ognon hag ar persilh.

2 - Ober un hilienn gwenn hir gant amañ ha bleud ha gant an dour bet o poazhañ an ognon hag ar persilh.

3 - Lakaat ar patatez da boazhañ en hilienn.

4 - Ur c'hard-ur a-raok ma vez poazh ar patatez, lakaat ar moru er gastolodenn. Arabat e vefe disec'het ar patatez.

Tu 'zo d'ober ivez ur jibelotenn viou. Neuze e lakaer viou poazh-kalet e-lec'h ar moru.

### ANDIVEZ ER FORN

2 lur andivez,

4 vl

1 werennad laezh, holen ha pebr

100 g fourmaj rasklet

amzer :

prientañ : 10 mn ; poazhañ : 35 mn.

Lakaat an andivez bet naetaet da boazhat ur pennedig e-berzh dour bet sallet. Dizourañ anezhe hag o lakaat en ur plad da vont er forn. Meskañ ar viou gant al laezh, an holen, ar pebr, ar fourmaj. Lakaat

ar c'hemesk-se war an andivez ha lakaat pep tra er forn.

Gellout a reer lakaat ivez tammoù kig morzhed-hoc'h er meuz-se, mar karer, a-raok lakaat ar plad er forn.

### SALADENN GANT KRAON

Ober ur pladad saladenn evel kustum gant letuz, pusetez pe andivez ha lakaat da heul tammoù kraon.

Kemer 2 vi poazh-kalet ha troc'hañ e tammoù bihan ar gwenn. Ar melen a vo tremenet dre ar malaouer bihan ha meskañ pep tra er plad e-touez ar saladenn

Un tamm arzall  
Da c'hortoz gwel

## Eil goude-skrud diwar-benn an Aotrou beleg Berto

gant BENEAD

J.C.

E Barr-Heol miz Kerzu 1975, paj. 30-33, en deus komzet J.C. diwar-benn levr-buhez an Tad Berto. Un nebeut evezhiadennoù am befe c'hoant d'ober da heul ar pennad talvoudous-se.

Da gentañ, difaziañ an titl a zo *Notre-Dame de la Joie* ha n'eo ket *Notre-Dame de Montjoie*. Netra da welout gant garm-brezel ar C'hallaoued : «*Montjoie St Denis*» na gant hini ar Saozon : «*Montjoie St Georges*». Anv Itron Varia ar Joa, unan kaer ha breizhek-tre eo hini Iliz Pondivi, lec'h ma voe badezet Viktor Loiez Mari Berto, da zeiz e c'hannedigezh, 9-10-1900.

D'an eil, n'eo ket e pap lec'h, en eskopti Gwened eo e «*chomer mut*» diwar-benn en *Ao. Berto* : a drugarez Doue, ez eus meur a zan a gav dezho ez eus bet anezhañ ur beleg desket-kaer, speredek bras, ha dreist-holl unan santel, ur skouer gwirion a feiz hag a garantez. N'ouzon ket mat petra a c'helle bezañ rebechet d'an Aotrou Eskob Lefebvre, hogen gouzout a ran mat petra n'heller ket rebech dezhañ.

Mar deo gwir evel ma lavar J.C. he divije dislivet e vrud war an den a oa e deologour e-pad ar Sened-meur, an Tad B., neuze, evit bezañ just, eo ret lavarout ivez ez eo gwall-izel brud eskibien all eus Bro-C'hall a zo bet kuzuliet e-pad ar Sened gant tut evel Jean-Claude Besret (arabat ober biken ken tud «*Bernez*» anezhañ evel just !) ha gant reoù all o deus kuitaet an Iliz, abaoe 1965 !

N'eus forzh penaos ne oa ket ar wech kentañ d'an Tad Berto bezañ heskinet dreizh evit e venozioù. Hervez tud 'zo, e oa «*otonomist*» ; evit un trede rumm avat, hag ar gwir a oa ganto ar wech-mañ, e oa an eil hag egile war un dro. Ha perak ne vije ket bet ? Daoust hag-eñ e vefe ret bezañ kleizour evit bezañ ivez broadelour breizhat ?

Setu perak n'hellas ket un toullad tud, politikerien vrein hag ivez siwazh, kenvreudeur gwarizius, gouzañv e vije bet -hag eñ yaouank flamm c'hoazh- anvet da gelenner e Kloerdi bras Gwened. Re a levezon en devoa kemeret diouzhtu war ar gloareged. Hag aberzhet e voe d'e anebourion gant an Aotrou'n Eskob Trehiou, a oa un den santel eveljust, met hep nerzh-kalon awalc'h, evitañ da vezañ bet, e-keit ma oa bet Vikel-Vras St Brieg, madelezhus ha ledan e spere. Un testi personel a c'hellfen reiñ eus kement-se.

Ha goude bezañ paeet ken ker e fealded d'e venozioù, setu ma kemer an *Ao. Berto* e 1955, un dibab heñvel-mik ouzh un dae diwezhañ. Prenañ a ra maner Pontkaleg evit e emzivadeg hag o c'hellennerzed. N'eo ket hepken un taol-degouezh evurus sur mat. Pontkaleg a vir bepred frond mezvus an emsaverzh breizhat. Pe lec'h e vije kavet gweloc'h evit gwirizennañ Dominikadezed ar Spere Santel ? Pontkaleg, arouez, eñvor ha promesa...

Evel ma oa bet al leanez kentañ a varvas en o zouez -d'he fevar bloaz war'n ugent hepken- Anna-Maria de Charette, nizez vihan d'ar Charette maer. Hi ivez, arouez ha promesa, evel m'hen soñje an Tad Berto.

Ha bremañ roomp un nebeut resiadurioù pleustrek : da gentañ savet ez eus bet Werlone, e Pontkaleg ur skol all ; unan evit merc'hed yaouank, a zo renet mat-tre, hervez kerent a anavezomp. Unan eus al leanezed yaouank a gelenn du-hont, a dremenas e Sorbona, tri bloaz 'zo, he mestroniezh war ar bredero urizh gant ar

meneg mat-tre.

D'an eil, gwir eo e kan an emzivadeg e Pontkaleg evel o c'h'emend-all a eostiged. Prenit 'ta ar blanedenn savet ganto ha war un dro gant Beneadiz Stez Anna Kergonan «*Initiation au Chant Grégorien*». Klevout a reot kanennoù santelañ ha kaerañ an Iliz, kanet gant mouezhioù eeun ha flour ar baotredigoù, mesket brav gant mouezhioù desket ha gwevn ar venec'h (1). Un dud a vo deoc'h sur-mat, hag ur skoazell evit an oberenn dalvoudous-se.

1 - An daou rummad dindan renerezh ampant an Tad Loiez La Feuvre ur mailh war ar vicher, hag ur Breizhad mat.

Breur Yann Fleury

## Petra eo ur manac'h ?

Petra eo ur manac'h ? Un den hag a zo o vevañ etre mogerioù gant e vreudeur, en ur veuliñ Doue meur a wech en deiz ? Gwir eo, met n'eo ket holl ! Gwelout a raimp ata da gentañ petra eo ur manac'h, a gwirionez, da eil, petra eo ar gevradigezh 'lec'h ma vez o vevañ, ha d'an trede, petra eo ur manac'h diouzh reolenn ha giz Solesmes.

### Ar Manac'h hag hon Salver Jezus-Krist

Piv out, manac'h kristen ? Un den hag en deus klevet : «*Pa beñ, kae ez kamb, hag o vezañ serret an nor, ped da Dad en amc'houloù...*». Evel-se e lavare Hon Salver war ar menez d'e ziskibien. Kalz a gristenian o vevañ mesk-ha-mesk tud ar bed o deus seliaouet al lavar-se, met ar manac'h a fell dezhañ pediñ aesoc'h.

Lavaret en deus Jezus ivez : «*Me eo an hant... ar wirionez hag ar vuhez. Den ne zeu etrezek an Tad nemet droniz*». Youl ur c'hristen ez eo bevañ evel Mab Doue, bevañ e Mab-Doue. Ne deo bet buhez Jezus natra nemet santidigezh, pedenn, pinjenn. «*O vezañ sentus betek ar marv hag ar marv war ar Groaz*», en deus Mab Doue graet ar c'hontrol eus an den kentañ a ziasantas o tebliñ ar frouzdh difennet evit bezañ heñvel ouzh Doue. Ha n'eus kristen ebet a gemet na zia ket dispenn roudoù e Vestr.

Tremenet en deus Jezuz nozvezhioù zoken o pediñ e Dad, ha devezhioù, evel ur Mab karet. D'e ziskibien e teskas ur bedenn nevez : Hon Tad hag e zo en neñv... Ur Spered nevez a roas dezho evit pediñ. Lavarout a reio St Paol emañ «ar Spered e-unan o pediñ evidomp gant leivoù dilavarus».

Ne lavaran ket evel al levr «Jezuz Krist, skouer ar Gristenien» : «Ne voe buhez Jezuz nemet kroaz ha poan», met disheñvel diouzh Adam, hon tad kentañ, poan ha labour en deus sammet war e zivskoaz, ha bet eo skouer ur garantez a zigoll frouezhioù fall ar biljadur direol.

#### Kevredigezh ar Manac'h

Dre e gevredigezh hag en e gevredigezh e vez ar manac'h evel ur Mab da Zoue. Komz a ra an Aotrou Doue ouzh an dud dre dud all, evel m' en deus lavaret deomp ar Sened Vatikan II. Ouzh e vab ar manac'h, e komz an Aotrou Doue dre e Dad Abad. Nebeut ha nebeut, pe abred-tre e tesk ar manac'h anaout karantez, youl, soñj e Dad a zo en neñv.

Amañ e klabour feiz ha karantez daoust da vizerioù an dud. Gant skoazell an Tad Abad e kresk an eneoù, hag e vez ar garantez etre ar breudeur. Strivañ a ra Mestr ar venec'h yaouank da glask, gant sikour ar gofezourien, gras ispisial pep hini anezho.

Graet eo ar gevredigezh gant breudeur disheñvel-tre an eil diouzh egile. Ar manac'h a gar Doue hag e youl dre e vredeur. En em garout a ra ar venec'h ervat -re vat marteze !- met en em garout a reont, hag ar garantez-se a zo un testeni.

Met deut omp da glask Doue ennomp hon-unan, da gejañ gantañ, hag an emgav bras-se a vez graet er bedenn, ha dreist-holl e pedenn an Iliz : pedenn an Eurioù hag an Oferenn. Anaout a ra an Iliz santel, hor Mamm, an Aotrou Doue hag an dud gwelloc'h eget den ebet, ha pa bedomp gant he fedenn dezhi hec'h-unan e vezomp e kalon didrouz ha santel an Aotrou Doue, evel ma lavare Dom Guéranger. Feal e chomomp d'al latin ha d'ar gan gregorian, rak er yezh-se eo bet savet pedenn an Iliz hag ar gan-se gant tud hag a ouie hentoù ar bedenn gwelloc'h egedomp.

N'ao ket awalc'h pediñ a-gevret : war-lerc'h hag a-raok, e kar ar manac'h pediñ en e bart e-unan, digabestr-mat. Alies ec'h adtremenomp war destennoù lennet, klevet, kanet dije d'o saourin

24

gwelloc'h. E-pad pegeñ ? Diouzh hor reol, un hanter- eur da nebeutañ bemdeiz, hiroc'h mar keromp. Bez'ez eo ur bedenn eeun, mat ha dous d'ar galon. Evit deskiñ pediñ evel-se e tle ar manac'h, studiañ, lenn, en em soñjal. Dre ar minotenoù (gwenodenoù)-se e c'hell anaout soñjenoù an Aotrou Doue. E levr kentañ ez eo ar Bibl Santel. Aze e komz Doue bemdeiz ouzh e vab karet hag e teu an den da anaout buhez ar bobl hag e vuhez dezhañ e-unan. Bez'en deus ivez Buhez ar Sent, an Doueonezh, Skridoù an Tadoù gresian ha latin, skridoù relijiel hon amzer.

Labour-korf a ra ivez ar venec'h, amañ zoken, evit bevañ, pep hini hervez e ampartiz hag ezhommoù ar manati.

#### Petra eo ur Manac'h Beneaded o heuliañ reolenn Solesmes ?

Da gentañ, aesoc'h eo hor buhez : sevel a reomp diwezhatoc'h (eget kalz a urzhioù all), da lavarout eo, da bemp eur diouzh ar mintin... hepken ! Kig, viov, pesked a zebromp, mont a reomp ur wech bep sizhun d'ober un tamm bale. Nebeutoc'h eget kalz a venec'h all e chomomp hep komz.

D'an eil, en abati Solesmes hag en abatioù all bet savet gantañ pe gant un abati all «bugel» dezhañ, ez eo al Liderezh-Sakr eo e gwirionez mammenn ha penn-uhelañ ar Vuhez kristen ha relijiel evit pep hini, hag evit kevredigezh ar venec'h Urzhiet ez eo al labourioù en doare da reiñ amzer da ober ul liderezh brav, plaen, pedus. Pep manac'h a zle klask magadurezh da vuhez e ene e testennoù an Iliz, ha bezañ aketus pa vez er c'heur.

D'an trede, dalc'hmat o deus soñjet ar venec'h beneaded e tleent studiañ ha lenn kalz, ha reiñ d'o feiz an holl sklerijenn a c'hellent kaout el levrioù kozh pe nevez, met dreist-holl el levrioù kozh, rak brasoc'h ha donoc'h anaoudegezh o devoa ar gristenien gozh eus ar vuhez kristen eget ar re deuet war o lerc'h. En hor manatioù ez eus ul levr-aoueg pinvidik e-keñver an hengoun kozh.

#### Da betra kaout menec'h ?

Ur goulenn hag a vez graet ouzhipp alies ez eo herañ : da betra e servij ar venec'h ? Daoust ha ne welont ket al labour a zo d'ober er bed ? Respontet en deus Sened Meur an Iliz : e-pad ma toug ar Spered muic'h-mui a gristenien da

labourat evit o breudeur ar bed, ez eo ar venec'h testoù eus ar vuhez peurbadel. Mirout a reont ouzh an dud da ankouna-c'haat n'eo ket gant bara hepken eo a ev an den, hogen gant kement ger a zeu eus genoù Doue.

Ar goulenn bras hag a vez graet hogozik bep tro goude-se, ez eo : «Penaos e vez anvet an Tad Abad ?». Ha pa responder : «Dibabet e vez gant e venec'h», e lavaront : «Neuze, emaoch'o o vevañ en demokratelezh ?».

Ket ! Ni eo a zibab hon Abad ; herañ avat, a zo ur galloud didermen, koulz lavarout, etre e zaoam ; met hen implijañ a ra evel un Tad, ha c'hoazh ez eo reizhet-mat e c'halloud dre m'emañ bepred o vevañ, evel unan anezho, e-touez venec'h a zo ivez e vredeur an Aotrou Krist.

7 a viz Gouere 1975

Kaozeadenn graet da dud Emglev an Tiegezhioù

#### Klerg

### La Voie romaine de Rennes à Carhaix

J.Y. EVEILLARD. La voie romaine de Rennes à Carhaix. paj. 135, prix : 28,00 lur. K.R.P. 2500 65 G Roazhon.

Kerkent hag embannet, em eus prenet levr J.Y. EVEILLARD : «An hent roman eus Roazhon da Garaez», da gaout an diskoulm emaoñ o klask abaoe bloavezhioù 'zo -ha n'eo ket me hepken, met ar strolladig-tud a zo o sevel istor parrez Plouvael. Lavarout a rin da gentañ ez eo mat-tre levr J.Y. EVEILLARD evit pezh a sell ouzh Plouvael, moarvat al lodenn wellañ eus e levr, pe da vihanañ al lodenn surañ. Un evezhiadenn a rankan ober, evelato kent kregiñ : ne seblant ket J.Y. EVEILLARD anaout ar pezhig bet embannet war Varr-Heol diwar-benn Plouvael ; ne oar ket brezhoneg marteze, se ne ouzon ket (1). Met e-lerc'h ober deoc'h ur vurutelladenn sec'h eus al levr e kontin deoc'h petra e c'hell deou «Blouvaelad» lavarout an eil d'egile e-skeud an dezenn-se, hag e c'hello hol lennerien gwelout drezo o-unan ar pezh a zo da glokaat e labour J.Y. Eveillard evit Plouvael ha dreist-holl merzout an dalvoudegezh anezhañ.

Deiz kentañ ar bloaz ez on aet da Blouvael da lidañ deroù ar bloaz nevez gant tud va familh, evel m'emañ ar c'hiz gant kalz a dud. Amzer am boa kent lein, da vont da saludiñ ur beleg eus Plouvael, person e Sant-Brieg, un istorour anezhañ hag en deus dastumet peadra da sevel ul levr tev diwar-benn istor Plouvael, dreist-holl war ar Reveuzi, war Govelloù Traof-Gwenn, hep kontañ e labour aketus war Abati Lante-nag.

Bloavezh mat hag all..

— «Bet ac'h eus lennet levr Eveillard ?

— «N'em eus ket bet amzer c'hoazh da breñañ anezhañ.

— «Ma l emezañ, mar kerez, ez aimp ganit betek warc'hoazh da greisteiz mar kerez, peogwir e choman fenoz da gousket e ti va c'hoar, ha peogwir e chomez ivez e Plouvael betek warc'hoazh goude lein. Sell dreist-holl ouzh ar pezh a lavar war hent Roazhon-Karaez e Plouvael hag e liviri din da soñj...».

Ha neuze paotr St-Brieg o tispakañ e gartennoù da zikousz din e gsvadennoù ha da c'houlenn va ali da sklaeraat : »ent pe boent. Eñ n'en devoa ket nemeur a dra da zeskiñ diganin, evel just : me avat...

— «Ma l emezañ, mar kerez, ez aimp d'ober un tamm tro emberr hon-daou. Da Bont-Terred an hini am eus c'hoant da vont (2).

— «Mat eo, nemet e vo ret mont gant da wetur, rak 'vel ouzout, 'dai ma teu an noz ne c'hellan mui bleniañ...».

'Benn deiz kentañ ar bloaz ec'h hira an deiz paz ur waz l Evel-se, goude peder eur hanter- eur an emgav- e chome ganimp un eur vat deiz ! Ha ni 'vont. Ehanañ ur pennadig e Traof-Gwenn war ribl ar stêr-Lie, da sellout betek pelec'h e tape ar stank vras a oa ranket da sevel da bourchas dour d'ar Govelloù. Ha d'erc'hel etrezek Sant-Gouenoù ha Pont-Terred. War an tu-dehoù kein un dorgenn : torgenn Langast-Bre. (3).

— «Evel just, eme va mignon, emañ ar gwirionez ganit, rak aze n'eus prud ebet level ma soñj gant kalz diouzh an anv Langastpre, pa gav dezho ez eo un anv gallek !». N'eus ket ezhomm da gaout ur sell krak evit gwelout ez eo ar Bre m'eo savet ar geriadenn warnañ, ur bre uzet-mik, ma seblant bezañ ul loen registarak en e c'hoarvez.

25

oust ma labouran brezhoneg nepken, em eus roet va «sekredoù» da anaout d'am c'henvroiz, d'o skoazellañ da skrivañ istor ar c'horn-bro. Bremañ e oar ar re a bled gant an istor-se ster ar ger **BRETOGN** evit Breton, ha kudenn ebet evito...

Met setu ni e Pont-Terred : ne oa ket diaes gwelout an teir sterig o kejañ eno a-us d'ar pont ; adalek ar pont eo e vez roet an anv a **LERI** d'ar stêr gant tud ar vro, ha da bep sterig ez eus un anv, na petra 'ta...

Stok eno, un ti, daou zen kozh ennañ, daou zen kozh eus ar jentilañ, ez on bet meur a wech o gwelout dija : eñ, un den dall, speredek, troet gant traoù kozh ar vro hag oc'h anaout ervat Bro-Borc'hoed. En dro-mañ avat, em gavomp nec'het un tamnig :

«*Va fried, eme an Itron, n'emañ ket war e du, tapet en deus ar grip...*»

Ha ni o'n em zigareziñ, prest da vont kuit :

— «*Chomit 'ta, aotronez, emezañ, ha me' responto deoc'h diouzh va gwellañ. Bet on e Paris, 'vit an deiziou, eno e oa 11-derez dindan zero, ha paket em eus va jeu...*»

Un teñzor a sanailhet e penn an den mat-tre. Ne oa ket bet pell va c'henvroad o kompren e pelec'h en em gave, hag eñ er-maez da vont d'e wetur da dapout e gartennoù, dont en-dro, dispakañ ar c'hartennoù-se hag en em lakaat da gemerout notennoù ha resisadurioù... Dalc'hit soñj, furcherien, n'eus netra dister e diskleriadurioù tud ar bobl... Ne dalvez ket ar boan menegiñ pep tra...

Un dra dreist-holl am boa c'hoant da glevout : «*Petra 'soñje an den kozh eus KROAZ PERRET war hent bras Beg-ar-Menez (Belaer)-Naoned.*»

Un tamm bihan nesoc'h da Veg-ar-Menez eget kroaz-hent brudet ar Pevar-Hent-Bras emañ ar Groaz-se (4). Ar hent-kozh Beg-ar-Menez-Naoned a red war gein tosennoù kreiz Departamant Aodoù-en-Hanternoz, hag eno emañ ar rann-dour : diouzh un tu ar gwazhioù hag ar stêrioù a ya etrezek ar Mor Atlantel ha war an tu all ar stêrioù a ya etrezek Mor-Breizh : an hini bennañ anezho, ar Rañs. Nebeut-tre a vammennoù ha ranket o deus parrezioù ar Menez ober ur sindikad etreze evit klask ar vammennoù-dour da sevel kastell-dour. Va menoz-me a zo sklaer : pa ne oa ket stank ar «pointoù-dour» evel ma vez lavaret, e oa dav merkañ d'ar vesajourien pelec'h e c'helljent kaout

evit o loened. **PERRET** evidon a zo penn-red, penn ur wazh-dour, mammenn, ur sterig bennak. Hed un tenn-fuzuilh diouzh an hent kozh emañ mammenn unan eus an teir «red» a ya d'ober al Leri. War ribl an hent e oa bet graet un ode da vont betek ar vammenn-se, ha lakaet ur merk, un arouez bennak : ur maen-bonn marteze, ha diwezhatoc'h ur «**GROAZ**» lesanvet **Kroaz-Perred**, da lavarout eo c'hoazh ur wech Kroaz Penn-ar-Red.


Setu an diskleriadur am boa roet. Evit an enklaskerien, merkomp e kaver e lec'h all an anv *Perred*. Er Morbihan (St-Abraham) ; e departamant Aodoù-an-Hanternoz, e Landebia, e Plelo (Peurloc'h), Sant-Yegu-ar-Menez, hag evel anv parrez e kichen Mur ha Gwareg. Met gwech ebet e departamant Penn-ar-Bed (5). Hen kaout a reer c'hoazh, mar plij e Plouvael, nepell diouzh mammenn bennañ ar sterig vihan, dezhi un anv eveek-tre : «*Blandron*».

Marteze ez it da lavarout din : «*Met pelec'h tezenn J.Y. Eveillard en afer-se ?*». Kompren a ran ne c'helle ket ar skrivagner anaout ar munudoù-se met evel ma welimp pelloc'h, e oa re strizh e dachenn-labour. Ret e vije bet dezhañ (lakomp evit Bro-Blouvael) menegiñ an hentoù kozh a gouezhe war hent roman Roazhon-Karaez : evit Plouvael neveneg, nemet hini Broel-Tual, an hini eno-eeun a ya betek kroazhent ar Pevar-Hent-bras da gejañ e-kreiz ar Menez gant hent meur an Naoned. An hini a save eus traoñ ar vourc'h etrezek Menez-ar-C'hont n'en deus ket her merzet zoken, war a seblant : Hent ar C'hêrioù evel m'eo anvet ar vro (6).

Goude bezañ trugarekaet an daou zen kozh, hetet bloavezh mat dezho o-daou, gwelloc'h yec'hed d'an hini arouezet, e tistrojomp d'ar gêr dre grec'h Sant Gouenoù ha neuze Sant-Jili-ar-Menez evit adkaout e-pad ur pennadig hent Broel-Tual Beg-ar-Menez, e Fahelo (7).

Un dra ouzhpenn am boa graet d'am mignon merzout e-keit ha m'edomp o kaozeal e Penn-Terred, distagadur anv ar gêrig a vez graet anezhi e galleg «*Collinée*» : Koednei, spiann ha fraezh ! Setu penaos e lavar Sant-Gouenoùz.

Antronz vintin, 2 a viz Genver, edomp adarre, va mignon, person e Sant-Brieg ha me, war an hentoù, met an dro-mañ, evit





mont da welout «kavadenn» J.Y. Eveillard. En dro-mañ ivez gant va gwetur. Ar bempvet pe ar c'hwech'vet gwech e oa din mont war an tu-se, rak me oa bet o troieta dre eno, hep kaout diskoulm ebet d'ar gudenn. Gwir eo e oamp bet holl lakaet da faziñ gant ar menoz ez eo dre Gêr-Herve eo e tremene hent kozh ROAZHON-KARAEZ (8). Gout a ouien e oa ur roudouz war an Ninian, rak an Ninian eo ar stêr a ranke an hent treuziñ, met evidon-me e oa roudouz an «Estrad» (*Via Strata, Korseul-Gwened*). Hen lavaret em boa da furcherien Blouvaël, met hini ebet ne oa bet o welout, ha me, pa oan bet ur wech o klask e oan aet dre an tu all, tu Goumene (Gommene) ha sac'het e-touez an orjal-pik hag ar roud-erjal da gefñver milin ar Waremm !

En dro-mañ gant levr Eveillard ne oa tu ebet da faziñ ! Ur wech ouzhpenn ez antreis e ti J.G. er Megerieur (9) gant ar beleg all ; hemañ a oa gantañ taolenn-douarou Plouvaël ar bloaz 1829... Me'oa bet o klask an hent kozh dirak ti J.G. hag adrek e di an hini 'oa ! Ma ! Bezet e vezo, finoc'h egedomp holl e oa bet J.Y. Eveillard, pe gentoc'h ec'h anaveze gwelloc'h e vicher egedomp-ni hag e ouie ober gant e gartennoù. Ret tennañ hon tog dezhañ !

Diskenn a rejomp eta gant an hent kozh betek ar stêr : 300 pe 400 m war hon troad. Nebeut-tre a gailhar, daoust ma oa an 2 a viz Genver. Aes-tre bale drezañ, nemet er penn nesañ d'ar gêriadennig anvet TREMOYAS... Ur gwall gudenn a zo da heul an anv-se : ne oan den ebet penaos skrivañ anezhañ ! «*Trémoyas*» eme an Nomenclature ; «*Trémoullas*» a skriv J.Y. Eveillard, goude menegiñ ar stumm roet gant kartennoù Cassini «*Trémohéac*». Mar geller en em harpañ war zistagadur ar vro, ne c'heller degemer nemet ar skritur kentañ TREMOYAS rak distaget e vez an anv gant un A hir, heñveloc'h ouzh un O eget ouzh un A ; distagadur ha na gaver ket e brezhoneg nag e galleg klasel, nemet er rannyezhoù romanek, hag ivez en Iwerzhoneg (10). Disheñvel ez eo an A diouzh an hini a gaver da skouer e Loudia (Loudieg) diwar «*Loudiac*», ar pezh a ziskouez n'eo ket sur tamm ebet skritur Cassini, nag an hini J.Y. Eveillard. Gwelloc'h heuliañ an «*Nomenclature*». Bremañ e vo gwelet petra a ginnigan-me.

Diskenn a rejomp eta betek ar stêr.

Ma ! nag a wech ne oan ket bet eno o pesketa dluzhed pa oan studier ha kloareg, tost da 50 vloaz 'zo (levit ar wech kentañ !). Eno e oa ar ROUDOZ hag a oa evidomp-ni un hent-karr hepken da dreuziñ ar stêrig !

— «*Ma ! eme va mignon, 'm eus aon edo ar wirionez ganit*».

Rak gout a ouie peseurt troidigezh am boa kinniget (hep bezañ peursur !) eus an anv TREMOYA : donemone. Neuze anv ar Roudouz. Setu perak am boa skrivet da vugale Skol Itron-Varia ar Sklerder e c'helle an anv-se talvezout ROUDOZ e gwirionez. Se non è vero... (11).

— «*Martez, a rezpontis, met TREMOYA a c'hell bezañ ivez evit TRE-MOUA: Moua o vezañ un anv-den ha zoken anv ur Sant a V... Iwerzhon !! Neuze TI-MOUA ?*»

P'edomp o tonet war hor c'hiz hor boa taolet evezh ouzh an torkadoù-beuz a oa dirak unan eus an tiez. Ur roudenn ouzhpenn eus tremenadenn ar Romaned dre amañ !

Amañ eo dav reizhañ un draig bennak e dispieg J.Y. Eveillard (paj 47) er pezh a lavar diwar-benn an «*ETRAT (Via Strata)* : «*Beg ar c'hra, emezañ, ez eo bevennet hon hent gant parkeier anvet «L'ETRA» (sic), ar pezh a ziskouez emaoamp war an hent mat*». Ya ! Met e beg ar c'hra en em gav end-eun hent Korseul-Gwened (ar gwir Via Strata) hag an hent-mañ eo en deus roet o anv d'ar parkeier meneget gant J.Y.E. ha n'eo ket hent Roazhon-Karaez. Dija e 1829, e oa drailhet a-walc'h ar pennadoù-hent en-dro d'ar c'hroazhent ha ne weled mui spis dre belec'h e kendalc'he pep hini anezho. Krediñ a reomp e oa hent Roazhon-Karaez ur «*Via Calceata (pe Calciata)*» evel m'hen diskouez an anv «*Chaussée*» a gaver amañ hag ahont...

Roudouz ar Via Strata war ar Ninian a gaver da gefñver keriadennig an Henvod (Le Hambot) 300 m uheloc'h eget hini ar Via Calceata : adkavet eo bet e deroù ar goañv-mañ (1975) da vare ar c'hrouezh-delioù, ha gant sikour kartennoù kozh dres dindan Lanneg an Abati (12). Mein a oa ouzh hec'h ober.

Met evit adkavout an hentoù goude kroazhent ar Vegerieur, e vo dav ober gant al luc'hskeudennig diwar-nij.

Met poent eo deomp marteze treiñ etrezek bourc'h Plouvaël : ur salud da Vroel-Tual hag ur sell ouzh an torkadoù-

beuz bet merzet dija gant J.Y. Eveillard. Dav, deomp treiñ war an tu dehoù en abeg d'ur bagad-saout, ha tremen dirak ar groaz kozh a gaver ur foto anezhi e levr J.Y.E. : poltred ar groaz a zo deuet-mat, met gallet en dije ar skrivagner diskouez gwelloc'h an hent roman ; an hent-mañ, en tu nesañ d'ar Vrec'haodierenn, n'eo mui pleustrapl abaoe pell 'zo ; ne oa tamm dical ebet d'an dour a chome eno d'ober poulladoù leun a fank, dres ar c'hontrol eus ar pennad etre ar Vegerieur hag an Ninian, ar pezh en deus sikouret ar pennad-mañ da vezañ darempredani a-walc'h betek vremañ.

Ar penn all eus hent ar Plouvaël-Lokronan, n'eo ket «*La Fourchette*» evel ma skriv J.Y.E., met e Pont-Loket. N'eus tu ebet da vezañ sur eus stêr ar gêr-mañ : tu a zo da gompren Pont-Losket, Pont-Devet. Perak ?

Setu-ni erru tost da Jegued hag e troomp a-gleiz etrezek ur gêriadennig all : Goudebin. Eno am boa aferoù personel da renkañ :

— «*Sell, emezon d'am c'hompagnon-beaj ; e-keit ha ma vin o renkañ va aferioù n'az po nemet mont d'un ti bennak d'ober un tamm kaoz, ha da c'houlenn doareoù diwar-benn istor ar c'horn-bro digant an dud. Met, mar deo gwir ar pezh a sonjan, e tle bezañ amañ en-dro d'ar gêriadennig pe ur c'hleuz, pe ur c'harzh, pe un hent pe un dra bennak o klozañ anezhi... Gwelet e vo...*».

Tra m'edo va c'henvroad o kuriuziñ un den kozh o fekañ en e liorz, edon-me oc'h ober va c'hefridi. A-boan echu ganin va c'hefridi -n'am boa ket bet ezhomm da antren en ti zoken- ha me o lavarout d'an den edon o komz gantañ :

— «*Petra eo ar c'hleuz bras a zo ahont ?*»

— «*Kleuz an hent*», emezañ.

— «*Peseurt hent ? Dre belec'h e tremene an hent-se ?*»

— «*Dre amañ, drek al loch...*»

Un nebeut kammedoù ha me sebezef o welout un hent kozh, uhj ar c'hleuzioù a bep tu dezhañ, hag en heñvel ouzh un douflez don : an hent kozh hag a rae tro ar gêriadenn !

Ha me kerkent o vont da c'hervel va mignon. Kan sebedennet-all...

An anv-se GOUDEBIN a zo diwar Goudeb gant an dibenn in o verkañ un anv-gwan. Goudeb a zo da rannañ e daou : Gou-Deb, Teb ger kar da Dec'h (tac'h). 29

En ur ger : *repu, goudor, lec'h da dec'hout, d'en em repuñ*. Orin ar ger a gaver e galianeg : *Votepos*, gant an anv-den «*Voteporiks*». Ar ger kembraek o klotañ gant Goudebin a zo GODEB gant an hevelep ster (gwel. Gelriadur y Brifysgol, paj. 1421) : *Llechfa, cuddfan, encifla, lloches, ogof ; hiding-place, covert, retreat, refuge ; cave*.

Goude-se, ne oa ket diaes gwiriekaat va goulakadur ; sellout ouzh ar c'hadastr kozh : an hent a rae evel ur garrezenn en-dro d'ar gêriadenn. D'an istorourien bremañ da resisaat an traoù, ha da ziskleriañ deomp peur ha perak e oa bet aozet ar seurt repu. Da glozañ gant ar ger-se : div pe deir GODIBIN a zo c'hoazh e Breizh. Unan e Speied, e Bro-Gernev, ha neuze GODIBIN VRAS ha GODIBIN VIHAN e Plougastell-Daoulaz.

N'eus ket ezhomm da lavarout deoc'h e oa stad vras enomp hon-daou gant hor baleadenn da Roudouz Tremoya hag hor c'havadennoù. Va mignon en devoa dastumet notennoù e-leizh, ha kaset donoc'h war-raok e studioù war hor parrez c'henidik. Ret e vo evel just, muzuliañ an hent a ra an dro da C'houdebin : led'ndet, donder, ha pigosat un tamm an douflez pe ar foz da welout penaos e oa aozet. Studieren Itron-Varia ar Sklerder eus Plouvaël, a vo stad anno oc'h ober al labour-se, evel m'o devoa graet pa oant aet da bigosat hent kozh Roazhon-Karaez, e-kichen ar Vrec'haodierenn.

(Kendalc'h paj. 47)

KLERG

## Den Dall Rokamadour

Se'oa ar bloaz .318... Ul lev bennak a chome gant ar beajour da ober : an hent etre ar Roc'h ha Landregar, hag e vije e penn veaj. Poent e oa dezhañ hastañ a-raok bezañ tapet gant an noz, rak erru e oa berr an daiz : miz Du oc'h ober e dalarioù da lezel e blas gant e vreur duoc'h egetañ : miz Kerzu... N'eo ket dre ma oa nac'het ar beajour gant an noz, met dre ma ne vez ket kavet nemeur a sikour 'dal ma vez koushet an deñvaljenn, p'en em gav an nen en ur pleg diaes... Deleat e oa bet an noz a-raok.

e Gwengamp, gant un tourmant ruz, evel n'en devoa gwelet biskoazh en e vuhez, ha panevet en devoa kavet ur charreter o tremen gant e garr, ne ouie ket penaos e vije bet echuet an traoù. Met da c'hras Doue ha da c'hras Sant Erwan, e oa bet tremenet e veaj diouzh ar c'hentañ : ne oa ket krog ar goariv da stardañ, ha d'ober d'ar bleizi donet er-maez eus o c'hoadoù don ; n'en devoa ket kavet a laeron kennebeut war e hent...

Anat e oa koulskoude ne oa ket un den eus ar vro, hag e teue eus a bell : gwisket e oa gant ur c'hroc'hen-gavr, botoù ponner a oa en e dreid, gamachoù an-dro d'e zivc'har, hag ur pezh tog ledan war e benn, dalc'het mat gant ul las skoulmet start dindan e c'hroñj da herzel outañ da vont gant an avel, rak penaos en devije gallet hen adaptout, pa ne wele takenn ebet : dall e oa an den kaezh ; ha da heñchañ e gammedoù e oa ur c'hi a veze graet anezhañ «Labrit», evel ul lodenn vat eus ar chas, e bro ar c'hreisteiz. Rak eus ar c'hreisteiz e oa ar c'hi hag e vestr : eus Rokamadour.

Graet e veze eus hor **beajour**, en e vro «*La cec de Rocamadour*», da lavaret eo : Den dall Rokamadour. Piv ac'hanoc'h n'en deus biskoazh klevet komz eus ROKAMADOUR ? Eus an iliz pintet war gern ur roc'hell sonn, ar ruiod moan, ar c'hastell, an tiez o krapat heilbini-heligentañ etrezo betek an iliz-se. Er bloaz 1162 e oa bet kavet eno en e bezh, korf un ermit santel AMADOUR, hag e-skeud-se e oa savet eno devoasion d'ar Werc'hez Vari, hag e krogas pardonerien e-leizh da zonet di da bediñ : eus Bro-Spagn, eus Bro-Italia, eus Bro-C'hall, ha zoken eus Breizh. Rak ar Vretoned en ur vont da Sant Jakez Kompostella a yae ivez da bediñ Itron-Varia-Rokamadour... «*La Céc de Rocamadour*» pe gentoc'h «*Den Dall Rokamadour*» evel ma raimp anezhañ bremañ, a oa en em gavet klañv e zaoulagad hag en bugel c'hoazh, ha tamm-ha-tamm, e oa deuet da vezañ dall. Ur paotr jentil e oa, ha leun a feiz hag a zevosion ; pedet en devoa ar Werc'hez da rentiñ dezhañ ar gweled, met, war a seblante, ne oa ket troet da selaou. Evit bevañ e oa en em lakaet da ganañ hag e tastume ur gwennege bannak evel-se, ken mat e oa e galon, ma roe alies da baouroc'h egetañ ar gwennege a c'helle kaout da

ziouerout. Ur vouezh eus ar c'haerañ en devoa, hag un dud e veze klevet e gantikou pe e ganaouennoù a gane en e yezh : an Okitaneg, pe gentoc'h, al Limouzineg, evel ma veze lavaret en amzer-se. Ken mat e oa e vemor ma kane kerkoulz all en italianeg, pe e spagnoleg hag un tammig e galleg. Dre forzh darempredif kement a estrenien e oa deuet a-benn da gompren o yezhoù har al latin da heul zoken.

Aet e oa ar vrud eus Sant Erwan dre Vreizh a-bezh, hag en tu all da Vreizh, hag e vad krog da gomz eus vertuzioù ha santelezh ar beleg breizhat-se. Pa glevas anv Sant Erwan evit ar wech kentañ, e reas keent-se un dra bennak d'hon den dall hag e santas e galon o tommañ ; ha ne vanke gwec'h ebet, pa gave tud eus Breizh o pardonañ e Rokamadour, da c'houlenn doareoù diganto diwar-benn ar beleg-se. Setu dre benaos en devoa prometet mont da bardonañ da Landreger, betek bez Dom Erwan, ha setu dre benaos hon eus kavet o sevel etrezek Landreger, e fin miz Du eus ar Du eus ar bloaz 1319. Chomet e oa bet e Rokamadour da dremen an hañv, da ganañ e ganaouennoù hag e gantikou da bardonerien Itron-Varia-Rokamadour, ha lakaet en devoa zoken ur gwennege bennak a-gostez. Graet gantañ e damm pak e oa aet etrezek «La Bretagne» evel ma lavare. Ur paotr seder e oa, ha yac'h-pesk a-hend-all, hag ur veaj 1 000 km bennak pe ouzhpenn : 250 lev, evel ma veze lavaret d'ar c'houlz-se ne oa ket evit ober aon dezhañ. War droad, evel just !

E-keit ha m'emaon o kontañ deoc'h berrañ ma c'hellan istor an Dall en deus bet amzer da erruout e Landreger ha da glask lojeiz en Ti Dom Erwan, en ti miret evit ar re baour, ar veajourien hag ar re a zeu da bediñ war vez Dom Erwan.

Re zivvezhat e oa evel just, d'an Dall da vont diouzhtu da zaoulinañ war ar Bez, met amzer en devije en deizioù war-lerc'h, rak deuet e oa da dremen an Azvent hag ul lodenn eus miz Genver, betek goude Gouel ar Rouanez.

Met an deiz war-lerc'h, e oa unan eus ar re gentañ o c'hortoz ma vije digoret dor an Iliz-Veur. Pa ne wele seurt e oa bet ret hen sikour da ziskenn ar pazennoù ha da

vont da zaoulinañ e-tal bez Dom Erwan. Met trawalc'h e oa hen sikour ur wech, rak da c'houde e oa barrek gant e gi d'en em zibab e-unan. Tout an dud a oar o devez an dud dall, ur bempvet skiant, evel ma vez lavaret : diouzh trouz o zreid, diouzh trouz ar vazh a vez ganto ec'h ouzont war-bouez nebeut hag-en ez eo diskoilh ha diriskl an hent dirazo. Fur ha devot e oa chomet an Dall e-pad an oferenn. Pa voe echu an oferenn avat, e voe klevet o sevel e vouez hag o pediñ a-vouezh-uhel. Estonet e oa ar re a oa o vont er-maez eus an iliz o klevout an den-se gwisket gant ur porpant kroc'hen-gavr, ur vazh en e zorn, hag ur c'hi gourvezet didrouz e-harz e dreid, o pediñ er stumm-se. Met ne oa ket ar wech kentañ dezho da welout traoù sebezus, ha kalz souezhusoc'h evit-se, dreist-holl pa rae Dom Erwan ur burzhud bennak : huchadeg, kanadeg a veze klevet, hag a-benn 1319 ne oa gouest den ebet da gantañ ar burzhudoù graet gant an Aotrou Doue dre veritout e Servijer Santel : Dom Erwan, marvet 16 vloaz a oa (1303).

Ne oa ket hir-hir ar pezh a lavare an Den Dall da Zom Erwan, met un nerzh hag ur fiziañs vras a santed da heul e gomzoù : «*O sant Ives, ieu m'avodi a vos e vos demandi de me rendre la vista !*». Derc'hel a reas an den kaezh da bediñ Dom Erwan, kent kuitaas an iliz ha mont d'an ti e-lec'h ma veze o lojan, da glask un tamm boued... Met marteze ez oc'h evel Landregiz ar bloaz 1319, ha n'hoc'h eus ket komprenet pedenn Dall Rokamadour. Evel-hen e lavaras : «*O Sant Erwan, en em ouestlañ a ran deoc'h hag e c'houlannan diganeoc'h rentiñ din ar gweled !*».

Bez'e oa evelkent e Landreger, konversanted hag a yae d'ar broioù pell d'ober konfers ha da brenañ gwin, ha neuze meur a hini bet aet da bardonañ da Sant Jakez Kompostella hag a gompene ar pezh a lavare an Dall, ha setu dre benaos eo bet miret ar gerioù-se.

Evit pezh a sell ouzh al lojan hag ar bevañ, n'en devoa an Dall digarez ebet da vezañ nac'het : chom a raje ar pezh a garje, rak ur pec'hed bras e vije bet skeiñ ur paour er-maez, nac'h outañ an aluzen, pa oa ken bev ha ken tost c'hoazh skousriou diapar Dom Erwan. Met Den Dall Rokamadour ne oa ket ur paour evel ar re all : ur vourzh aour en devoa, kaner hep e bar e oa, muziker mat ivez gant e dammig pif hañval a-walc'h ouzh ur fleüt hag a veze graet

anezhañ «galoubed». Divizet en devoa paeañ e frejoù, ha setu perak, pa ne veze ket e-tal bez Dom Erwan, e veze dindan ar porched o kanañ pe o son hag o tastum ur gwennege bennak da paeañ e frejoù en ti-lojan, ha da ginnig profoù en enor da Zom Erwan. E berr-amzer e oa deuet da vezañ anavezet.

Ken jentil e oa ha kan mat ouzh paouroc'h egetañ, evel m'hon eus lavaret dija, ma oa deuet Landregiz d'a garout ha d'ober ar pezh a oa an o galloud evit dougen dorn dezhañ. N'em eus ket ezhomm da lavarout a veze gwelet an Dall alies 'kostez Kervarzhin, stok e Landreger, evel ma oar an holl. Eno e oa bet ganet Erwan Helouiri, eno e oa chomet e ti e dud, betek an oad a 12 vloaz a-rak mont da studiañ da Bariz, eno e oa bet marvet d'an 19 a viz Mae 1303. Re bell e vije bet mont betek Tredraezh e-lec'h ma oa bet Dom Erwan person, met ken erru-mat e oa gant an dud, ma veze kinniget dezhañ mont, pa gare, betek Louaneg. Derc'hel a reas da lavarout e bedenn : «*O sant Ives, ieu m'avodi a vos, e vos demandi de me rendre la vista !*».

E-touez ar re a veze bodet ar vugale alies en-dro dezhañ, pa veze o kanañ pe o

E-touez ar re a veze bodet alies en-dro dezhañ, pa veze o kanañ pe o c'hoari «galoubed» e oa ar vugale Yann-Grenn, daoust ne gomprenet ket kalz a dra e ganaouennoù ha kantikoù Dall Rokamadour. Met pa oa an Azvent ha Gouel Nedeleg o tostaat e kane hemañ kantikoù Nedeleg hag a veze klevet arno gerioù o tont alies evel NADALI NADALI (Noël I Noël I) ha war ar plassennoù e veze klevet Yann-Grenn o terc'hel da ganañ d'e dro : NADALI NADALI.

Erru e oa Gouel Nedeleg, ha prest e oa p. p tra benn ofis ar Peilgant (noz Nedeleg) a oa da vezañ kanet en Iliz-Veur gant an Aotrou Yehann Rigaod, eskob Landreger war-lerc'h an Aotrou Jafrez Tournemina (1296-1317) a oa eskob pa oa marvet Dom Erwan... Kaer e voe an ofisoù, kaer ar c'hantikou pe an imnoù latin ha kaer ivez ar c'hantik nevez-mañ :

*Doue ganimp, Emmanuel,  
Hervez promesa Gabriel  
A zo paret en Israel  
Ganet eus ar Werc'hez fidel*

An Aotrou 'n Eskob en e brezegenn a gomzas diwar-benn ar sklerijenn degaset gant Mab Doue d'ar bed : «Sklerijenn an daoulagad, emezañ, a zo un donezon eus ar c'haerañ a-berzh an Aotrou Doue, evel ma c'hellomp kompren o welout hor breur eus Bro-Okitania, eus Rokamadour, deuet amañ da c'houlenn ar c'hras-se digant an Aotrou Doue dre veritoù Dom Erwan (Plijet gante reiñ dezhañ e vennad). Met kaeroc'h eo c'hoazh ar sklerijenn a ra dimp anavezout ha karout Doue hag hor breudeur... Bezomp fidel da heuliañ sklerijenn ar Steredenn hag en em gavimp a-hont e Betlehem ar Baradoz...»

Den Dall Rokamadour, pa ne ouie ket brezhoneg, n'en devoa ket komprenet sarmon an eskob, evel just, daoust ma seblante dezhañ bezañ intentet «Rokamadour»... Pa voe echu an ofis ez eas an dall d'ober e bedenn da Sant Erwan : «O sant Ives, emezañ, reddët-me la clartat !». (Sant Erwan, rentit din ar sklerijenn 15). Met Sant Erwan ne seblante ket kompren yezh Okitania !

An deiz a hiziv, ar pezh a gont gant Nedeleg ez eo ar c'hoariellajoù, ar predoù mat. En amzer St Erwan, ha goude, e oa enor pep familh degemer ur paour bennak ouzh o zaol. Ha setu penaos goude ma oa echu ofis an Nedeleg e santas Dall Rokamadour unan bennak o skeiñ war e skoaz hag ouzh e bediñ da vont da zebriñ d'an Eskopti : an Aotrou 'n Eskob e-unan eo a oa deuet d'e bediñ... Daoust ma ne oa ket bet roet e vennad dezhañ, na gant ar Mabig-Jezuz, na gant e Vamm Santel, na dre veritoù Sant Erwan, e tremenas Den Dall Rokamadour ur gouel-Nedeleg leun a sklerijenn hag a sklerder evit e galon hag e spered.

Derc'hel a rae avat rod an amzer da dreñ, ha daoust m'en em bilje e-touez kristenien vat Landreger, hag e-tal Bez Dom Erwan, e oa point d'an Den Dall soñjal distreiñ etrezek e vro, rak tost d'ur miz en devije ezhomm, evit en em gaout e

Rokamadour abred a-walc'h da ziskuizhañ eus e veaj, ha da vezañ prest a-benn Gouelioù-Pask ha distro ar Bardonerien da Itron-Varia-Rokamadour. Tremenet e oa Deiz kentañ'r Bloaz, hag en em gavet Vijil gouel an Epifaniezh pe, Gouel ar Rouanez, mar kavit gwel. Kerent ha tremenet ar Gouelioù e kemerje penn e hent etrezek ar gêr. Ma ne oa ket bet selaouet gant Dom Erwan, n'en devoa tamm keuz ebet d'e boan, hag ur prof kaer e oa e-sell da ober da Zom Erwan (da Sant Erwan, evel ma lavare, daoust ne oa ket c'hoazh Erwan war roll ar Sent !)

Un tamm nec'hamant a oa en e ene koulskoude, abalamour d'e vignoned du-hont e Rokamadour hag o devoa hen dizaliet mil ha mil gwech da vont d'en em goll etrezek «La Bretagne». En noz-se n'en devoa ket gallet kousket, daoust ma oa kousker mat, ha gant ar boan en e zaoulagad e oa, ar pezh n'en em gave ket gantañ gwall allies. Sevel a reas d'an eur ma oa kustum ha mont d'an iliz da bediñ war bez Sant Erwan. Pa zistroas d'ar gêr da zebriñ e zijuniñ e sante ponner e benn hag e rankas mont da ober un tamm kousk war ar plouz a servije dezhañ da wele.

Pegeit e chomas kousket, ne ouie ket e-unan, met ne oa ket bet pell. Pa zihunas e chomas sebedennet-mik. Krediñ a rae dezhañ edo oc'h huñvreal ; seblantout a rae dezhañ e stoke an traoù ouzh e zaoulagad hag e tremenas e zorn war e dal da bellaat, da zistokañ anezhe. Met kaer en devoa ober... Ur youc'hadenn a laoskas, ul lamm a reas diwar e wele. Krial, dañsal, kanañ, lamm a rae, evel ur bugel.

Gout a ouie e oa bet selaouet e bedenn gant Doue dre veritoù Sant Erwan «Sant Ives, reddët-me la clartat !». Deuet e oa da wir. Ken e krene an Dall kaezh war e dreid, poan dezhañ o krediñ e oa en em gavet ur seurt burzhud gantañ.

Kerkent avat, ez eas ar c'heloù dre gêr Landreger. Abaoe ar 5 sizhunvezh bennak ma oa en em gavet «Lo Cec Rokamadour» e Landreger e oa anavezat gant an holl ; an Aotrou 'n Eskob a voe degemennet dezhañ ar c'heloù, hag a zeuas e-unan gant person an Iliz-Veur, gant e vikeled-bras da welout Den Dall Rokamadour. Hemañ a oa aet da zaoulinañ war vez Sant Erwan, a vadoberrour hag e pede a-greiz kalon...

E-pad ar c'heit-se avat, e oa en em

gavet un dra eveek : pa oa barrek an Dall d'en em ren e-unan, en devoa ankouna-c'hæet e gi, hag hemañ spontet o welout kement a dud en-dro d'e vestr a rede hag a zerede a bep tu en ur gunudal... Ne ouie ket petra a c'hoare d'e vestr. «Lahrit ! Lahrit !» eme hemañ, hag ar c'hi sentus a zeuas da c'hourvez a-benn ar fin e-harz treid e vestr.

Bep tro avat, ma veze graet ur pareañs burzhudus gant Sant Erwan, e veze graet prosession, sonet ar c'hleier ha kanet an Te Deum. Graet e voe kement-se evit an Dall bet «sklerijennet» hag e teredas holl dud kêr d'ar prosession evit kanañ ur wech ouzhpenn meuleudi hag anaoudegezh-vat da Zoue ha d'e servijer Dom Erwan Helouri.

An deiz war-lerc'h, deiz Gouel ar Rouanez, e voe kanet an Oferenn adarre war an ton bras gant an Aotrou Rigoad, eskob Landreger hag e tennas danvez e sarmon eus Ofis an Epifaniezh : «Gwelet hon eus E steredenn hag ez omp deuet gant profoù da adoriñ anezhañ».

Profoù ? Uhel ouzh krec'h e-pign ouzh bolz an Iliz-Veur e oa profoù a bep seurt da ziskouez anaoudegezh-vat ar re bet paret : bagioù-koar, pennoù-koar, izili-koar, bruchedoù-koar. Hag o teñh en-dro d'ar Relegoù santel : Goleier-koar ken tev darn ha brec'h un den... Den Dall Rokamadour a gomunias en oferenn dirak an holl. Echu e oa e belerinañ da Sant Erwan.

Den Dall Rokamadour a gemeras hent ar gêr, yec'hed 'leizh e izili, levenez 'leizh e galon. O tistreiñ etrezek e vro, ar vro-se anvet diwezhatoc'h, kalz diwezhatoc'h gant Mistral : «L'Empèri dou Souleu» (Rouantelezh an Heol !) e kana kantik Nedeleg, e brezhoneg :

*Doue ganimp Emmanuel...*

#### NOTENN

Tennet eus «Koulmig ar Gindiv 14 e via Keras 1975. Anañ ez eus bet graet ur gontadenn gant ur burzhud gwirion gant Sant Erwan a vo danevellet diwezhatoc'h. Maktaneg a zo bet troet diwar al latin gant an Aotrou SILVAN TOULZE, person TREPONS, a-kichen Kours, majoral ar Felbirezh.

#### Klerg

### An hini a son e gloc'h

Souezhus a-walc'h ez eo lenn an eil Lizer St Paul da Gorintiz an Abostol bras o'n em veuliñ, o son e gloc'h, dre gomz eus al labourioù kaer graet gantañ hag eus e boanioù kalet... Setu ma fellas un devezh da berson Bullien dispenn e roudoù ! O ! eus a bell...

... Aet e oa eta ar person da balat, ur soudanenn gozh gantañ war e geln, troñset uhel a-walc'h, ha dibrenn dindan e c'hroñj, rak pa vezer o palat e vez tomm d'an nen ; ha neuze kozh votoù-koad en e dreid...

Un taol-kloc'h. Ha kerent un den o treuziñ an ti hag o tonet er jardin. Un den bras, moan, un tog war e benn, unan eus e zivrec'h e-pign ouzh e gostez, ur warenn ront war unan eus e zaoulagad (ur monokl a lavare an dud). Hag eñ o taurel seder «Aotrou Person !».

Ar person o plantañ e bal e douar, o lezel e soudanenn da ziskenn hag o stagañ da breñnañ anezhi, en ur zonet war an alez vras, war alez greiz ar jardin, evit ober un degemer onest d'an hini a oa o tegouezhout : Aotrou Kont Kerewen, mar plij, an Aotrou Kergaradeg !

— «Ur blijadur eo din ho kwelout, Aotrou Person, o labourat avel-se. Arabat deoc'h ober kement-se a charre, lezit ho soudanenn evel m'emañ, arabat deoc'h en em chalañ ganin».

Hag hep ardoù, setu eñ o taurel e vrec'h dreist skoz ar beleg, gant kalz a vignonizh.

— «Mont a ra mat an traoù ?», emazañ.

— «Ya, a-walc'h, Aotrou Kont, bennozh Doue deoc'h...»

Neuze goude un toulladig komzoù dibous, setu an Aotrou Kont o tonet sirius.

— «N'ouzoc'h ket, Aotrou Person ? Me 'zo o tonet war-eeun eus a Lannuon Tec'h ma oan pedet, asambles gant «pennoù-bras ar vro» da vont da welout an Elpined... Ha pa oa echu an traoù, setu an Elpined oc'h ober an din da vont un tamm bihan a-gostez, evel p'an dije bet c'hoant da gantañ din traoù kuzh...»

33 Krog a oa ar person da zigoriñ e



skouarn. Ha daoust d'e zaoulagad glas-louet, divuhez a-walc'h, ne oa na finoc'h na sotoc'h eget ar re all, evel just, hag e tamzvine e selle «an traou kuzh-se» outañ e-unan.

An Aotrou Kont a reas ur stardadennig leun a vadelezh war chok ar person hag o parañ e zaoulagad warnañ :

— «An Eilprefed en deus goulnennet diganin evel-hen : Peseurt person hoc'h eus c'hwit tapet, e Bullen ?

— Peseurt person ? Un den mat, ur beleg d'e zever ; plijout a ra dimp !

— Sur oc'h, Aotrou Kont, ez eo ar beleg-se, un den ken mat ha ma soñj ganeoc'h ?

— Petra 'fell deoc'h lavarout, Aotrou 'n Eilprefed ?

— Troet eo gant ar brezhoneg, neketa ?

— Feiz ! Ya, troet eo gant ar brezhoneg ha gant Breizh. Sarmon a ra e brezhoneg, goude bezañ desket anezhañ. Ret eo klevout anezhañ o prezeg. Me ne glevan ket mat ha neuze ne gomprenan ket mat brezhoneg. Met un dud'ez eo gwelot penaos e teu gerioù gantañ. Un den gouizie-k-tre eo. Ha pa lenn un dra bennak, e talvez ar boan hen selaou, rak lenn a ra e plaen, hep lezel e vouezh da gouezhañ an dister an...».

(Ar person a selaoue en ur vinc'hoarzhin, rak anaout a rae ervat ar c'hrennlavar Na pa vefec'h du evel mouar, ez oc'h gwenn da neb ho kar ! Met hast en devoa da glevout petra 'oa an Aotrou Kont o vont da zispakañ dezhañ ! An Aotrou Kont-se hag a ziskouez dezhañ dre ur jestr ken madelezhuz e vignoniezh en e geñver...).

— «Ma l'eme an Aotrou Kont neuze. An Eilprefed en deus lavaret din : Ho person a zo un den danjerus.

— «Danjerus ! Biskoazh kement all !

— «Ya, Aotrou Kont, en em dromplañ a rit diwar-benn ho person. Un den danjerus-tre ez eo. An den-se en deus darempredoù gant torfedourien o deus bet d'ober gant ar Justis hag o deus ranket tec'hel d'ar broioù estreañjour. Hag eno emaint oc'h ober bruderezh gwashañ ma c'hellont a-enep hor Bro-Frañs.

— «Estonet an ganeoc'h, Aotrou 'n Eilprefed. C'hwit 'zo o kontañ traou din aze ha n'on ket evit krediñ. Unan bennak en deus roet da grediñ deoc'h traou ha ne c'hellont ket bezañ gwir.

An Aotrou Kont a waskas adarre war chok ar beleg gant muioc'h c'hoazh a vignoniezh :

— «Me 'zo o tonet war-eeun eus a Lannuon, ha deuet da restañ deoc'h amañ. Me'm eus istim vras evidoc'h ; c'hwit 'zo ur beleg mat, c'hwit 'zo ur Breizhad mat : droed hoc'h eus da vezañ, chomit Breizhad mat. Met ret eo din lavarout deoc'h e vefen glac'haret ha glac'haret-bras m'en em gavfe un droug bennak ganeoc'h. Diwallit 'ta, bezit war-eevezh.

— «Met, a glaskas ar person lavarout, n'eus mann ebet gwir aze.

— «Me'oar a-walc'h, Aotrou Person, met chomit sioul ha c'hoazh ur wech dalc'hit didrouz gant ho hent. Me' m eus fiziañs ennoc'h. Kenavo».

Derc'hel a reas ar person da blommañ e damm-karrezad-douar, ha tra ma plomme, ec'h adtremane war ar pezh en devoa klevet gant an Aotrou Kont. Darempredoù gant tud o devoa bet d'ober gant ar justis evel torfedourien ? Lojañ tud kondaonet gant ar justis ? Biskoazh kement all ! Ha pere ? E gwirionez en devoa darempredoù gant ur skrivagner aet da chom en tu all d'ar mor : Iwerzhon (Eire), R. Hemon a oa bet klasket dizenoriñ e-barzh ur prosez e 1947, met kement a drouz a oa bet savet a-enep ar Gouarnamant m'en devoa ranket hemañ reiñ urzh da Gomiser ar Republik da veuliñ labour ar skirvagner ! Tud all ? Ar person ne wele ket. Hogen ar pezh a oa sur eo e oa «fichennet» war gaieroù Eilprefed Lannuon ha war gaieroù all, evel ma vo tu da ziskouez diwezhatoc'h.

Pa vez c'hoant da lazhañ e gi e lavarer ez eo kilañ. Hag evel m'emañ ar c'hiz gant an dud a vez fichennet evel-se e tiez an dud e-karg, e vezer prest da grediñ (resped deoc'h !) kement «bromm» a vez laosket enep dezho, dreist-holl ma vez livet ar «bromm»-se e glas pe dalc'het war beg moan un ibilh (diaesañ tra a zo er bed da ober, hervez !). Met bremañ gant ar mekanik nevez a vez graet anezhañ «sonenroller» gant ar vrezhonegerien nevez (ur magnetofon, sañset !) e c'heller mirout trouz ar «bromm»-se gant resped deoc'h, ha treiñ boutonenn an «ampli» d'hen kreskiñ !

J. Konan

## An Tremeniad

Kreisteiz hanter anezhi. Poent eo monet da verren. Ha me er burev e-pad ar beure, ez eus savet naon din. Hastañ a ran enta war-du dorzioù ar pignerezed.

Dres pa'n em gavan a-dal dezhe ez eus unan oc'h erruout, hanter-garget a dud o tonet eus an estajoù uheloc'h. N'anavezan den e-mesk ar re a zo aze. En ur serr-lagad, en em gavomp en traoñ paneogwir n'eus arsav ebet etre ar pemzekvet estaj e-lec'h ma labouran hag al leur-draon.

Disteurel a ra ar bignerez he c'harg en degemerva ec'hon o talvezout da antre d'ar pikol savadur a wint e zaou-ugent solieradur uheloc'h eget holl diez ar rann-ger.

Kerzhout a ran davet unan eus an norozioù-tro a daol war ar straed, hogen, a-vec'h tremenet ganin dor ar maez, e kav din emañ o vonet da zamvougañ gant an toufor o ren er straed en devezh-se a viz Gouere. Gwashed kemm gant freskter an diabarzh aereizhet ! Pan on war dreuziñ an hent, setu ul luc'hedenn o fregañ an oabl hag un tarzh-kurun o strakal bouzarus. Kerhent, koulz lavarout, e krog pezhioù glavennoù klouar da gouezhañ ha neuze, a-sav-taol, e ra glav a-bil evel skeiñ gant ar bezel. A-redek e tistroan da glask disc'hlav dindan toennig unan eus porchedoù ar skraber-oabl. Ur paotr erru war an oad a zegouezh ivez war ma lerc'h. Dihelc'het eo, berr war e gezeg, evel ma leverer. Glebiet-mat eo bet. Gant un taol eus e zorn dehoù e fell dezhañ stlepel dioutañ an dour o teverañ eus e vlev. Peg eo o verr-roched c'hell ouzh e gorf.

— «Arnev milliget ! emezañ en ur drein d'am c'haout. «En tu-hont da vezañ gleb en a-raok e-barzh e zilhad gant ar c'hwizenn, e vezer trempet war-benn gant un dour-beuz-an-diaoul evel-hen !».

C'hoarzhin a ra o welout e pe stad ez eo lakaet.

— «Fedardaouia ya !» emezon. «Tapec'het hoc'h eus an drell !».

— «Da vhanañ !» emezañ c'hoazh, «n'eus nisk ebet da bakañ riv, ken tomm hag ez eo an amzer : un tamm distañ a ra vad !».

Hag eñ da c'hoarzhin adarre evel pa vije bet c'hoarvezet un taol farsus bennak

gantañ. Tennañ a ra ur pakad sigarettennoù «Du Maurier» eus godellig e verr-roched.

— «Brav eo din c'hoazh pa n'eo ket tremp ar re-mañ. Bez'ho po unan ?»

— «N'am bo ket. Bennozh-Doue deoc'h !» a respontan. «Me a zo ur butuner korn».

— «Hopala, ma chimik n'int mat da vann ebet ken ! Evel p'am bije o lakaet e glec'h ! Bez'hoc'h eus tan, mar plij ?».

Ma direnn a dapan eus ma god. Tanañ a ra e sigaretenn. Goude div pe deir sachadenn warnezhi ha ken lies a vomm-moged e chom ur pennad da brederiañ. Etre keit-se e talc'h ar barradoù-arned da gouezhañ, ar straed o vonet da stêr. N'eus den ebet ken war vale. Ar c'hiri-dre-dan, en ur dremen, a fiistr dour war ar riblennoù. Chomet ez eus ur bern tud e degemerva ar skraber-oabl da c'hortoz, er freskadurezh, ar glav da spanaat. N'eus nemadomp hon-daou ar porched-diavaez, andra ma talc'h al luc'hed da flammañ en oabl du hag ar c'hurun da grozal ken ez eo fromus.

— «Gouzout a ouzoc'h», a lavar ar paotr kozh a-greiz-holl, «ha posubl e padfe kement-mañ div eur c'hoazh, ne ran ket a van : amzer am eus !»

— «A !», emezon-me.

Ur par berr e chom ma c'hendivizour dilavar ha neuze, krak, e c'houlenn diganin.

— «Pa oad, e gav deoc'h, ez on-me ?»

— «N'ouzont ket a-walc'h»

Kavout a ra din ez eo en-dro da dri-ugent vloaz, met d'ober plijadur dezhañ e lavaran :

— «Pemp bloaz ha hanter-kant ?»

Plijadur am boa c'hoant d'ober dezhañ. Deuet on a-benn : mousc'hoarzhin a ra an den, laouen. Anat eo ez eus stad enañ.

— «Lavaret e vez se din alies» a anzav-eh. «Koulskoude, pell en amzer dremenet emañ ma fempvet bloavezh ha hanter-kant. D'ar c'houlz-se, ez oan c'hoazh evel ur paotr yaouank. Labourat e raen start : devezhoù hir hag ar gopr ne oa ket diouzh ar boan, m'hen asur deoc'h, aotrou !. Ha bremañ, setu me degouezhet em farnzek bloavezh ha tri-ugent !».

— «Biken», a estlammañ, souzhet, en'em bije kredet ez oc'h ken kozh-se !».

— «Hag evelkent, a gendalc'has-eh, vez on. Tost da zek vloaz 'zo ez on paouezet da labourat. Brevañ a ran diwar al levez-kozhni a vez roet d'ar re posh gant ar gouarnamant. Se a zo kinek e leveren

deoc'h bremañ ne don ket nec'het ha pa bedfe ar barrad-mañ div eur horolaj : amzer am eus !».

— «Ha ne gavit ket start enoës chom dilabour evel-se, yac'h ha serzh evel m'ho kwelan ?»

— «Lavaret em eus deoc'h ne labourer ket, n'am eus ket lavaret deoc'h avat ne raen netra !».

— «Pan anzavin ouzhoc'h ar wirionez, ne gomprenan ket kaer ho toare !», emezon, damsebezennet.

— «Gortozit, ma tisplegan deoc'h ! Eveldon-me he deus ma fried leve ar re-gozh : trawalc'h hor bez da vevañ. N'eo ket druz-druz an traoù met tapout a reomp skoulmañ. Ul lojeiz kozh hon eus : ne goust ket kalz tra dimp ar feurm anezhañ, met ne vezomp ennañ nemet pa vez ar goañv kalet o ren. D'ar c'houlz-se, e chomomp da ziskuizhañ. Gwech ha tro ez eomp da weladenniñ kerent ha mignoned pe da reiñ un tamm sikour d'hon bugale hag a zo dimezet.

Adalek Pask avat bete penn-kentañ miz Kerzu ne vezomp ket amañ e kêr, met daou-c'hant kilometr ac'honan er c'hontre e-lec'h ma'z on ganet ha maget. Un toull ti-koad am eus er c'hoadoù hag eno eo e vevomp, ma gwreg ha me.

— «Hag en em blijout a rit er c'hoadoù ho-taou hoc'h-unan ?»

— «En em blijout ? Barr e kavomp ar mizioù a dremenomp en natur. Eno n'hon bez kouist ebet, koulz lavarout. Ur bern traoù a zo er forest : plant a bep seurt, frouezh, gedon, klujiri. Ha tañvaet hoc'h eus bet dluzhed ar stêrioù ha beked al lennoù ? Pa gomzan a lennoù, dres dirak ma ziig-prenn ez eus unan : ur wir berlezenn ! Diouzh ar beure abred e vourran o krapat war c'horre an dosennig a zo a-dreñv an ti, d'ober evel an Indianed : sellout ouzh an heol-sav o tiffukañ gorrek a-douez ar gwez en tu all d'al lenn. Neuze, Aotrou, n'eo ket dour a vez enni ken, met aour melen hag arc'hant gwenn o tarlintrañ, ur marzh ! N'anavezan netra kaeroc'h eget se. Ar vuhez wirion eo a vever e kontreou an Norz, en natur, aotrou. Eno, ne vouzaret ket un den gant ar skingomz evel e kêr. Ne glever nemet geizadeg an evnédigoù, ragach ar gegin, kriig skiltr ar gwiltver, beogadenn ar bongorz pe goagadenn ar vran vras. Marteze n'am c'hredfec'h ket mar lavarfen deoc'h em eus doñvaet gedon hag a dosta da zebriñ em boz ! Eno e gwirionez e vezan em bleud. Met trawalc'h am eus kontet

deoc'h ha hep mar ez oc'h skuizh ouzh ma c'hlevout !».

— «N'on ket avat !», a respontan. «Er c'hontrol, ur blijadur eo bet din.»

— «Warc'hoazh ar beure e vin duhont adarre.»

— «Ma ! Karout a rafen monet ganeoc'h,» a lavaran dezhañ. Siwazh, stag on ouzh ma labour.»

— «Yaouank oc'h c'hoazh, hogen ho tro a zegouezho ivez, mar kirit. Evidon-me, mar don deuet e kêr hiziv ez eo evit kaout arc'hant ma leve-kozhni ha hini ma gwreg. Anez, ne vefen ket o leskiñ ma zreid war asfalt ar stradoù lous-mañ.»

Ardevel a ra ar glav. Dirazomp, war ar riblenn, e tremen ur paotr dilhad truilhennek endanañ, ruz e zremm hag an dour o teverañ dioutañ.

— «Sellit ouzh herañ,» eme baotr ar c'hoadoù, «n'eo ket o lipat kordenn ar puñs eo en deus tapet ar fri-tomatez-se.»

N'on ket evit herzel da c'hoarziñ gant ar c'hwek ha gant an dic'hortoz ez eo deuet an evezhliadenn-se gantañ.

— «C'hoarzhin a rit ! Me avat, pa welan ur c'hewenn evel hennezh ez a droug ennon.»

— «Droug ennoc'h ?»

— «Ya, kazi ! Sofjit 'ta, ar seurt tud-se ha na reont ket ur fulenn war ar plaen a-hed o buhez, e-pad an deiz o kloukañ bannac'hoù, ac'hanta ! Pa vezont pemp bloaz ha tri-ugent o devez an hevelep leve ganiñ digant ar gouarnamant.»

— «Petra a refet ken ?», emezon.

— «N'eo ket reizh !» a daol-eñ krak.

«Met Petra a zo reizh amañ e kêr ? N'eus nemet en Norz, du-hont, m'emañ ar peoc'h hag ar Reizh o ren !».

Tavet eo ar glav bremañ hag emañ an oabl o sklaeraat.

— «Kenavo, aotrou» a lavar din trumm en ur sevel e zorn, «ha chañs vat deoc'h !».

Diskenn a ra war ar riblenn hag eñ da vonet evel ma'z oa deuet.

— «Deoc'h ivez !», emezon d'am zro. «Kenavo !».

Ken buan e pella ma n'ouzon ket ha klevout a ra ma c'himiad.

Jakez RONAN  
1975

G. Bruneau

## Da vro kenkiziu «an Amerikaned»

N'eus nemedon en ti. War lien-koaret an daol ne chom nemet boliennoù goulo. Ne glevan nemet trouz ingal ar momeder a dalm e daolioù ingal e korn ar sal-debriñ. War gwerennoù ar prenestr e tiver goustadik takennoù dour. Emañ beuzet al liorz dindan al lusenn.

Yann eo a spurmantan o tiveauañ eus al lusenn. Dont a ra betek an nor. Stekiñ a ra taolioù munut.

— «D'eus'ta e-barzh, Yann !»

Yann a zeu-tre. Komz a reomp diwar an ar a ra. Ha Yann neuze :

— «Petra a rez bremañ ?»

— «N'em eus koulz lavarout netra d'ar paot ar beure-mañ.»

Perak ne zeufes gant Mariannig ha me da bremañ vara dous da Rualleg ?

Ha me da efivoñ ar weladenn nemet ar boa graet, pemzek vloaz'z da vro c'hennidennig, gwreg yaouank Yann. Hji eo he duz val alet da vont betek eno.

Ur c'haer a veurevezh miz Gouere e oa. Lintrañ a rae ar maezioù dindan flouradenn an heol ha richanañ a rae al laboused war ar c'hleuzioù. Ne oan tamm ebet pinvidik d'ar mare-se, ha war varc'h-houarn eo ez is. Er baner a-dreñv e kane va merc'h, gounezet gant al levenez. Goustadik e pignis gant ar grec'hienn. Divizet em boa chom ur pennadig er vourc'h evit prenañ un tamm boued, ha goude-se mont da leinañ war ar maez. Erru war ar blasenn e tiskennis diwar va marc'h-houarn, hag ez is gant va merc'h da bremañ bara.

E ti ar bolonjer, o c'hortoz va zro, e sellen pizh ouzh ur gaer a wastell. Na saourse e tlee bezañ ! Souezhet e oan avat, ken bihan e oa an tammou a droc'he plac'h an ti. Ne zlee ket bezañ pinvidik tud ar vro-mañ, hag ur seurt doujañs a savas ennon evito. Pa voe erru va zro e troc'has din ar plac'h daou damm ken bihan hag evit ar re all. Met ne oa ket echu va souazhadennoc'... En ti a-gostez ma c'houlennis jellennoù morzhed-hoc'h e troc'has

ar vaouez teir jellenn tanav-tanav.

— «Ul lur hanter-kant eo, a lavaras din, met ma'z eo re ger evidoc'h e c'hellan troc'hañ deoc'h jellennoù tanavoc'h.»

— «Nann, lezit e-giz-se, a respontis. Sabatuet-mik e oan.»

Treuzañ a ris ar blasenn evit mont da di an ispiserez da bremañ un nebeut frouezhennoù hag ur voutailhad-limonadeg.

Sellout a rae pizh an ispiserez ouzhomp en ur bouezañ ar frouezhennoù. Hag hi da lavarout :

— «C'hwiz'zo o tremen ?»

— «Ya,» a respontas dezhi.

Chom a rejont ur pennadig da varvailhat ganti, pezh a reas vad din. Pa c'houlennis ur voutailhad-limonadeg ez eas betek he yenez :

— «Kemerit va hini, a lavaras, c'hwiz a gavo honnezh freskoc'h pa viot o tebriñ war ar maez.»

Trugarekaat a ris anezhi hag ez is kuit.

Edo atav va marc'h-houarn ouzh va gortoz war ar blasenn. Ne oa ket pell e oan diskennet diwarmañ ha kement a zarvoudoù a oa c'hoarvezet ganin. Santout a raen em boa kejet gant ur sevenadur-h kalz disheñvel diouzh va hini, ha n'eo nemet tamm ha tamm ez eas va strafuilh war sioulaat. Ur seurt karantez a zeus din. Ur garantez am bez atav miret e korn va c'halon evit an dud dilor'ch-se.

Leinañ a rejont, va merc'h ha me, a galon vat e disheol ur c'hleuz. Goude lein e tiskennjomp ar grec'hienn betek Speid. C'hoant am boe prenañ un nebeut kartennoù-post evit derc'hel soñj eus an devezh-se. Sioul-tre e oa ar vourc'h er-mare-se eus an deiz. Den ebet e sal ar c'hafedi ma oan aet evit ober va frenadenn. A-benn ar fin e teuas ur plac'hig pemp bloaz da c'houlenn Petra a felle din. Ha p'am boe lavaret dezhi e felle din kartennoù-post e tiskouezas din ar c'her-tennoù a blije ar muiañ dezhi. Gouzout a raen n'em boa nemet asantiñ hag en em lezel da vezañ renet ganti. Tennañ a reas eus ar stern ur gartenn nemetken ; he muiañ karet, wami skeudenn ur plac'h yaouank gwisket e giz Speid, ha lakaat a reas ar gartenn em dorn. Emañ atav ar gartenn-se ganin er gêr.

Stank e oa al lusenn war hent Rualleg. Goustadik e vlenie Yann. Edon azezet en e gichen ha Mariannig war ar bank a-dreñv. A-benn ur pennad e c'houlennas Mariannig

ouzh Yann mont goustadik-goustadik rak un dra he doa da ziskouez din.

— «*Amañ emañ, a lavaras, ha pa voe chomet a-sav ar c'harr-tan : sellit ouzh an tu dehou.*»

Neuze e welis, dre un ode digoret er c'hleuz, mogerioù simantet ur c'hav warnañ ur gorzenn du. E-kreiz al lusenn e seblante ar savadur iskis-mañ bezañ hini ul lestr peñset e donder ar mor. Hag un istor a beñse eo e tisplegas Mariannig :

Un devezhour paour eus Rualleg, o kregiñ da vezañ kozh, en doa bet c'hoant da zimeziñ a-raok ma vije bet re ziwvezhat evitañ. Graet en doa e venoz en em lakaat da glask ur wreg, met goude bezañ savet dezhi ur c'haer a di a blije d'he c'halon, un ti gant kambrou bras evit ar vugale da c'heneh.

Labourat a rae en ur vereuri vihan ha ne oa tamm ebet pinvikik a-walc'h evit seveniñ e venoz. N'eus forzh. Prenañ a reas ar bradenn-mañ ha toullañ an ode. Goude e zevezhoù e teue da sevel ar c'hav. Ha pa voe echuet hennezh e vevas ennañ.

Siwazh, re vras e oa bet e galon ha re denn en doa labouret. Mervel a reas, un nozvezh goañv, e-unan-penn en e gav.

Tevel a reas Mariannig. Ne oa netra all da lavarout : dirazomp ne chome nemet skeud latarek ar peñse diremed.

Ha padal, diwar he mouezh e santen en doa ervat ar paour-kaezh devezhour tizhet e bal. Ken skoet en doa gant e varv truezus holl verc'hed Rualleg, ma chome atav bev en o c'halonou.

anezho o tiskouez «*an dihun breizhat*» hag ar youl da lakaat Breizh da vezañ anavezet hervez ar pezh ma'z eo. Mat e vefe, evit pezh a sell ouzh ar c'hanaouennoù e brezhoneg, lakaat d'o heul an droidigezh anezho e galleg (Kemennadur a-b Ph.D).

Skrivañ da :

Philippe DURAND - 63, rue Maréchal Foch  
78000 VERSAILLES - Pellg. 951.72.98.

#### SKRITUR AR BREZHONEG

E-kerz ar vodadeg-vurev dalc'het e Gwengamp d'an 8 a viz Du 1975, eo bet divizet kement-mañ :

«*Pa weler bremañ un nebeut tud oc'h ober gant ur skritur nevez, hag o tegas evel-se muioc'h c'hoazh a strafuilh, e ro Kuzul ar Brezhoneg da c'houzout ne c'hell ket bezañ a-du gant un doare-skrivañ n'eo ket deuet dre hent an c'hendiviz hag ar c'henneblev. Ken na zeuio ur gwir emglev, e c'houlenn Kuzul ar Brezhoneg digant an holl, kenderc'hel d'ober gant ar peurunvan savet divar kendivizoù 1941.*»

#### EMGLEV SANT BRIEG O REIN E ZILEZ

An Aotrou F. Kerveadou, eskob St-Brieg ha Landreger en deus degemeret da dud e eskopti en devoa ranket abalamour d'e yec'hed goulen digant ar Pab hen diskargañ : 66 vloaz ez eo hag eskob St Brieg abaoe 1961. Gwall-gudennoù en deus bet kavet war e hent : sened-an-eskopti, digoret goude ar Sened-Meur, hag a voe ret hen leuskel war e gement all, en abeg d'ar spered reveulzius a oa gant darn eus an dileuridi ; neuze afer Abati Boken chomet pell da c'horriñ hag o kouezhañ a-barzh ar fin gant dilez ar priol Bernez Bezred en deus e gwirinezh kuitaat an iliz ; diaesterioù gant belelen 'zo, darn uhel o c'harg, hag o deus taolet kuit o frog-kolaj, gant leanezed oc'h ober kement all ; an ilizoù o c'houllonderiñ ; rouez-tre-an dud yaouank war ar studi-veleg ; al leanezed o vont war goshaat ha nebeut a verc'hed yaouank o vont d'ar gouant ; ar skolioù kristen o treiñ mui-ouzh-mui war-du ar spered jaik, hag un toullad brav a skolaerien hag a skolaerezed kristen o tremen brav-mat hep oferenn. Diaes-tre an abostolerezh er skolioù ofisiel. Traoù hag a gaver estreget en eskopti St Brieg, gwir eo, met arabat disoñjal ez eo Eskopti St Brieg an hini a zo ar muiañ a-gleiz eus eskoptioù Breizh.

#### LEONID PLIOUTCHTCH

Ur matemategour rusian brudet, nemet ne glote kete venozioù gant menozioù ofisiel an U.R.S.S. Evel ma quezer e vez taolet en toull-bac'h pe kaset da Siberia ar seurt tud, kilstourmerien anezho. Hemañ avat, a zo bet tremenet dre un ospital kleñvedour-spered da gaout gwalc'hadeg-empenn. Dre hantouriezh ar gostezenn gomunist gall ez eo bet lezet da kuitaat an U.R.S.S. ha kontef en deus en ur goñfereañ e Pariz, peseurt louzaouadur a oa bet graet dezhañ. Chom a ra kommunist evelkent, rak seurt taolioù, emezañ, n'eo ket frouezh ar gomunistiezh eo ez int, hag ez eus tu da ziwall diouto en ur gevredigezh socialist 'lec'h ma vez doujet an den hag e bersonelezh Betek-hen avat, n'eo ket set eo a zo bet gwelet.

#### BRO-GEMBRE

Votet ez eus bet gant Parlamant Londrez un tamm digreizenniñ evit Bro-Skos ha Bro-Gembre : Londrez o lezel darn eus he galloud ganto (devolution). Kae-roc'h a zo bet prometet da Vro-Skos eget da Vro-Gembre, p'he devo-hi ur Parlamant. Trouz a zo e Kembre en askont da-se, ha trouz ivez gant ar re a fell dezho kaout ur bedervet chadenn skinwel gouestlet dreist-holl d'ar yezh ha d'ar sevenadur kembreat.

#### BEAJ CHIRAK E BREIZH (Genver 1976)

Ministr kentañ Frañs, Jakez Chirak a zo oc'h ober un dro e Breizh evit klask damasaat ar Vrotoned. Anat eo n'en deus ket komprenet (pe ne venn ket kompren !) kalz a dra e kudem ar sevenadur breizhek, nag eñ nag ministr an deskadurezh, Haby, Merkomp ar c'horzou nobl-tre lavaret gant an Aotrou Per Denez, mestr-kelennner e Skol-Veur Roazhon, d'ar ministr, hag ivez er skinwei.

#### MARV FRANKO, Bro-Spagn

Goude bezañ renet e-giz diktator war Vro-Spagn e-pad 40 vloaz bennak, eo bet marvet ar Jeneral Franko. Bravañ marvad dezhañ a zo bet moulet war «*ab-Pabl-Vreizh* kent ma oa marv zoken ! Un toullad mat a anvioù loaned-plu (pe ziblu) a zo bet roet dezhañ. Evit abegoù 'zo e oa bet dalc'het bev ar jeneral gant ar vedisined, kalz re bell, hervez menno an holl.

#### AR PREZIDANT PLEVEN O KUITAAT AR POLITIKEREZH

E deroù miz C'hwevrer en deus an Aotrou Pleven diskleriet n'edo ket e-sell pelloc'h da vont war ar renk gant ar mouezhiadegoù politikel. Lavaret en deus ivez n'edo ket e-sell da skrivañ 'e erforennoù : despetus eo, rak sekredoù souezhus en devije sur-mat da gontañ. Un den speredek, heñavar, hag en deus a-benn ar fin c'hoariet e «*Lloyd George*» daoust ma oa kalz nebeutoc'h intret gant ar spered keltiek eget hemañ. Gallet en devije bout Prezidant ar Republik, ar Republik breizhat !

#### TRISTIDIGEZH

Ur glac'har eo bet evit Tud an Emsav klevout keloù eus marv Viviana KAOUISIN, d'an oad a 27 vloaz. Hor gourc'hemenoù a gengariv d'he zad Ronan Kaerleon ha d'he familh.

#### OFERENNOU GIZ NEVEZ

Pennadoù a dalvoudegezh a zo bet war an «*Telegramme*», d'an 2,3,4 a viz C'hwevrer gant Glaoda IVON, diwar-benn lidezh ar Oferenn e Breizh. Ranket en deus an oberour dastum e berr-gomzoù frouezh un enklask sirus war an oferenn 'giz Plus V, oferenn Paol VI, oferenn 'giz modern (gant gitar hag all). N'en deus ket gwasket war-du ebet, nemet en deus komzet gant kalz a hegarated diwar-benn an oferennoù brezhonek (G. Ivon n'eo ket ur Breizhad e-unan).

#### TAOL-ESA

En Eskopti Sant Brieg en deus bet soñjet ur beleg eus Bro-Dreger, an Aotrou H. LE JEUNE, person Plouilio, pourchas ur wech ar miz un homilienn verr, e brezhoneg, kement ha reiñ tu d'ar veleien a volontez vat da adkregiñ gant giz ar prezeg e brezhoneg. Goulenn doareoù digant :

H. LE JEUNE, person - 22 PLOULILIO  
(Ploumilliau)

HIVIZIKEN e vo bap tro, rekis, spi hon eus, war Varr-Heol un diverrañ eus keleier penañ Breizh hag ar Bed savet gant ur c'henlabourer.

N'ANKOUNAC'HAIK KET  
HO KOUMANANT !

## Mesk-ha-mesk

#### GALVADENN

Goude bezañ savet *Le livre d'or de la Bretagne* (Seghers 1975), emañ Philippe DURAND oc'h sozañ evit ti-embannerzh P.J. Oswald ul levr diwar-benn ar C'hanaouennoù breizhek, brezhonek pe c'hallek. Kanaouennoù nevez ha kozh. O zelvoudegezh a-keñver sevenadur, ekonomiazh, politikerezh, ar saverien anezho... Lakaat e-kreiz ar skerjenn an danvez

# An Eostig hag Ar Bugel

Janig, ar beure-mañ, he deus gouelet  
O kavout marv an evn en e gaoued :  
Nag eo kriz evit unan yaouankiz  
gouzañv ken gwazh glac'har e-unanik !

Etre daouarn bihan en aner  
e tomm korf reut ha skornet ar c'haner ;  
Dac'h diwezhañ c'hoazh, hag a-bouez penn,  
e skuilhe 'hed an deiz e ganaouenn.

Met pezh a seblante kanenn ken seder,  
bugel, siwazh, 'vidout ne oa ket sklaer :  
Ne oa nemet glac'har, poan, kalonad  
ha galv skrijus ur paour-koazh prizoniad.

«Va lez, mignonex, da zistreiñ d'am gwez  
da ganañ va c'hanaouenn-abardoez  
Va lez da vont digabestr gant va hent,  
me, kaezhig, a zo mab d'an oabl divent».

Met d'e c'halvadenn drist hag ankenlet,  
mui 'voe kalon ar bugel re laouen  
E huanadenn taolet d'ur goumoulenn,  
ez eo marvet dre vezañ re ganet.

Raymond Bath  
(Aozet e brezhonag gant  
Ernest ar Barzhig)

Per ar Maenour

## Eus an eil diskar-amzer d'egile

«Setu o tont nozioù gwall hir ar  
goañv...» hag e-pad meur a viz e vo  
berroc'h ar sklerijenn hag e paro nebeu-  
toc'h an heol en oabl. Gant Kala-Goañv e  
tigor ar mizioù du, hag e vo kavet mat e vije  
lavaret ur ger bennak diwar-benn an amzer  
a vez o ren e-keit ha ma vezomp oc'h ober  
hon treuz war an douar ha bemdez war  
goshaat. A-viskoazh moarvat eo bet an den  
techet da gomz diwar-benn an amzer a vez  
en-dro dezhañ, ha n'eo ket souezh :  
pijusoc'h e vez kavet bevañ pa vez klouar  
egret pa vez re yen pe re domm, pa bar an  
heol ha pa vez fraezh an oabl eget pa vez  
louet ha teñval ; gwel e kresk en douar an  
trevadoù pa vez tro-ha-tro glav ha tommder  
hervez an ezhom, eget pa vezont suihet  
gant an heol, disec'het gant an avel c'hor,  
pe c'hoazh beuzet gant an doureier, pladet  
ha drailhset gant ar grizilh hag an avel foll,  
pe c'hoazh rostet gant ar rev hag an erc'h  
pe lazhet gant ar skorn...

Kaer o devez an dud bezañ prederiet  
gant an amzer a ra ez eo anat koulskoude  
n'o devez ket ar pep brasañ anezhe un  
anaoudegezh gwall reizh eus ar pezh a vez  
bet tremenet un nebeud bloavezhioù, na  
zoken un nebeud mizvezhioù, a-raok.  
Techet e vez kalz da grediñ n'eus bet  
biskoazh hañvezh ken gor, pe gen fresk, na  
goañvezh ken klouar, pe gen kalet, hag an  
hini a zo o ren, nag ur pennad amzer ken  
gleborek, pe mizvezhioù ken kras ! Berr  
eo eñvor an dud. Ha gant an doare bevañ a  
zo bremañ hini ar bras eus an dud e vez  
ankouaet buan petra eo bet an deizioù  
tremenet ; pa red an dour eus an duellenn e  
kegin an ti pe e kraou al loened, ne vez ket  
taolet kement a evezh ouzh ar sec'harioù  
bras ; pa vez tommet ingal an ti ne vez ket  
kavet ken spontus ar goañvezhioù kalet ha  
ma vezent pa vanked a zanvez tan pe pa  
ranked mont de geuneuta e-unan a-barzh  
ober tan en oaled pe mont d'ar c'hraou evit  
tennañ e vad eus tommder al loened...

Daoust m'eo deuet ar vuhez da vezañ  
skañvoc'h, e chom e spered meur a zen  
soñj koulskoude eus goañvezhioù evel  
hini 1917 (gant kement a vizer da Yann  
Soudard du-hont en trañcheoù !), hini 1940  
(brezel adarre !), pe hini 1963... N'eo ket

peurankounac'haet c'hoazh kennebeut  
marteze hafvezhioù kras 1921 (gwashañ  
hini ar c'hantved sur a-walc'h), 1949, 1955  
pe 1959... Ha diskar-amzer 1974, ken fresk,  
ken gleb, ken avelek, a chomo sur-mat pell  
en eñvor an dud a-ziv ar maez en abeg  
d'an diaesterioù o deus bet evit dastum ha  
gorren o zrevadoù, dreist-holl ar maiz.

Er pennad-mañ em eus bet c'hoant  
just a-walc'h gwelout pegen disheñvel e oa  
bet an diskar-amzer-se eus ar re a zo bet  
a-raok ha goude ha, war an digarez-se, e  
fell din ivez ober ur gwel war an amzer a zo  
bet e Bro-Dreger abaoe Kala-Goañv 1974.  
A-viskoazh em eus kavet dudi gant an  
natur en-dro din, n'eus forzh e pelec'h en  
em gaven, hag oc'h heuliañ ar c'hemoù a  
c'hoarvez bemdez en-dro din. Ha bemdez  
bremañ e notennan an amzer a vez bet,  
pegen tomm a vez bet en deiz, pegen yen  
en noz, eus a be du en deus c'hwezet an  
avel, daoust hag-efñ ez eus bet heol splann  
pe c'hlav a-bil... Al labour ne vez ket graet  
ken fin, anat eo, hag an hini kaset da benn  
gant tud ar «Meteo», met ar pezh a zo  
taivoudus eo an evezhiadennoù a vez graet,  
ha graet ingal. Evit barn, da skouer, ar wrez  
(tommer pe yenien) a verkan, ez eo ret  
derc'hel soñj o deus va sifroù un  
dalvoudgezh disheñvel eus re ar meteo :  
tra ma reont, int, o muzulioù «dindan  
c'houdor» em eus-me lakaet va muzulier  
e-pign ouzh penn va zi, diouzh tu an norzh  
evit na barje ket an heol warnañ ; ha va  
muzulioù a vo evel-se tostoc'h ouzh ar re a  
c'heller ober er maezioù digor, hag e  
c'hellint bezañ alies tri pe bevar derez  
Celsius izeloc'h eget ar re «ofisiel»,  
dreist-holl e-pad an hañv.

Da heul an nozvezhioù hir e teu e-pad  
ar goañv ar yenien, gant rev, skorn hag  
erc'h, met ivez glaveier bras hag avel grañv.  
Met goañv 1974-75 a zo bet dre vras unan  
klouar-tre, met oc'h echuiñ fall e miz  
Meurzh hag e penn-kentañ miz Ebrel.  
E-doug an hañv e vez taolet evezh kentoc'h  
ouzh an tommder gant heol gor ha  
sec'h or ; met bloavezhiennoù 'zo, en enep,  
eo an «amzer lous» eo a vez o tregasiñ  
pennoù an dud, tud ar maezioù evit ar pezh  
a sell o eost, re ar c'heñrioù evit ar pezh a  
sell o vakañsoù. Ma l hañvezh 1975 a zo  
bet ungn eus ar c'hentañ evit an  
hañvourien, heoliet-mat ha tommik-kaer.  
Ar gouerien, int, o deus kavet e oa bet re  
zourek ha re yen miz Meurzh hag  
hanterenn gentañ miz Ebrel, o virout outo

da ober o labourioù e stad vat, ha da heul e  
oa bet re gras penn kentañ an hañv. Diwar  
Hanter-Eost avat, ez eas an traoù war  
wellaat o lakaat an trevadoù diskar-amzer  
da greskiñ eus ar c'hentañ hag an amzer  
gaer a bad betek hanter miz Du zoken.

Tomm ha yen :

Tra ma oa bet 1973 ur bloavezh  
kentoc'h tomm ha kras, e voe 1974 unan  
fresk ha gleb, gant sec'h or e penn kentañ  
an hañv koulskoude. Ha 1975 a zo bet  
kentoc'h ur bloavezh tomm ha kras evel  
hini 1973. Kement-se a zo bet lakaet anat  
gant ar pezh o deus embannet tud ar  
meteo, ha kement-se a zo anat ivez diwar  
an evezhiadennoù am eus-me graet e  
Lannuon. Ar pezh a zo bet amañ a zo gwir  
moarvat evit ar pep brasañ eus Breizh, gant  
kemmoù bihan koulskoude hervez al  
lec'hioù. Hervez ar sifroù ofisiel ne vije bet e  
Brest, e 1974, nemet mizioù Genver,  
C'hwevrer ha Du, hag a vije bet klouaroc'h  
eget e 1973, an holl re all (nemet  
Mezheven) o vezañ bet freskoc'h, an hini  
gwashañ anezhe o vezañ bet miz Here gant  
2,3° C nebeutoc'h eget kustum. En Enez  
Vriad, e Rostrenn hag en Oriant ez eo  
Genver, C'hwevrer, ha Kerzu eo a zo bet  
klouaroc'h e 1974 eget er bloaz kent.

Met ar mizioù Du ha Kerzu eo ar re  
gentañ eus ar bloavezhiañ a fell din komz  
diwar e benn amañ. Kavet e vo en daolenn  
da heul un diverrañ eus ar pezh eo bet ar  
bloavezh gant, evit pep miz, an devezh a zo  
bet an tommañ hag an hini a zo bet ar  
freskañ ; mare tommañ an devezh o  
c'hoarvezout peurvuiañ ur pennad goude  
kreisteiz. E fin an noz pe abred eus ar beure  
eo e vez peurvuiañ mare yenañ an devezh,  
ar wrez izelañ-se a vez kavet en tu dehou,  
hag e weler aze eta baurevezh yenañ ha  
baurevezh klouarañ pep miz ha goude pep  
sifr eo merket an devezh eus ar miz ma  
c'hoarvezas kement-se :

Ar gor brasañ en hañv tremen a zo bet  
eta d'ar 4 a viz Eost, da heul ur barr-arn,  
hag an nozvezh a-raok hag an hini goude a  
zo bet ar re douferekañ, met hini an 12-13 a  
viz Gouere a voe ken klouar all. E-doug ar  
goañv ne oa ket bet diskennet ar yenien  
dindan - 5°, ar pezh n'eo ket kalz e  
gwirionez, ar pezh a ro tu da gompren  
perak n'eo ket bet disturjet plant kizidik 'zo  
hag a vez peurvuiañ deuet al lodenn  
diavaez anezha gant ar skorn. Pemp miz  
diouzh renk eo avat e voe ken yen ; nemet  
an 31 a viz Kerzu hag an deiz kentañ e viz



Genver n'en em gavas ket avat an devezhioù-se tost an eil ouzh egile. N'eo ket unan eus ar pemp devezh-se eo a zo bet an hini gwashañ : an daou zevezh yenañ a zo bet avat an 19 a viz Meurzh hag ar 4 a viz Ebrel, an div wech ma'z eus bet erc'h evit ar bloaz. Goañv diwezhat a zo bet eta (petra bennak ma oa Pask abred I), hag ar pep souezhusañ eus ar bloaz eo ar revenn a c'hoarvezas d'an deiz kentañ a viz Mezheven hag a zevas o c'horz d'ar patatez e meur a lec'h...

War an eil taolenn e vo kavet, renket dre viz, niver an devezhioù m'eo aet ar wrez dindan 0° C, neuze e vez alies rev war ar geot pe war an toennoù, pa dizher izeloc'h

hemañ ne voe ket an disterañ devezh heoliet madik a-walc'h ; e gwask an daou ziwezhañ ez eo ur souezh kavout miz C'hwevrer heoliet eus ar c'hentañ (20 devezh diwar 28, 12 anezhe mat-kaer zoken). Goude e kaver pevar miz all heoliet-kaer ivez : Mezheven, Gouere, Eost hag Here. E miz Du eo e kouezhas ar glav an aliesañ, peogwir ne voe nemet 7 devezh dizour, da heul e teu Kerzu ha Meurzh. En holl e voe er bloavezh 168 devezh gant glav, 56 anezhe o vezañ dourek-mat ha 18 devezhiad glav bras ha padus a zo bet, an holl anezhe nemet unan e-pad ar c'hwec'h miz goañv. Mogidell (pe vrumenn dev) a c'hoarvez dreist-holl pa vez brav an amzer, setu m'eo bet mizioù C'hwevrer, Mezhe-

spontusañ e 1974 a zo bet en taol-mañ an hini sioulañ : devezh avel greñv ebet, ha 6 devezh sioul.

MIZ	Gwrez uhelañ an devezh		Gwrez izelañ an devezh	
	tommañ	freskaf	yenañ	klouarañ
Du 1974	14,0 (9)	7,0 (17,18)	3,0 (19)	8,0 (9,27)
Kerzu	11,0 (22)	4,5 (31)	5,0 (31)	9,5 (29)
Genver/75	11,5 (30)	4,5 (8)	5,0 (1)	7,0 (30)
C'hwevrer	12,0 (18,28)	3,5 (4,5)	5,0 (22)	5,0 (8)
Meurzh	13,0 (1)	3,0 (19)	5,0 (21)	5,0 (1)
Ebrel	18,0 (28)	3,0 (4)	5,0 (7)	8,0 (7)
Mae	17,0 (28)	6,5 (8)	0,0 (4,12)	8,0 (28,29)
Mezheven	24,0 (5)	13,0 (2,3)	1,5 (1)	10,0 (14,15)
Gouere	27,0 (13)	18,0 (11,26)	3,0 (1)	15,0 (13)
Eost	28,5 (4)	16,5 (31)	6,5 (27)	15,0 (4,5)
Gwengolo *	23,0 (8)	12,0 (14,16)	1,5 (17)	10,0 (1,3,4)
Here	16,5 (2)	9,0 (11,12)	1,0 (16)	7,5 (10,30)
<b>BLOAZ *</b>	<b>28,5 (Eost 4)</b>	<b>3,0 (19,03)</b>	<b>5,0</b>	<b>15,0 (13,07,</b>
		<b>4,04) 5 gw.</b>		<b>3 ha 4,08)</b>

\* Hep kontañ daouzek devezh diwezhañ miz Gwengolo

egret 3 derez e krog an dour da gleriñ hag an douar da skomif, setu perak ez eus bet lakaet a-gostez, an un eil bann, an devezhioù ma voe tizhet da nebeutañ - 3,5°. War an daolenn-se, e kaver ivez niveroù o tennañ da draoù all hag a ra eus an amzer ar pezh ez eo.

#### Heol ha glav, mogidell hag avelioù

War an 353 devezh a zo bet dalc'het kont anezho, ez eus bet 216 devezh heoliet muioù pe nebeutoc'h, hag en o zouez ez eus bet kavet an hanter hag a voe heoliet-mat. Ar mizioù gant an nebeutañ heol a zo bet Kerzu, Genver ha Meurzh ; en

ven, Gouere, Eost hag Here ar re a zo bet enne ar muiañ mogidell. En holl 32 zevezh er bloaz.

An avel a c'hell bezañ ken kreffv ma vez graet anezhañ avel foll. Aliesoc'h e vez kreffv, peurvuiañ a-varradoù neuze ; aliesoc'h c'hoazh ne vez ket ken kreffv ha ne vez ket taoliet kalz a evezh outañ. A vare da vare e kaver ivez amzer sioul, gant un aezhennig d'ar muiañ ; amzer evel-se a zo bet 26 gwech ar bloavezh, un hanter aliesoc'h ez eus bet avel greñv, hag avel foll a zo bet 9 gwech, tost da vat an hanter anezhe e miz Kerzu.

Miz C'hwevrer, hag a oa bet an hini

MIZ	DEVEZHIOU									
	Yenienn dindind 0° C - 3°	Heol * **	Mogidell * **	Glav * ** ***	Avel * **	Kurrun				
Du/74	1	13	5	1	24	12	7	6	1	1
Kerzu	2	10	3	4	20	7	4	7	3	—
Genver/75	4	11	1	—	19	5	6	2	11	3
C'hwevrer	8	2	20	12	5	8	2	—	6	—
Meurzh	7	4	15	—	20	8	3	—	8	2
Ebrel	6	3	18	9	16	4	1	1	5	—
Mae	—	—	17	8	1	16	9	—	1	3
Mezheven	1	—	25	15	4	—	—	1	5	—
Gouere	—	—	25	16	5	10	—	—	2	2
Eost	—	—	26	14	6	14	3	—	1	2
Gwengolo	—	—	13	12	2	8	2	—	2	4
Here	1	—	23	13	4	9	4	1	2	4
<b>Bloaz</b>	<b>30</b>	<b>11</b>	<b>216</b>	<b>108</b>	<b>32</b>	<b>168</b>	<b>56</b>	<b>18</b>	<b>9</b>	<b>52</b>
						<b>26</b>				<b>10</b>

Displegadur ar sinitoù : § Miz Gwengolo a vank 12 devezh-ennañ

\* en holl (evit an heol hag ar glav)  
\*\* Kalzik heol pe c'h'hiav, avel greñv  
\*\*\* Glav bras pe avel foll  
— amzer sioul

Ne deo ket hepken avat nezh an avel hag a gont, mat e vez ivez gouzout a be tu e teu (pe c'hoazh, ma kavet gwell war be du e c'hwez). Neuze 'ta, ma seller ouzh an tu ma teu, e weler ez eus bet avel izel (su, mervent, kornaoueg) 177 gwech hag avel uhel (norzh, biz, reter) 142 wech e-pad ar bloaz ; en tu-hont da se, ez eus bet avel dreuz (gwalarn, gevred) 66 gwech, kalz aliesoc'h avat diouzh ar gwalarn eget diouzh ar gevred.

Setu amañ merket pishoc'h an traoù evit an eizh avel pannañ, o kregiñ dre an niver uhelañ a zevezhioù :

Kornaoueg : 119 gwech, dreist-holl e Kerzu (15 gwech), Du, Genver hag Ebrel ; an nebeutañ e C'hwevrer (1 wech).

Reter : an aliesañ e C'hwevrer hag Here (12 gwech), e Mae (11), met gwech ebet e Genver ; an holl 67 gwech.

Gwalarn : 58 gwech, an aliesañ e miz Du (10), hag an nebeutañ e C'hwevrer (1 wech).

Biz : 45 gwech, ar muiañ e miz Mae (10), met gwech ebet e miz Kerzu.

Mervent : 31 wech, dreist-holl e Genver (10) ha gwech ebet e Mezheven.

Norzh : 30 gwech, ar pep muiañ e Gwengolo (7), met tamm ebet e Genver hag e C'hwevrer.

Su : 17 gwech, 4 gwech e pep hini eus mizioù C'hwevrer ha Gwengolo, gwech ebet e-pad meur a viz.

Gevred : 8 gwech, peder anezhe en Here, 2 wech e miz Du ha 2 wech all e miz Eost.

**Distro war viz Here**

Daou viz diwezhañ ar bloavezhiaid studiet eo a zo bet ar re a denne an nebeutañ da re ar memes anv ar bloavezh diaraok. Met evel em boa ranket kuitaat ar vro e-pad daouzek devezh e penn diwezhañ viz Gwengolo, e rin anv eta dreist-holl eus ar pezh eo bet miz Here. Ar pezh a zo anat koulskoude eo ez eo bet Gwengolo pell eus bezañ ken avelik ha ken dourek ha ma oa bet e 1974. Evit ar pezh a sell ar seitek devezh kentañ ez eo bet ivez an nav devezh kentañ tommoc'h eget re gevatal ar bloaz tremen, met freskoc'h eo bet eus an dek d'ar seitek ; div wech hepken avat (d'ar 6 ha d'ar 7) e oa bet tommoc'h eget e 1973. Ha ma keñverier miz Gwengolo 1974 gant hini 1973, e weler ne oa bet ivez 1974 trec'h nemet peder gwech war egile (d'an 11 ha 12, d'an 20 ha d'an 22). Evit miz Here eo eta e vo an aesañ keñveriañ etreze an tri bloavezh tremen.

**Tommder ha yenien.**

Ma klasker, evit pep hini eus 31 devezh ar miz, e pe vloaz eo e oa bet an tommañ e-pad an devezh e kaver ez eo aet an trec'h 16 gwech gant 1975, 13 gwech gant 1973 ; met gwech ebet n'eo bet 1974 trec'h d'an daou vloavezh all ; ur wech koulskoude, d'an 19, eo bet par da 1975, hag ur wech all, d'an 28, da 1973 koulz ha da 1975. Ar gor uhelañ, avat, a oa bet tizhet e 1973, d'an 9 eus ar miz : 19,5° C ; e 1975 ez eus bet 16,5° d'an 2, hag e 1974 an uhelañ a oa bet hepken 12°, d'an 1 ha d'an 9. Ar c'hemm-se a verk mat a-walc'h pegement e oa freskoc'h er bloaz-se.

N'eo ket disheñvel an traoù pa geñverier an devezhoù freskañ war an tri bloaz. Div wech hepken, d'an 9 (9°) ha d'ar 16 (10,5°) eo bet miz Here diwezhañ da izelañ ; teir gwech e oa bet tro 1973, d'an 1, d'ar 17 ha d'ar 26 (10,5 ; 9,0 ; 10,5). Peogwir ez eus bet en tu-hont da se tri devezh kevatal etre 75 ha 74 e weler ez eus bet 23 devezh freskoc'h er bloavezh kreiz eget n'int bet en daou all. Ar wrez izelañ e zo bet tizhet ivez er bloaz-se : 7° d'an 23, d'an 28 ha d'an 30. E 1973 an izelañ a oa bet tizhet e fin ar miz : 8,5° d'an 30 ha d'an 31, met er bloaz-mañ ez eo bet kalz abretoc'h : 9° d'an 11 ha d'an 12.

Ma sellomp ouzh freskter ar beureoù e walc'h e oa bet e 1973 peder gwech nebeutoc'h eget 0° C, d'an 18, 26, 27 hag 31. En daou vloaz all n'eo ket bet ken yen, hag ur wech hepken e voe nebeutoc'h eget

0° (d'an 13 e 74, d'ar 16 e 75) ha ne dizhas nemet - 1°, tra ma'z eas betek - 2,5° er bloaz a-raok d'ar 26. En ur sellout ouzh ar miz a-bezh abat, e c'hellomp gwelout ez eus bet 13 eus ar beureoù yenañ e 75, 10 anezhe e 74 hag 8 e 73 ; war an tu all, ar beure klouarañ a zo bet 17 gwech e 73, 7 gwech e 74 ha 5 gwech hepken e 75. Kement-se a laka war-wel ez eo bet kalz freskoc'h dre vras e 1975 eget e 1973, tra ma veze tommoc'h war an deiz. Ar pezh ne vir ket e oa bet aliesoc'h rev war an douar e 73.

E 1974 eo ez eus bet an nebeutañ a vogidell (ur wech hepken, d'ar 15). Ar brumennou o tont dreist-holl da heul an amzer vras ez eus bet anezhe teir gwech e 73 (d'an 9, 10, 30) ha peder gwech er bloaz-mañ (19, 24, 26 ; ha padus-tre d'ar 25).

**An heol**

Gant ar sec'hor e vez, dre vras, heoliekoc'h an amzer eget pa vez glav allies, daoust ma n'eo ket ral gwelout devezhoù barraouek hag a vez heoliet-mat. An daolennig da heul a laka anat pegen bras eo bet ar c'hemm etre an tri bloaz :

Miz Du	NIVER DEVEZHIOU			
	gant heol	kalzik heol	dam-fraezh	teñval
1973	24	15	5	5
1974	8	4	0	6
1975	25	11	9	1
(tri bloaz)	55	30	16	12

Aze adarre, e weler pegen bras kemm a zo etre 1974 hag an daou vloaz all peogwir ez eus bet e pep hini eus ar re-mañ 20 devezh heoliet bravik tra na voe nemet pevar e 1974.

**An avel.**

N'eo ket souezh e kavjed kemm bras evit ar pezh a sell nerzh ha tu an avelioù. Er bloavezh kreiz e teuas an avel eus tu ar yenien, o vezañ aet ur pennad devezh hepken er reter. C'hwezfañ kreffiv en devoa

graet d'an 19, betek foliañ zoken, ha kreffiv e oa bet ivez d'ar 7, d'an 20, 21, 22, 27, 28, 29, peurvuiañ gant barroù grizilh da heul. E 73 hag e 75 e teuas an avel dreist-holl eus tu ar sav-heol ; er bloavezh kentañ e c'hwezhas kreffiv eus an tu-se d'an 2, d'an 3 ha d'ar 16, heuliet en deiz-mañ gant «glav diamont». E 75 ne voe devezhiad avel foll ebet, daoust ma voe kreffivik d'ar 5, hag etre ar 24 hag ar 26, an teir gwech-mañ o tegas d'e heul amzer vrumennek eus ar biz. Gwelet e vo en daolenn da heul eus pe du e teuas an avelioù :

Miz Here	NIVER GWECHOU GANT AVELO TONT EUS AR							
	su	mervent	kornog	gwalarn	norzh	biz	reter	gevred
1973	3	3	7	2	0	3	14	4
1974	0	0	15	11	12	0	1	1
1975	4	1	9	2	4	1	12	4
tri	7	4	31	15	16	4	27	9
bloaz		(42)		(15)		(47)		(8)

**Ar glaveier**

An daolenn a zo heñvel a-walc'h evit ar pezh a sell ar glav. E 1974, e voe ur berad glav bennak bemdez, nemet d'an 9, d'an 23 ha d'ar 24. D'an 18 e voe un devezhiad glav bras, hag ar glav ne baouezas ket kaer kennebeut d'an 2, 7, 14 hag 20. E 73, e oa bet 13 devezh gant ur bannet glav bennak : d'ar 5 ha d'ar 6, bemdez eus an 11 d'an 20, hag ivez d'an 23, an devezhoù dourekañ o vezañ bet an 12, ar 14 ha dreist-holl ar 16. Erfin e 75, ne 'z eus bet nemet dek devezh gant glav : an 2, dan 10 (glav druz en deiz-se), 11, 12, 14, 15, da heul ur barr arne e nozhevezh ar 16 d'ar 17, gant ur strinkadig bennak ivez d'an 21 ha d'an 23. Dre vras, eo bet distar a-walc'h ar c'hementad dour kouezhet.

Evit 73 ha 74, ez eus tu da geñveriañ gant ar c'hementad a oa kouezhet a Brest en daou viz Here-se ; bez'eo oa bet eno er bloaz kentañ 59 millimetrad dour, ha 107er bloaz war-lerc'h, ar pezh a zo 3 mm muioc'h hepken eget an niver etre a zo bet kavet etre ar bloavezhioù 1931 ha 1960, met ar wrez etre a voe - 2,8° izeloc'h eget ne veze peurvuiañ. En Enéz Vriad e voe ivez 2,8° nebeutoc'h, met eno e kouezhas 57 millimetrad dour dreist-kont. E Rostrenn (gant 3,2° izeloc'h eget kustum) e voe 17 mm

glav dreist-kont, met en Orient, fresk-kaer ivez an amzer gant un diouer a 3,2°, e kouezhas koulskoude 36 millimetrad glav nebeutoc'h eget boaz.




Hetomp 'ta na vo ket gwelet diouzhtu ur miz Here all par da hini 1974 !

Armañ da heul, e vo kavet ur skeudenn eus «toul an avel» e-pad an bloaz. Evel ma c'hwez, anat eo, an avel er-maez eus an toull ez eo eilpennet an traoù e-keñver ar pezh a zo bet displeget a-us, hag ez eo etreze ar reter eo en deus c'hwezet an avel an aliesañ. Ar skeudenn a denn mar kirid da hini ar bern pell a vije o c'holo an douar el lec'h ma vije bet unan o nizhat pe o wentañ ed e-pad ar bloaz !

**Evit klokaat**

Baoo ma'z eo bet savet ar pennad a-us (miz Du 1975) ez eus bet anv ar c'helaouennou eus ar c'hementad glaveier a zo bet kouezhet war dachenn-esa al labour-douar e Plougoukant, en arvor Treger, ha bet muzulet du-hont. Tu a zo eta da geñveriañ, gant ar pezh am eus displeget em fennad. Du-hont ivez ez eo bet 1975 ur bloavezh dizour a-walc'h, un tammig nebeutoc'h eget 1973 koulskoude o vezañ ma'z eus bet muzulet, evit ar bloaz, 674 millimetrad dour e-keñver 573 mm e 1973. E 1974 avat, e kouezhas du-hont 912 millimetrad ; hag e 1972 e voe 727 mm, ar pezh a zo tostik da vat ar c'hementadetre a zo bet e-doug ar pevar bloaz tremen, hag a zo 721 millimetrad.

Er bloavezhiaid 1975 ez eo bet Genver ar miz glepañ, gant 112 mm, hañlet gant miz Du (100,8) ha miz Meurzh (91,4). Ar miz dizourañ a zo bet Mezheven gant 6 mm hepken, ar pezh a zo gwell nebeut, dirak Gouere (20,7) ha C'hwevrer (21), miz Here (38 mm) o vezañ bet ivez ur miz kras evit ur miz diskar-amzer. Ma reer un niver-etre dre devezh evit ar bloaz a-bezh e ra se un tammig nebeutoc'h eget 1,85 millimetrad dour. Niver-etre evit :



Eus  
Toull  
an Avel.

Miz Genver : 3,61 mm  
Miz Du : 3,36  
Miz Meurzh : 2,95

Miz Mezheven : 0,2 mm  
Miz Gouere : 0,67  
Miz C'hwevrer : 0,75  
Miz Here : 1,27

Devezh dourekañ ar bloaz a zo bet, e Plougoussant, ar 17 a viz Du, gant 47 mm dour, ar pezh a ra kazi ar bemzekvedenn eus glaveier ar bloaz, hag ar 14 a viz Eost gant 21 mm. Hervez ar pezh am eus notennet evit Lannuon e seblant bezañ bet kemm bras etre an daou lec'h, en daou devezh glav-se. Ne gouezhas e Lannuon, d'ar 17 a viz Du, nemet nebeut a c'hlav, an

devezh dourekañ er miz-se o vezañ bet moarvat ar 15. Ha ma vo ivez ur barr-arne d'ar 14 a viz Eost, ne gouezhas nemet nebeudik a c'hlav en deiz-se. Gouzout a reer e c'hell bezañ kalz a gemm eus un eil lec'h d'egile pa vez arne. Evel m'hen diskouezas ar barr spontus a zraillhas an trevadou hag a reas kalz droug d'an 8 a viz Eost, e tro Pempoull ha Lezardrefev.

## LA VOIE ROMAINE RENNES-CARHAIX

(Kendalc'h eus ar bajenn 29)

### DA GLOZAN

Forzh pegen hir ma'z eo an danevell-mañ ez eo dav deomp notañ e vije bet gwelloc'h evit ul labour-istor evel hini J.Y.E. skrivañ KERRA hepken e-lec'h Pont-Kerra (gwel. luc'hskeudenn paj. 42), rak nevez a-walc'h ez eo ar Pont a zo uheloc'h eget ar Roudouz hec'h-unan. Un istor en deus ar Pont-se hag a vo kontet, pa vo embannet Istor Plouvael. Skrivet e veze K/ra er skridoù kozh. Met kement-se n'eo ket ur gwall-afar n'eus forzh penaos.

Evit pezh a sell ouzh Loudieg e seblant labour J.Y.E. bezañ mat ivez. Pa ne deo ket bet studiet hent ar Gozh-Yoded d'an Naoned ez eo dises heuliañ diskleriadurioù an oberour war groazhent ar «Parpareu» (distagañ PARPAREU giz Gwened), met gantañ emañ ar wirionez moarvat, ha Parpareu a zo ur ger brezhonek.

Ar yezhourien o devefe a-walc'h o ger da lavarout war ziskleriadurioù an anvioù-lec'h gant an oberour. Lezomp se gant an Ispialourien. Reizhomp evelkent ar pezh a seblant deomp bezañ faziou. Evit Bretell (paj. 37), lenn «Britto(s)-ialos» kentoc'h eget «Britto-ialou». Ha neuze paj. 47, «Fundus Talenticum» : dav e vefe skrivañ «Fundus Talenticum», nemet moarvat en deus bet c'hoast ar skrivagner da virout ar stumm Talenticum, evel m'emañ en dielloù.

Souezhusat tra : e Plouvael, betek-hen, n'eus bet kavet seurt ebet o tennañ d'ar marevezh galian-roman : na diazoù-tiez, na teol, na brikennou, na monnez ! Neuze e chom c'hoast traoù da zizoleñ hep mar ebet.

Klery 47

### NOTENNOU

- 1 - Gwel. Barr-Heol, niv 80, 81
- 2 - Id. Niv 82, Gwengalo 1974, paj. 16
- 3 - Id. Niv 81, Mezheven 1974
- 4 - E Koednel hag e St Gouenoù emañ Kroaz-Ferrad (La Croix Perret)
- 5 - Gwel. B. Tanguy, Les Noms de lieux bretons, 1975, paj. 87 evit «Redu». Ezhomm a vefe avat, da studiañ hini ha hini an anvioù a gaver dindan ar ger-se. Ha pa ve ken, an anv Daourit e St Nikolaz-ar-Palem. Gwregel e seblant ar ger «Redu» bezañ e brezhoneg : cf Tairred (Tarret a-us), hag amañ ez eo gourel. Daoust hag an hevelep ger ez eo ?
- 6 - Sellout ouzh ar gortenn
- 7 - Skrivet : Fahéleu, distaget Fahéleu, er vro 8/9-Barr-Heol, niv 80
- 10 - E korn Pleuveur-Bodoù e kluar evelkent : Di-bâbel
- 11 - Cf Kembraeg : Tramwyo : tremen, denamo neañ, dont-ha-mant ; Tramwyfa : lec'h da dremen, h.a.
- 12 - E-kichen eno e oa abati Sant Ronan, war zour Lokronan.

N'ANKOUNAC'HAIT KET NEVEZIN HO KOUMANANT !

Strewit en-dro paperoù-bruderezh BARR-HEOL !

Roit Barr-Heol da anavezout d'ho mignoned ha d'ho kaneiled

## Ar yezhoù-pobl hag ar gwaskerezh-stad

Mat eo deomp lakaat hon evezh gant stourmoù ar pobloù-se a fell dezho mirout o yezhoù evit magañ nerzh-bevañ o sevenadurioù.

- Brud a zeu deomp a-garradoù eus Bro-Gebek diwar-benn stourmoù hag embregerezhioù gallegerien lodenn-viz Krec'h-Amerika, ha keleier mantrus a-berzh gallegerien Louisiana S.U.A. mouget o sevenadur gant ar Saoznegerien.

- Damdrec'h avat, ez eo tud Bro-Jura a zo deut a-benn da ziframmañ eus krabanoù germanegerien kanton Bern, al lodenn vrasañ eus o douaroù, d'ober ganto ur c'hanton a-ziforc'h hag emren.

- Kaset ez eus bet deomp doareoù diwar-benn stourmadegoù pobl traoñiennoù Aosta a zo en em unanet nevez 'zo gant paotred a-raok Emsav Bro-Savoia.

- Gant izili pempvet Kendalc'h «*Association Européenne de l'ETHNIE FRANÇAISE*» bodet e palez gouarnourien Aosta ez eus bet klasket meizañ ha diluziañ kudennoù ar yezhoù-pobl.

Setu amañ un toullad diskleriadurioù gant Aleksiz Betemps :

**Doaroù-ober an alouberien evit rediañ ar pobloù-suj da ober gant ar yezhoù-stad, ar yezhoù ofisiel :**

Tud ar pobloù bet aloubet o douaroù gant ar stadoù mac'hon, pa stourmont evit mirout bev o fersonelezh, a damaller dezho bezañ tud disuj ha c'hwezherien-dispac'h, gant o mistri.

**Meur a hent 'zo d'ar gwaskerezh-stad :**

Da gentañ holl ez eus tu da gempenn an dachenn dre ziforañ eus an dud dre lazhadegoù ; hennezh eo an doare eeunañ da ober. Seurt doareoù a zo bet graet ganto a-enep tud Okitania gant armeadoù ar C'hallaoued en amzer Albiziz, ha gant reoù ar Stad Spagnolet a-enep Euskadiz nevesoc'h 'zo.

Soutilloc'h doare ez eo lakaat lazhañ tud ar pobloù-suj e-kerz brezelioù diniver, gant an enebourien ar Stad : anat eo kement-se gant an niveradegoù diwar rolladoù ar soudarded chomet war an dachenn.

- Tud a zo da herzel groñs ouzh tud ar pobloù aloubet da dizhout renerzh uhel ar Stad : Pobl Euskadi a zo ur skouer er c'heñver-se.

- Tud a zo ivez da virout ouzh an ijinerzh hag ouzh al labouradegoù d'en em staliañ, dre lakaat an dud da vont da bell-vro da glask labour.

Diboblet eo bet lwerzhon, Bro-Skos, Breizh, ha meur a vro all gant an doareoù-ober-se. Lakaet e vez ivez an divroidi da boblañ, evit mad o mistri, douaroù bet aloubet nevez 'zo gant ar re-mañ.

Nag a Vretoned, nag a Elzasis, nag a Euskariz, nag a Gorsikiz a zo bet kaset en doare-mañ da seveniñ labour-trevadennañ ar C'hallaoued, da Vroioù Afrika, Amerika, Azia.

- Gant lec'hid an lstor-Gaou e labezer speredoù an dud aloubet, dre guzhat mik outo darvoudoù pennañ lstor o fobloù hag o broioù. Kement strujenn-hengoun o tiwanañ daoust da se a vez disteraet, displeberet ha lakaet e renk folkloraj mat d'ober diskouezadegoù da zidiñ touristed, ha da dremen evit istrogetel ar re a zalc'h d'ar seurt traoù-se.

- Staliañ kazarnioù soudarded ha polised, aloubiñ douaroù ec'hon da ober ganto tachennoù-pleustradegoù evit tud an armeadoù-se a zo gwarant an urzhiadur-gwaskañ hirbad.

- Kraouiet e vez bugale ar pobloù trec'het, e skolioù, da zroukstummañ o speredoù gant soñjoù ha menozioù an alouberien. Ha ret-mat d'ar vugale-se degemer ha studiañ da vat yezh gwaskerien o fobl evit donet da vezañ chas doñv gant o mistri. Dilennet e vezont da vont uheloc'h pe da chom izeloc'h e skeul ar micherioù-pemdez, hervez an anaoudegezh eus ar yezh-stad tizhet ganto.

- Komprenet-mat o deus renerien kement stad vac'hon a zo, e chom ar yezhoù-pobl ar c'hlovedoù nemeto, klovedoù distar ha bresk, met klovedoù evelkent, o virout ouzh ar vistri da vezañ mistri diharz war gement tachennoù-vuhez a zo : buhez an dud a-hiniñnoù pe o buhez dre vras.

Setu perak e vez dalc'himat kement a vall, kement a youl, gant an alouberien da ledanaat, da frankaat tachennoù ar yezh-stad betek harzoù pellañ an holl zouaroù en o dalc'h.

...Damzigor e van hent o dieubidigezh gant ar pobloù-suj keit ha ma vez maget o c'halonnoù hag o speredoù gant mammenn o vev naturel. Setu perak e stourm kement

an alouberien ouzh ar yezhoù-pobl.

Tu a zo da lakaat berz-mort (!) war ar yezhoù-pobl, da lavarout eo difenn groñs ober ganto, met neuze e sav trouz hag enebiezh, ha difur ez eo eta ober gant ar seurt-doareoù, pa fell d'ar renerien derc'hel d'o brud vat ha da luf o sevenadur dre ar bed.

Gwelloc'h eo kalz evito, kuzh dindan ur minc'hoarzh, ar gwaskerezh, ha diskleriañ da gement hini a c'houlenn keloù «*te toujer d'ar yezhoù bihan*» hag «*o deus ar pobloù pep frankiz ha pep aotre da ober ga. to kement ha ma karont*». Ar pezh a dalvez kement ha lavarout diwar-benn un den hag a zo o tuiñ gant an naon «n'eus lezenn ebet o virout outañ da vogañ e gorf», hag-ef e gorf aet d'ur sac'had-eskern, hag e keint-se diwall mat da reiñ an disterañ boued dezhañ. Ar frankiz a zo gant an den-mañ ez eo bezañ kaset d'an toull-bez gant an Ankoù ! Setu an hent nemetañ kinniget d'ar pobloù-suj gant an alouberien.

Kalz hiroc'h ha fetisoc'h eo danevell Aleskiz Betemps, he berraet hon eus, betek re marteze... hag he lakaet diouzh livioù hor spered ha doareoù hor meiz. Da lenn ar studiadenn-mañ war he hed goulenit «*Le Flambeau*», kelouenn bennañ stourmerien Aosta, dre hanterouriezh «*Emglev an Tiegezhioù*», 30, Leurgêr al Lisoù, 35000 Roazhon.

### NOTENN

1 - Disanav eo deomp an dro-lavar-se. *Marteze* hon eus lennet fall an darnskrid.

### BARR HEOL

**BARR-HEOL** Lezel a reomp ar c'houmanantoù er briz kozh : 30,00. A-boan koll-gonid ! Arabat gortoz evit paeañ e adkoumanant ; rak ur c'holl-amzer, ur c'holl-arc'hant hag ur c'holl-skiant ez eo kas lizheroù da zegas da soñj d'an dilerc'herien n'o devez ket degaset gwerzh o adkoumanant.

Trugarez d'hol lennarien feal, ha trugarez ivez d'ar re a ra bruderezh evit ar gelaouenn.

## Mont da Vro-Saoz gant un trañch

Pa oan kure e Ploubêr, e-kerz ar goañv 1943-1944, e oa bet roet urzh d'an holl baotred da vont da gostez Rospez da ziskar kleuzioù hed-ha-hed hent bras Landreger. Me, evel just, a oa bet merket da vont ivez.

Me ne oa benveg ebet ganin. Ha me di Jean J., marichal e Lann-Bloubêr : «*Ya ! ya ! Aotrou Kure, me 'ray deoc'h un trañch, unan skañv hag aezet*». Ha graet an taol. Un trañch skañv, troadet-mat, ar varvenn anezhi ken lemm hag un aotenn...

Ma l Da Vro-Saoz e voen kaset. Met n'am boa ket ezhomm da dreuziñ ar mor, rak Bro-Saoz, mar plij, a zo ur c'harter eus... Rospez. (Abaoe ez on bet dre eno o klask war-lerc'h roudoù an hent kozh Roma a dremene gwechall dre eno, met, evel 'ouzoc'h, gant an adlodennañ, ne chom mui seurt da gaout). Yen e oa an amzer, hag e ranke ar baotred labourat, en desped dezho, pe chom eno da lonkañ avel ha da baourenteziñ gant ar riv... Me 'veze ordin, ur bern karamadoù en-dro, rak kartennet e oa ar butun, ha peogwir na vutunen ket va-unan, e talc'he ar baotred tost din-me, evel just, da sikour difoarañ eus va butun !

Va zrañch avat, ne skrappe ket nemeur an douar, rak chom a raen souchet a-drek ar c'hleuzioù muiañ ma c'hellen, d'an em ziwall diouzh an avel rip a c'hwezhe eus kostez ar sav-heol. Met pa veze ezhomm da droc'hañ ur bod bennak a vezen prest, rak evel un aotenn e troc'he va benveg ! Mat e oa evit tammoù brankoù, met setu unan bennak eus ar re a oa en-dro din o c'houlenn va zrañch diganin, ken alies gwech ha m'en deveze ur brank tev da droc'hañ... C'hwi 'gompreñ diouzhtu ne c'helle ket an traoù padout pell er sturmm-se. Ha setu ma zammig trañch dallet ha brechet hag aet zoken war an tu gin.

Ha just d'ar c'houlz-se a tramené ar serjant alaman, unan hag a vije kement ma oa bet lesanvet ganeomp «*ar Blejers*» pe «*an Ankoù*». Hennezh a huc'e a-bouez e benn war ar baotred pa velle anezho o tigeinañ un tamm ! «*Sabotaj ! Sabotaj !*». Met redek mat a rae, ha moravat ne det ket dic'hañset dezhañ evel ar soudarded all a oa gantañ o tavshaat ac'hanomp, lezel darn eus bizied e draid, er Rusl. Ma l pa velas ac'hanon gant va zrañch mat da netra, e tirollas da c'hoarziñ : «*Pastor, emezañ,*



*Museum I».* Ar re a gomprenne alamaneg a adlavaras din e brezhoneg : «*Laret en deus deoc'h e oa mat ho trañch da vont d'ar Muze I».*

Jean J. a reas din un trañch ponneroc'h ha gwelloc'h, ha dirennet mat adarre. Ober a rae al labour-se din evit mann 'met ur bennozh Doue. Met komprenet am boa, ma oa mat din reiñ butun ('keit ha ma pade) e oa ret diwall da brestañ va binvioù da n'eus forzh piv... Met traoù all am boa desket c'hoazh. Da gentañ, daou c'her brezhonek ha n'em eus ket ankouaet abaoe : «*divachañ*» ha «*panezenn ur wezenn*». Desket em boa ivez e ranker labourat gant binvioù dirennet eus ar gwellañ.

Ha pa welan va c'hristenien o vont da heul gizioù ar bed, e komprenan n'eo ket dirennet mat a-walc'h o feiz, pa zlefenet kaout ur feiz kant gwech gwelloc'h dirennet eget gwechall, ya, dirennet ha trempet eus ar gwellañ evit stourm ouzh ar bed kalet leun a zizurzh hag a bornografiez evel m'eo ar bed a hiziv. Ha marichaled akuit, dirennerien ampart e tlefe bezañ an tadoù, ar mammoù, ar veleien, ha kement hini a zo karget da stummañ spered ha kalon ar yaouankiz.

(Gwe. Koulmig ar Gindi, 19, a viz Here 1975)

*Divachañ* : o zo trañch hañ ar brankoù «divorret» d'ober fagod  
*Panezenn* : eo pennwizlenn ur wezenn

#### EMBANNADURIOU AL LIAMM

Nevez deuet er-maez

##### MARI VORGAN

romant

gant *Roparz Hemon*

Priz : 22,00 lur

War Ingres niverennet : 32,00 lur

\*\*\*

##### VA ZAMMIG BUHEZ

efivorannoù

gant *Jaril Priel*

Priz : 24,00 lur

War Ingres niverennet : 34,00 lur

#### NEVEZ DEUET ER-MAEZ TANGI MALMANCHE GURVAN AR MARC'HEG ESTRANJOUR pezh c'hoari

#### LANGLEIZ ROMANT AR ROUE ARZHUR

Ul levr a vent vras (19 x 23) - 208 pajenn  
Lizherennoù-tal ha golo treset gant an oberour

Priz ..... 36,00 lur  
War baper kaer ..... 42,00 lur

#### TUDUAL HUON FRI KORLOKO (bannoù treset)

Priz ..... 13,00 lur

#### YOUENN OLIER AN DEIZ-HA-BLOAZ

(180 pajenn) - Danevellou

War baper boutin ..... 28,00 lur  
War baper-kaer ..... 30,00 lur

chomlec'h :  
Dell J. KEILHE, 47, Ru an Itron-Varia  
22200 GWENGAMP  
K.R.P. 1136-82 ROAZHON

#### LEVRIOU BREZHONEK

Levrioù brezhonek kozh ha nevez a c'heller prenañ  
e ti Giraudon - 30, straed Kerampont

LANNUON

Pellgomz : 35 04 90

#### WANIG HA WENIG

kalioùenn deouziatiek evit ar vugale

Priz an niverenn : 1,50 lur

Koumanant : 10 lur

Karakoret 29249 GWISENI

K.R.P. Roudoret 2 943 51 U-Roazhon

## Ul levr-kegin e Brezhoneg

Abaoe un 12 pe 13 vloaz 'zo e kaver e **Barr-Heol** pennadoù diwar-benn an doare da ober kegin.

Gant Soaz an Tieg eo bet savet an darn-vrasañ anezho, ha seju m'he deus kavet mat ober ul levrig ganto ha gant meur a hini all embannet gwechall e kelaouennoù brezhonek.

Al levrig-se, ment 21 x 13,5 a zo embannet evel stagadenn da Varr-Heol :

Priz al levr : 15 lur

### EMBANNADURIOU BARR-HEOL

1	Levrioù ordinaloù ar sulioù hag ar gouelioù (A.B.C.)	18,00 lur
	pezh c'hoari	50,00
	pezh war un dro	50,00
2	Levrioù oferenn — Azvent - Epifaniaz	11,00
	Koraiz - Sizhunvezh santel	11,00
	Amzer Fask	11,00
	o-zri war un dro	30,00
3	Sennadennoù pemdezic (Peder levrenn e pep hini) pep bloavezhiañ	25,00
4	Ritual ar Briedelezh (klok, liesskrivet)	6,50
5	Ritual ar Vadeziant (offset)	5,50
6	Pedennoù ar sulioù ordinal (liesskrivet)	5,00
7	Levr-oferenenn evit Gouelioù ar Sent (a-hed ar bloaz) (liesskrivet brav, ment 22x29) 166 paj.	25,00
	gant un nebeut oferennoù a zevostion (Treinded santel, Sakramant an Aoter, Jezuz-Krist beleg, Kalon Jezuz, Unaniezh ar Gristenien, Misionoù, Peoc'h, Klaffvourien, oferenenn a anaoudegezh vat, h.a.) hag ur geriadurig latin-brezhonek !	

#### EMBANNADURIOU ALL

Un nebeut skouerennoù a chom c'hoazh eus :

Otello, Seurez Kerwenan, Aviel sant Lukaz, Mervel evit bevañ... pep hini ..... 12,00

Merkit war ho chekenn-bost ar pezh a vennit hag e viot servijet kerkent hep mizoù all.

## Koumanant da Varr-Heol

Koumanant ordinal	30,00
Broioù estren	32,50
Studieren	25,00

K.R.P. 245 453 ROAZHON

Imprimeur : Copie 22 Pédernec - Moulter : an nozroù Gall, person Pédernec

Directeur de la publication : M. Le Clerc, Buhulien 22 Lannion, Gêrant.

Rannar ar gelaouenn : an nozroù Klerg, person Bullen, 22 Lannuon

Périodikenn enregistret à la commission P.P.P. n° 10, le N° 29 746

Computatus in lingua Brittonica editi - Revuo kvaronjara en lingvo bretona

A. DUVAL

# Itron Varia Vreizh

*Itron Varia Vreizh karet  
Mirit ar Feiz d'ho Pretoned  
Ha grit ma kavo pep hini  
Labour ha bara'n hor Bro-ni.  
Breizh a c'houzañv, Mamm druezus,  
Bezit 'vidomp madelezhus.*

*Itron Varia Vreizh karet,  
Ha bez'zo bro all war ar bed  
Ken stank enni an nevedoù  
'Vel m'eo 'n hor Bro ho chapelioù ?  
Ha Breizh a gan, ha Breizh a bed,  
A-greiz kalon, o Mamm garet.*

*Hag-eñ eo reizh, Gwerc'hez santel  
Gwelout ar vamm 'komz d'he bugel  
Ar yezh estren : yezh ar mac'her  
Ha dilezel he yezh ken kaer ?  
Ur vezh eo dimp, Gwerc'hez Vari,  
Ar bed a ra goap d'chimp-ni.*

*O mamm garet, ni a zo skuizh  
'Welout o tec'hel hor Broiz,  
Hor bugale 'vont a bep tu  
Da c'honit bara en harlu.  
Ha Breizh a ouel, ha Breizh a glemm  
Sec'hit an daeroù war he dremm.*


*Larit din, Gwerc'hez venniget,  
Ha bez'zo bro all er bed  
Nac'het outi yezh he zadoù,  
Ha bugale estren 'n o Bro ?  
Breizhiz a c'harm hag a hirvoud,  
Hon dieubit eus seurt darvoud.*

*O Mamm garet, ni a zo truez,  
Breizh 'fell dezhañ 'n he yezh,  
Ni 'fell dimp ken eus chapelioù  
Er yezh a gan d'he zadoù,  
E pep pardon, Gwerc'hez Vari,  
Da heul pep krouadur ha pep banniel*


Sonerezh gant Soazig Noblet  
Goulenn ar bladenn el levrduoù



1 I - tron Varia Vreizh kare - t Mi - rit ar Feiz d'ho



pre - to - ned Ha grit ma kavo pep hini la -



bour ha bara 'n hor bro ni . Breizh a c'houzañv



Mamm druezus Bezit 'vidomp ma -



de - lezhus. Bezit 'vidomp made - le - zhus.